

LEVR-OFERENN

EVIT AMZER-BASK

Evit ma vo azeulet Doue
ha santelaet hor pobl
dre ar Brezhoneg.

Stagadenn da VARR-HEOL

niv.72 Pask 1972

TAOLENN

NOZ FASK.....	paj. 1.
SUL-FASK.....	" " 10
Sizhunvezh en Eizved Pask.....	" " 11-27
SUL AR C'HAZIMODO pe Eil Sul Amzer Bask.....	" " 27
Eil Sizhunvezh Goude Pask.....	" " 28-46
TREDE SUL AMZER BASK.....	" " 46
3 ^e Sizhunvezh Goude Pask.....	" " 47-62
PEVARE SUL AMZER-BASK.....	" " 62
4 ^{vet} Sizhunvezh Goude Pask.....	" " 63-74
PEMPET SUL AMZER-BASK.....	" " 74
Pempet Sizhunvezh Goude Pask.....	" " 75-85
6 ^{vet} SUL AMZER-BASK.....	" " 86
6 ^{vet} Sizhunvezh Goude Pask.....	" " 87-92
YAOU BASK.....	" " 92-94
Gwener ha Sadorz Goude Yaou-Bask.....	" " 94-98
7 ^{vet} SUL AMZER BASK (Sul Goude Yaou-Bask).....	" " 98
7 ^{vet} Sizhunvezh Goude Pask.....	" " 99-110
SADORZ AR PANTEKOST (mintin).....	" " 110-112
PANTEKOST (Dfezenn ar Sadorz da Noz).....	" " 111
SUL AR PANTEKOST.....	" " 113

STAGADENNIG

GOUEL AN DREINDED SANTEL.....	" " 115
GOUEL AR SAKRAMANT.....	" " 115
GOUEL KALON JEZUZ.....	" " 116

TAOLIT EVEZH I

Evit ober gant al levr-mañ e ranker kaout ivez al LEKSIONALOU diciozh se hag e gemm hervez ar Bloevvezhioù: A.B.C. d'ar suliou goude Pask. Dfisoù NOZ-FASK, SUL-FASK, YAOU-BASK, PANTEKOST ne gemmont ket hag a servij bep bloaz. Al Lennadennoù evit ar re-mañ a vo kavet e LEKSIONAL SULLIOU AR C'HODRAIZ HA SUL FASK Barr-Heol Niv.63, Meurzh 1970 - evit Noz-Fask ha Sul-Fask, 39 sq.
LEKSIONAL 2: Suliou-Pask, Suliou Ordinal ha Gouelioù-Berz :Barr-Heol nib niv. 64, evit Yaou-Bask, paj.14sq, hag evit ar Pantekost paj.19 sq.
Evit ar Suliou all, ober eta gant al LEKSIONALOU B,C,A gwelout war bajenn diwezhañ al levr-ofereñ-mañ roll al Leksionaloù hag o friz.
War ar pemdez avat, e kavet kavet pep tra el Levr-Ofereñ-mañ : kan-digerif, Kempedennoù, Lennadennoù.

A.M.D.G.

+

NOZVEZH FASK
(pe)
NOZVEILH FASK

Urzh an nozvezh:

1. - Lid an Tan hag ar Goulou.
Prosesion ha kan an Eksultet.
2. - Lid ar Gouz Santel.
3. - Oferenn deraouet dre ar CLORIA IN EXCELSIS.
4. - Lidoù an Dour Santel.
5. - Lidoù an Eukaristiezh.

-o-o-o-o-o-o-

LID AN TAN HAG AR GOULOU

=====

Ar Beleg a salud ar bobl hag a lavar kement-mañ pe gomzoù heñvel :

Va breudeur muiañ-karet,
En noz santel-mañ e tremenas Hor Salver eus ar Marv d'ar Vuhez, hag emañ an Iliz, dre bevar c'horn ar bed, o pedif he bugale d'en em vodañ evit beilhal ha pedif.
Gromp eta gant devoision Gouel Pask Hor Salver Jezus en ur selaou gant evezh komzoù Doue, hag en ur lidañ gant foiz Mister Jezus o vorvel hag o sevel a varv da vev evidomp, ha neuze e vimp sur da gaout lod en e drec'h glorius war ar marv ha da vevañ gantañ e Doue.

Bennigañ an Tan. (Evit abegoù mat e c'hell al lid-mañ bezañ lezet a-gostez).

Pedomp!

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus dre Ho Mab hag a zo sklerijenn ar bed, roet d'ho tud fidel tan ho sklerijenn, plijet ganeoc'h bennigañ an tan nevez-mañ, ha roit dimp ar c'hras, e-pad ar Gouelioù-Pask-mañ, da vevañ en-tanet gant c'hoantoù ken bras d'ar Baradoz, ma c'hellimp erruout gant eneoù pur e gouelioù ar sklerijenn beurbadus.

Dre Jezuz-Krist, Hor Salver.

V/ Amen!

Gouloù-Pask.

A - Diouzh doare ar bobl a vo en ofis e vo gallet bennigañ ar gouloù-Pask evel-hen en ur ober an arouezioù merket evit-se hag en ur lavarout ar c'homzoù da heul:

1. An Aotrou Krist dec'h hag hiziv,
2. Ar penn-kentañ hag ar penn diwezhañ,
3. An Alfa hag an Omega,
4. Deshañ an holl amerioù,
5. Hag ar c'hantvedoù,
6. Deshañ Gload ha Galloud,
7. A-holl-viskoazh da virviken. Amen.

B - Ma'z implijer greun-ezañs:

1. Dre e C'houlloù Santel,
2. Glorius,
3. Ra hon diwallo
4. Ha ra hor miro
5. Jezuz-Krist. Amen.

Enaouñ a reer ar Gouloù-Pask ouzh an Tan nevez.

Sklerijenn an Aotrou Krist o sevel glorius a varv da vev, ra skarzho kuit an deñvalijenn eus hor c'halon hag eus hor spered.

PROSESION

- Sklerijenn an Aotrou Krist (3 gwech).

R/ Bennozh da Zoue.

EXSULTET (Meuleudioù Pask)

Bennozh d'an Diagon: Ra vo an Aotrou Doue en ho kalon hag en ho kenon ma c'hellot embann evel ma'z eo dleet Meuleudioù Pask, en anv an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel.

Tridit gant al levenez, c'hwi Aelez diniver, tridit ivez, c'hwi servijerion Dous!
Kanit d'an eur c'hlorius-mañ pa dreñc'h hor Roue bras war ar marv!
Ha te, hon Douar, bez evurus ivez, te sklerijennet gant ur splann-der ken lugernus,
rak warnout-te e par sked dispar da Salver, hag e Rouantelezh he deus kaset kuit an deñvalijenn.

Bez el levenez, te ivez, hor Mamm Santel, an Iliz, gwisket ma'z out gant kaerder skedus da Zasprenner. Klev o tregerniñ hag o tis-tonañ al lec'h santel-mañ gant kantikoù laouen Pobl da Vugale.

G/ An Aotrou Doue ganeoc'h!	V/ Ha gant ho spered!
G/ Savomp hor c'halonoù!	V/ Troet int war-zu Doue!
G/ Lavaromp bennozh d'an Aotrou hon Doue!	V/ Just ha santel eo!

E gwirionez, un dra just ha dleet eo kanañ a-greiz kalon d'an Aotrou Doue, an Tad hollc'halloudek, an Doue na weler ket ha d'e Vab Unganet, Jezuz-Krist, hor Salver.

En eo en deus paeet da Justis an Tad Peurbadel an dle tennet warnomp gant pec'hed Adam. En eo en deus skuilhet e wad dre garantez da zilemel kuit ar pec'hed kentañ.

Setu Gouelioù Pask, ar Gouelioù m'eo bet lakaet d'ar Marv an Oan gwirion, hag ar Gwad anezhañ a santela dorjoù an dud fidel.

Homañ eo an noz ma voe tennet Bugale Israel, hon Tadoù, eus douar an Ejipt ha ma voe graet dezho treuziñ ar Mor-Ruz war ar sec'h.

Homañ eo an noz ma teuas sklerder ar pilierad-tan da argas kuit teñvalijenn ar pec'hed.

Homañ eo an noz a denn eus ar bed kollet ha dallet gant an droug, ar re o deus lakaet o feiz e Jezuz-Krist, a rent dezho ar c'hras hag a ra dezho kaout perzh er santelezh.

Homañ eo an noz ma savas hor Salver eus ar bez goude bezañ torret liammoù ar Marv hag an Ifern.

O kaerat gras! O kaerat madelezh! O kaerat karantez eus ho perzh, Aotrou Doue, p'hoc'h eus roet ho Mab d'ar Marv evit salviñ ar servijer.

O pec'hed hag a oa ezomm anezhañ, pec'hed Adam bet distrujet gant Marv an Aotrou Krist. Ya! pec'hed evurus en deus talvezet dimp ur seurt Salver ha Zasprenner.

An nozvezh santel-mañ a gas kuit ar gwalloberoù, a walc'h ar pec'hedoù hag a rent ar santelezh d'ar bec'herion hag al levenez d'an dud glac'haret.

O nozvezh evurus ma teu an Neñv hag an Douar d'en em unaniñ ha Doue da dostaat ouzh an Den!

E gras an nozvezh-mañ, plijet ganeoc'h, Tad Santel, degemer, evel sakrifis an abardaer-noz, flamm ar gouloù-koar-mañ, savet diwar labour ar gwenan, hag emañ an Iliz o kinnig deoc'h dre zaouarn he ministred.

Permetit, eta, Aotrou Doue, ma talc'ho ar Gouloù-Pask-mañ, bet kensakret d'hoc'h anv, da lugerniñ hep ehan da skarzhañ kuit teñvalijenn an noz-mañ. Ra vo plijus dirak ho taoulagad ha ma vesko e sklerijenn gant sked ar stered. Ra vo bepred o teviñ pa savo Astr ar Mintin, an Astr-ec ha ne da ket da guzh, beznezh, an Aotrou Krist bet savet a varv da vev eus Bro an Annon evit skulhañ war an dud e sklerijenn hag e beoc'h.

Plijet eta ganeoc'h, Aotrou Doue, ober dimp tañva joa ha levenez Gouelioù Santel Pask. Roit d'ar bed-holl peoc'h hag evurusted, e feiz ho Mab suiañ-karet hag en e garantez. En a zo savet a varv da vev evi-domp hag a vev ganeoc'h ha gant ar Spered-Olan a-holl-viskoazh da virviken.

V/ AMEN.

LID AR GONZ SANTEL

=====

En nozvezh-mañ ez eus 9 lennadenn : 7 eus an Testamant kozh ha 2 eus an Testamant Nevez.

Evit abegoù a bastorelesh, mar kaver mat lezel meur a hini anezho a-gostez, e tleer evelkent lenn 2 da nebeutañ eus an TESTAMANT KOZH, hag en o zouez hini Treizhadeg ar Mor-Ruz. (Erm. XIV).

ALI A-BERZH AR BELEG.

Va Breudeur ker,

Setu ni boulc'het ganimp Nozvezh Santel Fask; selaouomp eta bre-mañ gant ur galon leun a beoc'h, Komz Santel an Aotrou Doue. Dalc'homp soñj penaos en em gemeras an Aotrou Doue en amzer gozh evit salviñ e bobl, hag en amzer-mañ pa zegasas dimp e Vab evel Salver. Goulennomp eta digant hon Doue lakaat Mister Fask da zougen e holl frouezh a silvidigezh.

LENNADENNOU : Leksional 1 (Barr-heol Iiv. 63).

(Ne lakomp amañ nemet lod eus ar c'hempedennoù da lavarout war-lerc'h al Lennadenn 1, al Lennadenn 2 hag al Lennadenn 3)

LENNADENN I

"Un digarez da drugarekaat Doue d'hor bezañ krouet ha da c'hou-lenn ar c'hras d'e servijiñ ervat."

PEDOMP! Stouomp holl d'an daoulin! Savit!

- Aotrou Doue, krouet hoc'h eus an den en un doare bur-zhudus hag hen dasprenet en un doare burzhudusoc'h c'hoazh, plijet ganeoc'h reiñ dimp ar c'hras da vezañ kreñv a spered hag a skiant, evit derec'hel penn ouzh sacherezh ar pec'hed ha meri-tout evel-se en em gaout er joaioù peurbadus. Dre Jezuz-Krist, hon Aotrou. V/ AMEN!

LENNADENN II (Sakrifis Abraham)

PEDOMP! Stouomp holl d'an daoulin! Savit!

- Aotrou Doue, Tad an holl dud fidel, en ur skuilh ho kras a ra ho pugale gant an dud, e lakit da greskiñ evel-se Bugale ar Bromesa dre an douar a-bezh, ha dre Vister Fask e lakit ho servijer Abraham da vezañ Tad an holl bobloù, evel m'ho poa prometet; roit eta d'ho pobl ar c'hras da respont evel ma'z eo dleet d'ho kalvadenn. Dre Jezuz-Krist hon Aotrou. V/ AMEN!

LENNADENN III (Israeliz o treuziñ ar Mor-Ruz)

"Ar pezh en devoa graet an Aotrou Doue evit Pobl Israel a zo eta ur skeudenn eus ar Vadeziant. Goulennomp gras ar Vadeziant evit holl dud ar bed".

PEDOMP! Stouomp holl d'an daoulin! Savit!

- Aotrou Doue, en hon deizioù-ni zoken e welomp o skedif an traoù burzhudus ho poa graet gwechall, rak e gwirionez, ar pezh ho poa graet e-keñver ur bobl hepken ouzh hen diframmañ eus dorn Faraon, roue an Ejipt, gant ho kalloud bras, hen ober a rit bremañ c'hoazh, evit silvidigezh an holl bobloù ouzh o gwalc'hif gant Dour ar Vadeziant, evit reiñ dezho ur vuhez nevez, plijet eta ganeoc'h reiñ da holl dud ar bed-mañ ar c'hras da zonet da vezañ ivez bugale da Abraham ha da gaout lod e gloar Pobl Israel.

V/ AMEN!

A N O F E R E N N

=====

(Goude fin al lennadennoù ec'h enaouer gouleier an acter hag ar beleg a sav ton ar GLORIA IN EXCELSIS DEO).

KEMPEDENN:

Aotrou Doue, an noz santel-mañ hoc'h eus lakaet da lugerniñ gant gloar hor Salver e sevel d'ar vuhez, plijet ganeoc'h eta miret er gristenien nevez a zo bet ganet deoc'h ar spered a ra dezho bezañ ho pugale, ma c'hellint, nevesat a gorf hag a galon, bezañ gir servijerion deoc'h. Dre J. K....

LENNADENN Iañ

Alleluia + Salm

AVIEL + Homilienn verr

BENNIGAÑ AN DOUR-MEUR

(Mar bez bugale da vadeziñ, gervel o zud, gant o faeron hag o maeronez).

Ar Beleg: Emañ ar Beleg o vont da vennigañ an dour a servijo en noz-mañ da gentañ evit badeziñ unan eus bugale vihan ar barres-mañ hag ar vugale e-pad amzer-Bask. Met an dour-se a yelo

ganeoc'h ivez evit bennigañ ho ti ha degas da soñj deoc'h eus gras ho Padeziant santel. Unanomp eta hor pedennoù da bediñ holl Sent an Aotrou Doue dre al Litanioù.

(An dud a chom en o sav e-pad al Litanioù. Gallout a reer ivez lakaat e-touez an anvioù all anvioù Patron pe Batronez ar barrez.)

LITANIOÙ AR SEPT

Aotrou Doue, ho pet truez. (bis)	
Aotrou Krist, ho pet truez. (bis)	
Aotrou Doue, ho pet truez. (bis)	
Santez Mari, Mamm da Zoue	Pedit evidomp.
Aotrou Sant Mikael	"
Aeled Santel Doue	"
Aotrou Sant Yann-Vadezour	"
Aotrou Sant Jozef	"
Sant Per ha Sant Paol	"
Sant Andreu	"
Sant Yann Avielour	"
Itron Santez Anna	"
Santez Mari-Madalen	"
Sant Stefan	"
Sant Ignas Antiokia	"
Sant Laorañs	"
Santez Perpetua ha Santez Felisite	"
Santez Agnez	"
Sant Gregor	"
Sant Aogustin	"
Sant Atanaz	"
Sant Bazil	"
Sant Varzhin	"
Sant Benead	"
Sant Frañsez ha Sant Dominik	"
Sant Frañsez Zavier	"
Sant Erwan	"
Sant Yann-Vari Vianney	"
Santez Katell Sienna	"
Santez Tereza Avila	"
Holl Sent ha Santezed Doue	
Bezit ouzhip leun a druez	Hon diwallit, o Aotrou.
Diouzh pep droug	"
Diouzh pep pec'hed	"
Diouzh ar marv peurbadus	"
Dre Vister hoc'h Enzenadur Santel	"
(pe: Inkarnasion Santel)	"
Dre ho Marv hag hoc'h Adsav d'ar Vuhez	"
Dre Zonedigezh ar Spered Santel	"
Pec'herion ma'z omp	Mi ho ped, hor selaouit.

(Evit ma plijo ganeoc'h genel a-nevez dre c'hras ar Vadeziant ar bugel - ar vugale-mañ)

Ni ho ped, hor selaouit.

Jezuz, Mab an Doue bev
Aotrou Krist, hor selaouit. (bis)
Aotrou Krist, roit dimp hor goulemm.

(Bremañ e vez benniget an Dour-Meur)

Aotrou Doue, gant ho kalloud na weler ket e rit traoù burzhudus dre ho Sakramantoù; ha meur a wech en istor ar silvidigezh hoc'h eus implijet an dour krouet ganeoc'h, da reiñ da anaout en a-raok, Gras ar Vadeziant.

Aotrou Doue, adalek ar penn-kentañ eus ar bed, e nije ho Spered war an dour evit hadañ en dour-se ar galloud da reiñ santelezh.

Aotrou Doue, dre zourioù an Dio'hlan-Meur dirollet war ar bed hoc'h eus merket en a-raok ar Vadeziant a ra d'an dud bezañ ganet a-nevez, rak an dourioù-se a oa ur skeudenn eus ar marv d'ar pec'hed hag eus ar c'henedigezh d'ar vertuzioù.

Aotrou Doue, graet hoc'h eus da Vugale Abraham treuzif ar Mor-Ruz war ar sec'h, evit ma vije ar Bobl-se bet diframmet eus a sklavelezh Faraon, roue an Ejipt, ur skeudenn en a-raok eus Pobl ar re Vadezet.

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo bet ho Mab muiañ-karet badeset gant Yann e dour ar Jordan, hag e voe kensakret gant ar Spered Santel, hag a lezas, p'edo ouzh ar Groaz gwad ha dour da redek eus e gostez digor, hag a lavaras d'e ziskibien goude ma oa savet a varv da vev : " It , kelennit an holl bobloù, ouzh o badezif en anv an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel",

sellit gant karantez ouzh hoc'h Iliz, ha plijet ganeoc'h digeriñ eviti mammenn ar Vadeziant.

Ra gemero an dour-mañ dre nerzh ar Spered Santel gras ho Mab Unganet, evit ma c'hello an den bet krouet heñvel ouzhoc'h, bezañ gwalc'het gant ar Vadeziant eus an holl loustoni a vastar an heñvedigezh-se,

ha bezañ adganet eus an Dour hag eus ar Spered evit kaout buhez nevez Bugale Doue.

(Lakaat, mar kaver mat hen ober, ar Gouloù-Pask en dour ur wech pe deir gwech).

Ni ho ped, Aotrou Doue, ra ziskenno er feunteuniad dour-mañ, dre ho Mab, nerzh ha vertuz ar Spered Glan, ma c'hello kement hini a vo dre ar Vadeziant beziet a-unan gant hor Salver, adsevel d'ar vuhez a-unan gantañ.

Dre Hor Salver Jezus-Krist, ho Mab hag hon Aotrou. R/ AMEN.

(Neuze e tenner ar Gouloù eus an Dour-Meur hag e c'hell ar bobl kanañ kenant-mañ pe traoù all) :

Feunteunioù-dour, benniget an Aotrou,
Dezhañ glear ha meuleudi da viken.

(Neuze e vez graet ar Badeziantoù, mar bez Badeziantoù da ober)

NEVEZIÑ PROMESAOU AR VADEZIAN

(Goude ma vez bet benniget an dour, ha badezet an danvez - kristenien ma oa Badeziantoù da vezañ, e neveser promesaou ar Vadeziant. An dud a vez o goulaouenn-goar war-ensaoù ganto. Ar beleg a zigor dre ar c'homzoù-mañ pe gomzoù heñvel.) :

Va breudeur ker,

Dre Vister Pask, ez omp bet lakaet er bez a-unan gant an Aotrou Krist, dre ar Vadeziant, evit ma renfemp a-unan gantañ ur vuhez nevez. Setu perak bremañ pa'z eo echu amzer ar C'horaiz, greomp a-nevez promesaou hor Badeziant Santel. Gwechall hon eus lavaret treiñ kein da Satan ha d'e oberoù, ha prometet bezañ fidel da servijañ an Aotrou Doue, en Iliz Santel Katolik. Neuze! ta:

Ar beleg : Ha treiñ a rit-hu kein da Satan, d'e oberoù ha d'e holl vrasontoù ?

Ar bobl : Ya !

Ar beleg : Ha krediñ a rit e Doue an Tad hollc'halloudek krouer an neñv hag an douar ?

Ar bobl : Ya, krediñ a ran!

Ar beleg : Ha krediñ a rit e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet ganet eus ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet e Basion, a zo bet laketa er bez, a zo savet a varv da vev, hag a zo azezet en tu dehoù d'e Dad ?

Ar bobl : Ya, krediñ a ran!

Ar beleg : Ha krediñ a rit er Spered Santel, en Iliz Santel Katolik, e Komunion ar Sent, e Pardon ar pec'hedoù, en Adsav ar c'horfoù marv d'ar vuhez, hag er Vuhez peurbadus ?

Ar bobl : Ya, krediñ a ran!

Ar beleg da glozañ:

An Doue hollc'halloudek, Tad hor Salver Jezuz-Krist, hag en deus graet dimp bezañ adganet dre an Dour hag ar Spered Santel, hag en deus roet dimp ar pardon eus hor pec'hedoù, plijet gantañ hor mirout en e c'hras, e Jezuz-Krist, hon Aotrou, evit ar Vuhez peurbadus.

R/ AMEN.

(Neuze ar beleg a sparf an dour nevez war ar bobl, tra ma kaner) :

Gwelet em eus an dour o strinkañ eus an Templ, eus an tu dehoù, Alleluia!

ha kement den 'zo bet gwalc'het gant an dour-se a zo bet salvet hag a lavar: Alleluia! Alleluia! (Pe ur c'hantik diouzh se).

Neuze e kaser ar re nevez-vadezet d'o flas en iliz.

Ne lavarer ket a CREDO nemet e lavarer ar Bedenn evit ezhomm an Iliz (Pe: Pedenn ar Fideled).

LID AN EUKARISTIEZH (Evel kustum)

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, degemer ar pedennoù a ginnig ho pobl deoc'h a-unan gant he frofoù, ha peogwir o c'hinnigomp deoc'h er penn-kentañ eus Gouelioù Santel Pask, grit ma talvezint dimp, gant sikour ho kras, da zigeriñ dimp dor ar vuhez peurbadus. Dre H.S.J.K. ho Mab hag hon Aotrou.

PREFAS:

E gwirionez, Tad santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer, met dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi en nozvezh santel-mañ (EN DEIZ SANTEL-MAÑ) ma'z eo bet Jezuz-Krist, hon Oan-Pask lakaet d'ar marv evidomp. Rak eñ eo an Oan gwirion en deus dilamet pec'hed ar bed, en deus en ur adsevel eus ar bez roet dimp en-dro ar vuhez. Setu perak gant Gouelioù Santel Pask e trid ar bed a-bezh en ur mor a levenez, hag holl Speredoù galloudus an Heñvoù a gan meuleudi d'ho kloar en ur lavarout da viken:

SANTEL! SANTEL! SANTEL!...

PEDENN EUKARISTIEL: Mar bez implijet ar BEDENN VEUR I giz Roma, kemer Communicantes hag Hanc igitur a-ratozh.

ANTIFONENN AR KOMUNION: (1 Kor V, 7-8).

An Aotrou Krist, hon Oan-Pask, a zo bet kinniget e sakrifis, debromp eta bara hep goell al lealded hag ar wirionez. Alleluia.

GOUDE KOMUNIAÑ:

Skuilhit ennomp, Aotrou Doue, Spered Santel ho karantez, hag ar re hoc'h eus maget gant ar Sakramant-mañ e-kerz Gouelioù Santel Pask, grit ma vint unanet-mat etrezo a spered hag a galon. Dre Hor Salver Jezuz-Krist, ho Mab hag hon Aotrou.

ITE MISSA EST:

G/ It e peoc'h hor Salver, Alleluia! Alleluia!

R/ Bennozh da Zoue, Alleluia! Alleluia!

§ SUL PASK §

KAN-DIGERIN: (Salm 138, 18.5-6):

Me 'zo adsavet hag a zo ganeoc'h bepred: lakaet hoc'h eus ho torn warnon: burzhudus ez eo en em ziskouezet ho furnez. Alleluia.

PE:

Savet eo an Aotrou a varv da vev e gwirionez, alleluia. Dezhañ gloar ha galloud da virviken.

KEMPEDENI:

Aotrou Doue, da geñver an deiz-mañ, dre ho Mab Unganet o trec'hif war ar marv, hoc'h eus digoret dimp dor ar beurbadelezh, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, pa lidomp Gouel bras hor Salver o sevel a varv da vev, da vezañ nevesat gant ho Spered Santel ha da sevel ni ivez da sklerijenn ar gwir vuhez.

LENNADENOU-VICTIMAE PASCALI : gwel. LEKSIONAL.

WAR AR PROFOU:

E-kreiz levenez Gouelioù-Pask e kinnigomp deoc'h, Aotrou Doue, ar sakrifis a gav an Iliz drezañ buhez nevez ha bevañs. Dre H.S.J.K. ho Mab hag hon Aotrou.

PREFAS : gwelout paj. 9.

Communicantes hag Hanc igitur a-ratozh gant ar Bedenn I.

ANTIFONENN AR GOMUNION (1 Kor 5, 7-8):

An Aotrou Krist, hon Oan-Pask, a zo bet kinniget e sakrifis, debromp eta bara hep goell al lealded hag ar wirionez. Alleluia!

GOUDE KOMUNIAN:

Diwallit hep ehan hoc'h Iliz, Aotrou Doue, gant ho madelezh hag ho karantez, adnevesat eo bet gant Misterioù Pask, grit dezhi eta erruout e splander an Adsav d'ar vuhez. Dre H.S.J.K., ho Mab hag hon Aotrou.

ITE MISSA EST:

G/ It e peoc'h hor Salver, Alleluia! Alleluia!
R/ Bennozh da Zoue, Alleluia! Alleluia!

LEKSIONAL

WAR AR PERDEZ

- LUN PASK -

KAN-DIGERIN (Ern. 13, 5,9) : Doue en deus graet deoc'h antren en ur vro e-lec'h ma red al laezh hag ar mel evit ma vo Lezann Doue bepred en ho kenñ. Alleluia!

Pe: Savet eo Hor Salver a-douez ar re varv, evel m'en devoa lavaret: tridomp holl ha bezomp laouen rak o ren emañ evel roue da virviken. Alleluia!

Lavaret e vez ar GLORIA IN EXCELSIS DEO

KEMPEDENI:

Aotrou Doue, c'hwi hag a ra d'hoc'h Iliz kreskiñ hep pauez dre reiñ dezhi bugale nevez, plijet ganeoc'h reiñ d'ho servijerien ar c'hras da ziskouez dre o oberoù ar Sakramant o deus resevet dre ar Feiz. Dre Hor Salver Jezuz-Krist, ho Mab hag hon Aotrou, a vev hag a ren, Doue ganeoc'h ha gant ar Spered-Glan, a-holl-viskoazh da virviken.

ABOSTOL

Jezuz dasorc'hat gant Doue. Ni a zo testoù a gment-se, emc Sant Pêr.

LENNADENI TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBBSTEL (Ob. 2 14, 22-32)

- 14 Deiz ar Pantekost, Pêr en e sav gant an Unnek Abostol a savas e vouezh hag a lavaras:
- 22 " Gwazed Israel, selaouit ar c'homzou-mañ: Jezuz a Nazared, an den-se hag en deus Doue rost testeni a-du gantañ evidoc'h, dre oberoù galloudus, burzhudoù ha sinioù en deus Doue graet drezañ en ho touez, evel ma ouzoc'h hoc'h-unan,
- 23 hennezh hag a oa bet gwerzhet, hervez bolontez sklaer hag anaoudegezh Doue a-viskoazh, hen kemeret hoc'h eus hag hen lakaet d'ar marv ouzh hen stagañ ouzh ar Groaz dre zacuarn tud fall.

- 24 Met Doue en deus e adasavet a-douez ar re varv, ouzh e dennañ eus anken ar marv, rak ne c'helle ket ar marv hen derc'hel.
- 25 Rak David a lavar diwar e benn:
- Gwelout a raen bepred an Aotrou dirazon,
rak en tu dehoù din emañ, evit na vezin ket brallet.
- 26 En abeg da se ez eo en em laouenaet va c'halon, ha tridet en deus va zeod gant al levenez ha va c'horf e-unan a ziskuiizo ivez en esperañs,
- 27 rak ne lezot ket va ene e bro an Anaon, ha ne lezot ket ho Sant da welout ar vreinadurezh.
- 28 Graet hoc'h eus din anaout hent ar vuhez ha va leuniañ a reot a laouenidegezh dirak ho Pas.
- 29 Breudeur, permetet eo din lavarout deoc'h gant hardizhegezh kement-mañ. Evit pezh a sell ouzh ar Patriarc'h David, marvet eo bet ha sebeliet, hag emañ c'hoazh e vez en deiz a hiziv, en hon touez.
- 30 Met o vezañ ma oa profed, hag o c'houzout en devoa Doue touet dezhañ e lakje da azezañ war e dron unan eus e lignez,
- 31 gwelet en deus en a-raok, ha reot da c'houzout e teuje ar Mesiaz da sevel a varv da vev, pa lavar ne vije ket dilezet e bro an Anaon, ha na welje ket e gorf ar vreinadurezh.
- 32 Ar Jezuz-se, Doue en deus graet dezhañ sevel a varv da vev. Holl ez omp testoù a gement-se! "

SALM 15 (1-2a & 7-8, 9-10, 11)

R:(1) Va mirit, Aotrou Doue,
p'emañ va fiziañs ennoc'h.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Va mirit, o Doue, p'emañ va fiziañs ennoc'h
- 2a Lavaret em eus d'an Aotrou: Va Mestr ez oc'h!
- 5 Aotrou! c'hwi eo va lod-heritaj ha va c'haliriad
En ho torn emañ va flanedenn.
- 7 Bennozh d'an Aotrou en deus va c'huzuliet
Ya! e-kerz an noz e ro kentel d'am c'halon
- 8 Derc'hel a ran an Aotrou dirazon dalc'hmat
P'emañ en tu dehoù din, ne vrallin ket.
- 9 Setu perak ez eus levenez em c'halon, stad em ene
Va c'horf e-unan a ziskuiizo e peoc'h
- 10 Rak ne zilezot ket va ene e bro an Anaon
Ha ne reot ket d'ho mignon gwelout ar vreinadurezh.
- 11 Ober a reot din anaout hent ar vuhez.
An holl joaioù a zo ganeoc'h
Dudi ha levenez en tu dehoù deoc'h da virviken.

ALLELUIA: Alleluia!

Hemañ eo an deiz en deus graet an Aotrou
Deiz a joa hag a levenez.

Alleluia!

AVIEL

Jezuz en em ziskouez d'ar gwraez santel. Falsentez ar veleien.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT VAZHEV (28, 8-15)

- 8 En amzer-se, ar merc'hed o vont kuit, mall warno, diouzh ar bez, e-kreiz spont ha levenez vras, a yeas d'ar red da zegemenn ar c'heloù d'e ziskibien.
- 9 Ha setu, Jezuz a zeuas d'o diambroug hag a lavaraz dezho:
" Salud deoc'h! " hag int-i o tostaat a vriatas e dreid hag a stouas dirazañ.
- 10 Heuze e lavaraz Jezuz dezho:
" Na spontit ket. Kit da zegemenn d'am breudeur mont da C'halilea, hag eno am gwelint."
- 11 Tra m'edont o vont, setu darn eus ar c'hedourion a zeuas e kêr hag a zegemennas d'ar Veleion-Vras kement a oa c'hoarvezet.
- 12 Hag ar re-mañ goude bezañ en em vodet a-gevret gant ar Re Gozh, hag en em guzuliet ganto, a roas ur yalc'had vat a arc'hant d'ar soudarded,
- 13 en ur lavarout dezho: "Lavarit: E ziskibion a zo deuet en noz hag o deus laeret e gorf pa omp koussket.
- 14 Ha ma'z a an doare betek divskouarn ar Gouarnour, ni her gonezo hag a viro na gouezhfe bec'h warnoc'h."
- 15 Ar re-mañ a gemeras an arc'hant hag a reas evel ma cant bet kelenet. Ha redet he deus ar vrud-se e-touez ar Yusevion hag e red c'hoazh en deiz a hiziv.

WAR AR PROFOU:

Degereret gant karantez, ni ho ped, Aotrou Doue, profoù ho tud fidel, ha peogwir ez int bet ganet a-nevez dre ar Feiz ennoc'h ha dre Sakramant ar Vadeziant grit dezho gonit an evurusted peurbadel. Dre H.S.J.K. ho Mab hag hon Aotrou.

PREFAS PASK:

E gwirionez, Tad santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer, met dreist-holl ha gant brasoc'h mouleudi en deiz santel-mañ ma'z eo bet Jezuz-Krist, hon Oan-Pask, lakaet d'ar marv evidomp. Rak eñ eo an Oan gwirion en deus dilamet pec'hed ar bed, en deus en ur adsevel eus ar bez roet dimp en-dro ar vuhez. Setu perak gant Gouelioù Santel-Pask e trid ar bed a-bezh en ur mor a levenez, hag holl Speredoù galloudus an Neñvoù a gan mouleudi d'ho kloar en ur lavarout da viken:

SANTEL! SANTEL! SANTEL!...

PEDENI! EUKARISTIEL: Mar bez implijet ar PEDENI VEUR I giz Roma, kemer Communicantes hag Hanc igitur a-ratozh.

+ pe: en amzer santel-mañ.

ANTIFONENN AR KOMUNION (Rom. 6. 9)

Jezuz-Krist savet a varv da vev ne varv mui,
an Ankoù n'en deus ket a grog warnañ ken. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAN:

Diwallit bepred hoc'h Iliz, Aotrou Doue, gant ho karantez:
nevesaet hoc'h eus anezhi gant misterioù Pask,
grit eta ma c'hellout tizhout sklerijenn an Adsav d'ar vuhez.
Dre Hor Salver Jezuz-Krist, ho Mab hag hon Aotrou.

ITE MISSA EST:

It e peoc'h hor Salver, Alleluia! Alleluia!
Bennozh da Zoue! Alleluia! Alleluia!

- MEURZH FASK -

KAN-DIGERIN (Cf. Ben Sirac'h 15, 3-4):

An Aotrou en deus roet dezho dour da evañ, o c'hreñvaat
a raio ha ne blegint ket, hag o sevel a raio uhel -
meurbet. Alleluia!

GLORIA IN EXCELSIS

KEMPEDENN:

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus hor salvet dre vister Pask
dalc'hit eta karantez da reiñ sikour d'ar re a zo ho pobl,
ma c'hellint, goude bezañ resevet ar gwir frankiz tañva er baradoz
ar pezh a zo dija o levezeg war an douar.

LENNADENN 1añ

Pêr oc'h embann dasorc'h Hor Salver.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (Ob.2. 36-41)

Deiz ar Pantekost e lavare Pêr d'ar Yuzevion:

- 36 "Ra ouezo Ti Israel en un doare sur hag asur (diarvar) en deus
Doue graet Aotrou ha Krist ar Jezuz-se hoc'h eus c'hwi staget
ouzh ar Groaz."
- 37 O klevout se e voe broudet kalonoù an dud hag e lavarjont da
Bêr ha d'an Ebestel all:
"Breudeur! petra hon eus-ni da ober?"
- 38 Ha Pêr o respont dezho a lavaras: "Ho pet keuz, ha ra vo bade-
zet pep hini ac'hanoc'h en anv Jezuz-Krist evit kaout ar pardon
eus e bec'hedoù,
hag e resevet donezon ar Spered Santel.
- 39 Rak evidoc'h-c'hwi eo bet graet ar bromesa, hag ivez evit ho
pugale, hag evit ar re a zo pell, kement hini a vo galvet gant

- 40 an Aotrou, hon Doue."
Gant kalz a gomzoù all c'hoazh e pede start anezho hag o allie,
en ur lavarout:
"En em saveteit diouzh ar rummad fallakr-mañ."
- 41 Ar re eta hag a zegemeras a galen vat e brezegenn, a voe badezet;
hag en deiz-se war-dro tri mil den en em unanas gant an diskibion.

SALM 32 (4-4, 18-19, 20 & 22)

R:(5b) Gant karantez Doue eo leun an douar.

(pe) : ALLELUIA!

- 4 Beun eo komzoù an Aotrou
E holl labour a so lealded.
- 5 Karout a ra reizhdad ha justis
Gant karantez Doue eo leun an douar.
- 18 Setu lagad an Aotrou war ar re hen douj
War ar re a esper en e garantez.
- 19 Evit tennañ o ene eus ar marv
Hag o bevañ en amzer ar gervez.
- 20 Hon eneoù a c'hortoz an Aotrou
Hor skoazell hag hor skoed (DIFENHOUR) eo
- 22 Ra vezo ho trugarez (KRAS) Aotrou, warnomp
Peogvir hon eus esperet ennoc'h.

ALLELUIA: (Gwelout pajenn 12).

AVIEL

Jezuz en em ziskouez da Vari-Vadalen.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (20. 11-18)

- 11 Mari-Madalen a oa chomet e-tal ar bez er-maez o ouelañ. Hag e-kreiz
gouelañ e plegas da sellout er bez.
- 12 Hag e welas daou Ael gwisket e gwenn, azezet, unan ouzh ar penn hag
egile ouzñ an treid eus al lec'h ma oa bet lakaet korf Jezuz.
- 13 Hag e lavaras ar re-mañ dezhi:
"Maouez, perak emañ o ouelañ?"
Hag hi da respont dezho:
"Savet o deus va Aotrou kuit, ha n'ouzon ket e pelec'h o deus e
lakaet."
- 14 Goude bezañ lavaret kement-se, e tistroas hag e welas Jezuz en e sav
met ne ouie ket eo Jezuz e oa.
- 15 "Maouez, eme Jezuz dezhi, perak emañ o ouelañ? Piv emañ o klask?"
Hi, o soñjal ganti eo al liorzhour an hini e oa, a lavaras dezhañ:
"Aotrou, mar deo te ac'h eus e savet kuit, lavar din e pelec'h ac'h
eus e lakaet, ma'z in d'e gerc'hat."
- 16 Ha Jezuz da lavarout dezhi: "Mariam!" Hag hi da zistreiñ ha da lava-
rout dezhañ en hebreeg: "Rabbouni!" da lavarout eo: "Va Mestr!"
- 17 Lavarout a ra Jezuz dezhi:
"Paouez da zerc'hel mat din, rak ne don ket pignet c'hoazh davet va
Zad; met kae da gaout va breudeur ha lavar dezho: "Es an da bignal

18 davet ma Zad hag ho Tad, davet va Doue hag ho Toue." Ha mont a ra Mari-Madalen da zegemenn d'an diskibion he devoa gwelet an Aotrou hag en devoa lavaret an traoù-se dezhi.

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, degemer gant karantez profoù ho familh, ma c'hello, sikouret ha diwallet ganeoc'h, mirout hep koll anezho ar grasoù he deus resevet diganeoc'h, hag erruout betek ar madoù peurbadel.

ANTI-FONEHNN AR GOMUNION (Kol. 3. 1-2)

C'hwi a zo savet a varv da vev gant an Aotrou Krist, klaskit eta an traoù eus krec'h, e-lec'h m'emañ Jezuz-Krist azezet en tu dehoù da Zoue, troit ho karantez war-zu an traoù eus krec'h. Alleluia!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, selacu hor pedenn: peogwir hoc'h eus roet d'ho pугale gras kaer ar Vadeziant, kempennit eta o c'halonou en doare ma vint e stad da c'honit ar vuhez peurbadel.

- MERC'HER FASK -

KAN-DIGERLH (Mzh 25. 34): Deuit, tud benniget gant va Zad, ha degemerit en heritaj ar Rouantelezh a zo bet aozet evidoc'h abaoe ar penn-kentañ eus ar bed.

GLORIA IN EXCELSIS

KEMPEDENN:

Aotrou Doue, bep bloaz e roit dimp joa ha levezon gant Gouelioù hor Salver oc'h adsevel eus ar bez, plijet ganeoc'h eta en ho madelezh, reiñ dimp ar c'hras, dre vertuz ar Gouelioù a lidomp amañ war an douar, d'en em gaout un deiz er joaioù peurbadus.

LENNADENN 1añ

Pareañs den kamm an Nor-Gaer.

LENNADENN TEHNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (3. 1-10)

- 1 Pêr ha Yann a oa o pignat d'an Templ evit pedenn an navet eur.
- 2 Un den ganet-kamm a oad o tougen di.

- E lakaat a raed benneiz o-kichen an nor a zo war an Templ hag a veze graet anezhi an Nor-Gaer, evir goulenn an aluzon digant ar re a yae e-barzh an Templ.
- 3 Hemañ o welout Pêr ha Yann o vont da antren en Templ, a c'houlennas an aluzon diganto.
- 4 Pêr o vezañ taolet e sell warnañ, kerkoulz ha Yann, a lavaras: "Sell ouzhimp-ni."
- 5 Hemañ a zalc'he da sellout pizh outo, o c'hortoz kaout un dra bennak diganto.
- 6 Met Pêr a lavaras: "Aour hag arc'hant n'eus ket ganin, met ar pezh am eus a roan dit: En anv Jezuz-Krist a Lazared, sav ha kerzh!"
- 7 Hag o kregiñ onnañ dre e zorn dehoù o lakas anezhañ en e sav war an taol hag e teuas startijenn en e dreid hag en e ufernioù (ibilien e dreid).
- 8 En ul lamm e voe en e sav, hag ez eas ganto e-barzh an Templ, o vale, o lammat hag o veuliñ Doue.
- 9 Ar bobl a-bezh hen gwelas o vale hag o veuliñ Doue.
- 10 Gouzout mat a raent e oa hennezh an hini a veze o c'houlenn an aluzon dirak Dor-Gaer an Templ. Hag e voent leun a spont hag a souezh gant ar pezh a oa c'hoarvezet gantañ.

SALM 104 (1-2,3-4,6-7,8-9)

R:(5) Gant karantez Doue eo leun an douar.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Meulit an Aotrou, galvit e anv Embannit e-touez ar pobloù e oberoù-meur.
- 2 Kanit dezhañ, sonit dezhañ, Brudit e holl vuzhudoù.
- 3 Roit meuleudi d'e anv santel, Iaouen ra vezo kalonoù ar re a glask an Aotrou.
- 4 Klaskit an Aotrou hag e nerzh, Klaskit e zremm hap paouez.
- 6 C'hwi, lignez Abraham, e servijer, Mibion Yakob, e zen dibabet.
- 7 ER, an Aotrou, eo hon Doue: War an douar a-bezh emañ e varnedigezhioù.
- 8 Soñj en deus da viken eus e Emglev, Eus e broesa graet evit mil rummad.
- 9 Eus an Emglev a skoulmas gant Abraham, Eus al le a douas da Izaag.

ALLELUIA Alleluia!

Hemañ eo an deiz en deus graet an Aotrou Deiz a joa hag a levezon.

Alleluia!

AVIEL

Istor diskibion Emmaus.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT LUKAZ (24. 13-35)

- 13 Setu ma oa daou eus a ziskibion Jezuz o vont dez kentañ ar sizhun d'ur vourc'h war-hed 60 stadenn diouzh Jeruzalem, hec'h anv Emmaus.
- 14 Hag e komzent etrezo diwar-benn kement tra a oa c'hoarvezet
- 15 Ha setu e-pad m'edont o komz hag o vreutaat (DIVIZOUT), Jezuz e-unan a dostaas hag en em lakaas d'ober hent ganto;
- 16 Met dalc'het e oa o daoulagad en doare ma ne oant ket evit hen anavezout.
- 17 Hag e lavaras dezho:
" Petra eo ar c'homzoù-se a gontit an eil d'egile, en ur vont gant an hent ? "
Chom a rejont a-sav leun a dristidigezh.
- 18 Unan anezho, anvet Kleopaz, a respontas:
" Te eo an estren nemetañ o chom e Jeruzalem a gement a zo hep gouzout petra a zo bet c'hoarvezet enni, en deizioù-mañ ! "
- 19 " Petra'ta? " emezañ dezho.
Ar re-mañ a respontas dezhañ:
" Ar pezh a zo en em gavet gant Jezuz a Nazared hag a zo bet ur profed (DIOUGANER) galloudus dre gomz ha dre ober, dirak Doue ha dirak ar bobl a-bezh;
- 20 ha penaos o deus hor beleion-vras hag hor pennadurezhioù hen roet da vezañ barnet d'ar marv, hag hen staget ouzh ar groaz.
- 21 Ni avat, a espere e vije hennezh a zasprenje Israel; hogen, gant kement-se holl hemañ eo an trede deiz abaoe m'eo degouezhet an traoù-se.
- 22 Gwir eo, un nebeut gwraez eus hon touez o deus hor strafuilhet: aet e cant mintin-mat d'ar bez,
- 23 met ne gavjont ket e gorf, ha distroet ez int bet en ur gontañ o devoa gwelet Aelez zoken hag a lavar ez eo bev.
- 24 Ha darn eus hon tud a zo aet d'ar bez, hag o deus kavet pep tra just evel ma lavare ar merc'hed; eñ avat, n'o deus ket e welet "
- 25 Neuze e lavaras dezho:
" O tud dispered ha gorrek ho kalonoù da gredañ kement o deus lavaret an Diouganerion (BROFEDED) !
- 26 Daoust ha ne oa ket ret d'ar Mesiaz gouzañv ar poanioù-se hag antren evel-se en e c'hloar? "
- 27 Hag o kregiñ gant Moizez hag an holl Brofeded, e tisklerias dezho, en holl Skriturioù, ar pezh a selle outañ".
- 28 Evel-se ec'h errujont tost d'ar vourc'h ma'z aent, met eñ a reas van da vont hiroc'h.
- 29 Met derc'hel a rejont warnañ en ur lavarout:
" Chom ganimp, rak tostaat a ra an abar-daez-noz hag erru eo izel an deiz". Hag eo'h antreas eta evit chom ganto.
- 30 Ha setu, p'edo ouzh taol ganto, e kemeras bara, hen bennigas, hen torras hag hen roas dezho.
- 31 Neuze o daoulagad a zigoras, hag hen anavezout a rejont; eñ avat, a oa aet a-zirak o daoulagad.
- 32 Hag e lavarjont an eil d'egile: " Daoust ha ne verve ket hor c'h'alon en hor c'hreiz, pa gomze ouzhimp war an hent, ha pa zizoloe dimp ar Skriturioù? "

- 33 Hag o sevel raktal e tistrojont da Jeruzalem. Eno e kavjont bodet an Unnek (Abostol) hag ar re all ganto;
- 34 Ar re-mañ a lavaras dezho:
" Gwir eo! Savet eo an Aotrou da veñ; en em ziskouezet eo da Simon."
- 35 Hag i o-unan a gontas ar pezh a oa c'hoarvezet war an hent ha penaos e oa anavezet ganto, p'en devoa torret ar bara.

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, degemer ar sakrifis en deus roet ar silvidigezh d'ar bed, ha roit dimp, en ho madelezh, yec'hed ar c'horf hag an ene.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Lk. 24. 35)

An diskibien a anavezaz an Aotrou Jezuz, pa dorras ar Bara, Alleluia!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Ni ho ped, Aotrou Doue, skarzhit eus hor c'hreiz kement tra gozh a zo ennomp, ha dre nerzh Sakramant santel ho liab Jezuz, grit ganimp tud nevez.

- YAOU PASK -

KAN-DIGERIÑ (Furn. 7. 20,21) : D'ho torn aet an trec'h gantañ e kanas Pobl Israel meuleudioù, holl war un dro, rak ar Furnez he deus digoret genoù an dud vut ha distagellet teod ar vugale. Alleluia!

GLORIA IN EXCELSIS

KEMPEDENN:

Aotrou Doue, bodet hoc'h eus pobloù disheñvel ar bed da veuliñ hoc'h Anv santel, roit eta, ni ho ped, d'ar re a zo bet ganet a-nevez e feunteun ar Vadeziant, ar c'hras da gaout ar memes feiz en o speredoù hag ar memes aked en o oberoù.

ABOSTOL

Pareañs den kamm an Nor-Gaer. Kentelioù Pêr war gement-se.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (Ob. 3. 11-16).

- 11 En deziou-se, o vezañ ma talc'he an den kamm paret tost da Bêr ha da Yann, e teredas ar bobl a-bezh daveto, war-zu ar porched a veze

graet anezhañ "Porched Salomon"; souezhet-mik e cant hag er-maez anezho o-unan.

- 12 Met Pêr o welout kement-se, a gomzas ouzh ar bobl:
" Israeliz, emezañ, perak ez oc'h souezhet gant an dra-mañ? Perak e troit ho selloù war-zu ennomp evel pa vije gant hor galloud pe gant hor relijion hon-unan hor bije lakaet an den-mañ da vale?
- 13 Doue Abraham, Izaag ha Yakob, Doue hon Tadoù eo en deus roet gloar (KLOD) d'e Serviijer Jezuz, an hini hoc'h eus-c'hwi gwerzhet ha nac'het dirak Pilat daoust ma oa troet hemañ d'e lezel da vont en e frankiz.
- 14 Met c'hwi hoc'h eus nac'het ar Sant, an Den Just hag hoc'h eus goulennet ma vije roet deoc'h ul lazher.
- 15 Digorer-Meur hent ar vuhez hoc'h eus lakaet d'ar marv. Doue avat, en deus e zasorc'het a-douez ar re varv, ni a zo testoù war gement-se.
- 16 Ha dre ar feiz en e anv eo en deus rentet e anv an nerzh d'an den-mañ a welit hag a anavezit; hag ar feiz-se hag a zeu dioutañ eo en deus rentet d'an den-mañ ar yec'hed leun, evel m'emañ dirazoc'h c'hwi holl."

SALM 8 (2a & 5, 6-7, 8-9).

R: (2a) O Aotroù, hor Mestr,
Pegen kaer hoc'h anv war an douar a-bezh.

(pe) : ALLELUIA!

- 2a O Aotroù, hor Mestr,
Pegen kaer hoc'h anv war an douar a-bezh.
- 5 Petra eo an den p'hoc'h eus soñj anezhañ
Ha Mab-an-Den pa hen darempredit?
- 6 Hen graet hoc'h eus izeloc'hik eget Doue,
A c'hloar hag a enor hoc'h eus e gurunet,
- 7 Hen lakaet hoc'h eus da vestr war labourioù ho taouarn,
Pep tra hoc'h eus lakaet dindan e dreid.
- 8 Deñved hag e jened, kement a zo anezho,
Ha c'hoazh al loened gouez.
- 9 Evned an Neñv ha pesked ar Nor,
Kement a red gwenodennoù an Dour.

ALLELUIA Alleluia!

Hemañ eo an deiz en deus graet an Aotroù
Deiz a joa hag a levenez.

Alleluia!

AVIEL

Jezuz en em ziskouez d'an Ebestel hag a ro e urzhioù diwezhañ dezho.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT LUKAZ (24. 35-48).

- 35 (En amzer-se edo an diskibien o kontañ ar pezh a oa bet c'hoarvezet war hent (Emmaus) hag e peseurt stumm o devoa anavezet Jezuz pa dorras ar bara).

- 36 Tra m'edont gant kement-se, en em gavas Jezuz en o c'hreiz, hag eñ da lavarout dezho:

" Ar peoc'h da vezañ ganeoc'h!"

- 37 Met i sabatuet ha spontet, a grede dezho gwalout ur spered.
- 38 Hag e lavaras dezho : " Perak ez oc'h strafuilhet, ha perak e sav diskred en ho kalonoù? Sellit ouzh va daouarn hag ouzh va zreid; me eo, me va-unan. Stokit ouzhin va gwelit: ur spered n'en deus na kig nag eskorn evel ma welit am eus-me!"
- 39 En ur lavarout kement-se e tiskouezas dezho e zaouarn hag e dreid.
- 41 Met evel na gradent ket c'hoazh, gant al levenez a oa enno, ha ma cant souezhet, e lavaras dezho:
" Ha bezañ hoc'h eus-hu amañ un dra bennak da zebriñ?"
- 42 Tapout a rejont dezhañ un tamm pesk rostet. Hen kemerout a reas ha debriñ dirazo.
- 43 Neuze e lavaras dezho:
" Setu aze end-seun ar c'homzoù am boa lavaret deoc'h p'edon c'hoazh ganeoc'h: Ret eo ma teufe da wir kement a zo bet skrivet diwar va fenn, e Iezonn Voizez hag er Brofeded, hag er Salmoù."
- 45 Neuze e tigas dezho o spered da intent ar Skriturioù.
- 46 Hag e lavaras dezho : " Evel-se ez eo skrivet e rankfe ar Mesiaz gouzav hag adsevel a-douez ar re varv d'an trede deiz;
- 47 hag e vefe embannet en e anv an distro-a galon hag ar pardon eus ar pec'hedoù, d'an holl bobloù en ur gregiñ dre Jeruzalem.
- 48 C'hwi eo an testoù eus an traoù-se.

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, Aotroù Doue, ni ho ped, degemer gant madelezh ar profoù a ginnigomp deoc'h gant anaoudegezh vat evit ar re a zo bet ganet a-nevez dre ar Vadeziant hag ivez evidomp-ni hon-unan ma resevimp buanoc'h a-se sikour an Neñv.

ANTIFONENN AR KOMUNION (1 Pêr, 2. 9)

Pobl dasprenet, embannit oberoù galloudus an Hini en deus ho kalvet eus an deñvalijenn d'e sklerijenn vurzhudus. Alleluia!

GOUDE KOMUNIAN:

Plijet ganeoc'h, Aotroù Doue, selaou hor pedennoù: grit ma vo an darempredoù santel hon eus gant Mister hor silvidigezh ur vammenn a sikour evit buhez ar bed-mañ, hag un arrez eus ar joaioù peubadus.

It e peoc'h Hor Salver! Alleluia!
Bennozh da Zeus! Alleluia!

=====

- GWENER FASK -

KAN-DIGERIN (Salm 77. 53): An Aotrou a renas e Bobl e-kreiz an
esperañs, hag ar mor a lonkas o ene-
bourion. Alleluia!

GLORIA IN EXCELSIS DEO

KEMPEDEHN:

Doue hollc'halloudek ha peurbadel,
dre Vister Pask hoc'h eus siellet an Englev-a-beoc'h etrezoc'h hag an
dud,
plijet geneoc'h eta, reiñ d'hon eneoù ar c'hras neket kepken da grediñ
ar gwirioneziou a enoromp dre al lidoù-mañ,
met ivez d'o lakaat da ren hon oberoù.

LENNADENN 1añ

Pêr ha Yann er prison dre ma oa bet pareet an den kamm.

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (4. 1-12).

En deizioù-se goude ma oa bet pareet den kamm an Nor-Caer, Pêr
1 ha Yann a oa c'hoazh o komz ouzh ar bobl, p'en em gavas ar veleien,
2 komandant an Templ hag ar Sadukcidi, droug bras enno en abeg ma
keleiment ar bobl ha ma'z embannent e Jezuz Adsav ar re varv da vev.
3 Teurel a rejont o daouarn warno hag e lakajont anezho er prison
(TOULL-BAC'H) betek an deiz war-lerc'h, rak erru e oa dija an abar-
daez-noz.
4 Met kalz eus ar re o devoa klevet ar brezegenn, a gredas hag e savas
an niver eus ar re o devoa kredet, gant kontañ hepken ar wazed, da
bemp mil bennak.
5 Antronoz, ec'h en em vodas pennoù-bras ar Yuzevion, ar re Gozh,
(AN HENAOURION) hag ar Skribed, e Jeruzalem,
6 gant Annaz, ar beleg-meur, Kaifaz, Yonatan, Aleksandr, hag ar re
holl eus familh ar veleien.
7 Ober a rejont d'an Ebestel donet dirazo, hag e krogjont d'ober gou-
lennoù outo:
" Dre be c'halloud hag en anv piv hoc'h eus-hu graet kement-se?"
8 Neuze, Pêr, leun eus ar Spered Santel, a lavaras dezho:
" Pennoù-bras ar bobl, ha c'hwi, Re-Gozh,
9 peogwir e reer dimp hiziv goulennoù diwar-benn ar vad hon eus graet
d'un den nammet, ha pa c'houlenner diganimp penaos eo bet pareet,
10 klevit eta, c'hwi holl, ha Pobl Israel a-bezh:
dre anv hon Aotrou Jezuz-Krist a Nazared ez eo,
an Hini hoc'h eus staget ouzh kroaz, hag en deus Doue lakaat da se-
vel a-douez ar re varv;
ya, en anv hennezh eo en em ziskouez an den-mañ a zo dirazoc'h,
yac'h-mat!

11 Eñ eo ar maen bet taolet kuit geneoc'h-c'hwi,
saverien-an-ti, hag a zo deuet da vezañ Maen-Korn;
ha n'eus ket a silvidigezh en hini all ebet,
12 rak n'eus dindan an cabl anv all ebet a gement a zo bet roet
d'an dud, a zlofemp bezañ salvet drezañ!"

SALM 117 (1-2, 4, 22-24, 25-27a)

R: (22) Ar maen taolet kuit gant ar vasonerion
A zo deuet da vezañ Maen-Korn.

(po) : ALLELUIA!

- 1 Lavarit bennozh d'an Aotrou, rak mat eo,
Rak peurbadus eo e garantez.
- 2 Ra lavaro (Ti) Israel:
Peurbadus eo e garantez.
- 4 Ra lavaro ar re a zouj an Aotrou:
Peurbadus eo e garantez.
- 22 Ar Maen taolet kuit gant ar vasonerion
A zo deuet da vezañ Maen-Korn.
- 23 A-berzh an Aotrou eo bet graet kement-se,
Tra vurzhdus dirak hon daoulagad.
- 24 Hemañ eo an deiz en deus graet an Aotrou,
Deiz a joa hag a levenez.
- 25 Hozanna, Doue trec'her! Hozanna!
Hozanna, Doue Salver! Hozanna!
- 26 Ra vo benniget an Hini a zeu en anv an Aotrou,
Ho pennigañ a roomp eus Ti an Aotrou.
- 27a Doue eo an Aotrou, hag ar Sklerder evidomp.

ALLELUIA

Alleluia!
Hemañ eo an deiz en deus graet an Aotrou
Deiz a joa hag a levenez.
Alleluia!

AVIEL

Jezuz savet a varv da vev en em ziskouez d'an Ebestel war ribl ar mor.

+ PEINAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (21. 1-14).

- 1 Goude-se en em ziskouezas Jezuz adarre d'e Ziskibion war ribl Mor
Tiberiad. Setu amañ penaos en em ziskouezas.
- 2 Eio a-gevret Simon-Pêr ha Tomaz, an hini lesanvet Didimoz, Natanael
hag a oa eus Kana Galilea, mibion Zebedeo, ha daou ziskibl all.
- 3 Ma lavaras Simon-Pêr dezho: " Me a zo o vont da besketa." Hag e
lavarjont dezhañ: " Ni a zo o vont ivez ganit."
Hag int da vont ha da bignat er vag; met en noz-se ne bakjont netra.

- 4 Krog e oa dija an deiz da c'houlaoüñ hag e teuas Jezuz d'en em lakaat en e sav war an aod; met e ziskibion ne ouient eo Jezuz e oa.
- 5 Jezuz a lavaras dezho : " Paotred, ha tapet hoc'h eus ur pesk bennak?
- Netra", emezo.
- 6 Hag eñ da lavarout dezho : " Taolit ho roued en tu dehoù d'ho pag hag e kavot." He zeurel a rejont ha n'edont ket ken evit he zennañ er-maez en abeg da niver bras ar pesked.
- 7 Neuze an diskibl karet gant Jezuz, a lavaras da Bêr : " An Aotrou eo!"
Simon-Pêr o klevout eo an Aotrou e oa, a lakas (STARDAS) e wiskamant-gorre en-dro d'e zargreiz, rak en nozh odo, hag en em daolas er mor. An diskibion all a zeuas gant ar vag, rak n'edont ket pell diouzh an douar, nemet war-dro daou c'hant ilinad, ha war o lerc'h e stlejant ar roued leun a besked.
- 9 Pa ziskennjont war an douar, e weljont eno un tan glaou bev, ur pesk warno, ha bara.
- 10 Ha Jezuz da lavarout dezho:
" Degasit unan bennak eus ar pesked hoc'h eus tapet bremaik."
- 11 Simon Pêr eta a bignas en-dro, hag a sachas ar roued d'an douar; leun e oa a gant tri hag hanter-kant a besked bras; ha daoust ma oa kement anezho, ne fregas ket ar roued.
- 12 Jezuz a lavaras dezho : " Deuit da zebriñ ho tijuniñ."
Hag hini ebet eus an diskibion ne grede goulenn digantañ : "Piv oute?", rak gouzout a raent e oa an Aotrou.
- 13 Neuze e testaas Jezuz hag o kemer ar bara, hen roas dezho ha gant ar pesk e reas heñvol.
- 14 Honnezh e oa an deirvet gwech da Jezuz d'en em ziskouez d'e ziskibion abaoe ma oa savet a-douez ar re varv.

WAR AR PROFOU :

Aotrou Doue, grit eta, en ho karantez, d'ar profoù-mañ a ginnigomp deoc'h e-kerz Gouelioù -Pask, dougen o frouezh ennomp, ma vimp distroet diouzh karantez ar bed evit en em dommañ ouzh traoù an Neñv.

ANTIFONENN AR KOMUNION (Yn. 21. 12-13).

Jezuz a lavaras d'e ziskibion: " Deuit da zebriñ."
Kemer a reas bara neuze hag hen roas dezho. Alleluia!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Dalc'hit hep ehan, ni ho ped, Aotrou Doue, da ziwall ar re hoc'h eus salvet:
prenet ez int bet dre Basion ho Mab,
grit dezho bezañ leun a levenez abalamour d'e Adsav d'ar vuhez.

It e peoc'h Hor Salver! Alleluia!
Bennoz da Zous! Alleluia!

- SADORN GOUDE PASK -

(Kent : SADORN AR C'HAZIMODO)

KAN-DIGERIÑ (Salm 104. 43) : An Aotrou Doue a reas d'e Bobl kuitaat an Ejipt e-kreiz al laouendigezh, hag e dud dibabet, e-kreiz ar joa. Alleluia!

GLORIA IN EXCELSIS

KEMPEDEENN:

Aotrou Doue,
gant ho kras largentezus e rit da niver ar pobloù a gred ennoc'h mont war greskiñ,
taolit eta ur sell a vadelezh war an dud hoc'h eus dibabet evit ma teuio ar re a zo bet adganet dre Sakramant ar Vadeziant, da gaout un deiz gwis-kamant ar vuhez peurbadus.

ABOSTOL

Pêr ha Yann dirak Kuzul-Meur ar Yuzevion.

LENHADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (4. 13-21).

- En deizioù-se,
- 13 tud Kuzul-Meur ar Yuzevion a chomas batet o welout hardizhegezh Pêr ha Yann hag o klevout e cant tud dizek, tudigoù hep deskamant. Anaout a raent a-walc'h enno tud hag a oa bet gant Jezuz.
- 14 hag e welent ivez en e sav en o c'hichen, an den hag a oa bet paret; ha dre-se n'o devoa netra da lavarout.
- 15 Neuze e rejont dezho mont er-maez eus sal ar C'huzul-Meur hag en em lakjont d'en em guzuliañ konetrezo.
- 16 Hag e lavarent:
" Petra a raimp-ni d'an dud-mañ? Ur burzhud anat a zo bet graet ganto, an dra-se a zo sklaer-meurbet evit tud Jeruzalem, ha ne c'hellomp ket nac'h.
- 17 Met evit ma na vo ket skignet muoc'h ar vrud a gement-se e-touez ar bobl, difennomp outo gant gourdrouzoù, komz pelloc'h ouzh don ebet en anv-se."
- 18 O gervel a rejont en-dro eta hag e tifennjont outo dic'hwozhañ gorz bet da zen ebet, na kelenn en anv Jezuz.
- 19 Met Pêr ha Yann a respontas dezho:
" Daoust ha reizh ez eo dirak Doue sentiñ ouzhoc'h-hu kentoc'h eget ouzh Doue? Deoc'h-hu da varn!
- 20 Rak ne c'hellomp ket ni chom hep displegañ ar pezh hon eus gwelet ha klevet."
- 21 Koulskoude, goude bezañ o gourdrouzet adarre, e laoskjont anezho da vont, pa ne welent ket penaos o c'hastizañ abalamour d'ar bobl; rak an holl a roe klod (GLOAR) da Zous evit ar pezh a oa c'hearvezet.

SALM 117 (1, 14-15, 16a-18, 19-21).

R: (21a): Ho trugarekaat a ran,
rak respontet hoc'h eus din.

(po): ALLELUIA!

- 1 Lavarit bennozh da Zoue, rak mat eo:
Rak peurbadus eo e garantez.
- 14 Va nerzh ha va c'hantik eo an Aotrou,
Bet eo va silvidigezh.
- 15 Jolori skiltrus an trec'h
E teltennoù an dud reizh.
- 16a Dorm dehoù an Aotrou a labour gant nerzh,
Dorm dehoù an Aotrou o trec'hiñ,
Dorm dehoù a labour gant nerzh,
- 17 Ne varvin ket, met bevañ a rin,
Hag o tanevellin (KONTIN) oberoù an Aotrou.
- 18 Va c'hastizet, va c'hastizet en deus an Aotrou,
Met d'ar marv n'en deus ket va lakaet.
- 19 Digorit din dorjoù ar Reizhdad,
Antren a rin da drugarekaat an Aotrou.
- 20 Homañ eo dor an Aotrou
An dud a yelo drezi.
- 21 Ho trugarekaat a ran, rak respontet hoc'h eus din
Ha bet oc'h euidon ar silvidigezh.

ALLELUIA Hemañ eo an deiz en deus graet an Aotrou
Deiz a joa hag a levonez.
Alleluia!

AVIEL

Jezuz gwelet bev adarre.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT MARK (16. 9-15).

- 9 Goude ma oa savet da vev, diouzh ar beure, deiz kentañ ar sizhun,
ec'h en em ziskouezas Jezuz da gentañ da Vari-Madalon en devoa bet
argaset seizh diaoul diouti.
- 10 Homañ a yeas da zegommenn ar c'heloù d'ar re a oa e gompagnuned hag
a oa o tougon kañv hag o ouelañ.
- 11 Met ar re-mañ o klevout e oa bev hag e oa bet gwelet ganti, ne gred-
jont ket.
- 12 Goude-se, en em ziskouezas dindan ur stumm estren, da zaou anezho
hag a oa gant o hent evit mont war ar maez;
- 13 hag ar re-mañ o tont war o c'hiz a zegomenhas ar c'heloù d'ar re all;
hogen n'o c'hredjont ket kennebeut all.
- 14 Da zivezhañ p'edo an Unneg ouzh taol, en em ziskouezas dezho hag e
rebechas dezho o difeiz ha kalTED o c'halon, dre n'o devoa ket kre-
det ar re o devoa hen gwelet adsavet a-douez ar re varv.

15 Neuze e lavaras dezho:

" It dre ar bed-holl, hag embannit ar C'heloù-Mat d'an holl groua-
delezh!"

WAR AR PROFOU:

Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotrou Doue, dre vertuz Miste-
riou Pask Hor Salver, emamp bremañ o lidañ, da vezañ bepred leun a le-
vonez
ha lakit sakrifis ar silvidigezh hag a vez kinniget deoc'h hep ehan, da
vezañ evidomp mammenn ar joa hop fin.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Gal. 3. 27).

Kement hini ac'hanoec'h hag a zo bet badezet e Jezuz-Krist en
deus gwisket an Aotrou Krist warmañ e-unan. Alleluia!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Taolit ur sell a vadelezh war ho pobl, ni ho ped, Aotrou Doue,
ha peogwir ez eus bet plijet ganeoc'h nevesaat anezhañ gant Misterioù
peurbadus,
roit dezhañ ar c'hras da gaout lod e gloar ar c'horfoù marv oc'h adse-
vel evit ar vuhez a bad da viken.

It e peoc'h Hor Salver! Alleluia!
Bennozh da Zoue! Alleluia!

2 Sul Goude PASK Pa SUL AR C'HAZIMOD

Kan-Digerif (1 Per. 2,3) : Evel bugale nevez ganet, klaskit al laezh pur
laezh ar spered evit ma kresket gantañ evit ar silvidigezh. Alleluia
(Pa) (4 Esdr. 2,36.37) : Degemerit gant levonez ar c'hloar a zo ouzh ho
kortoz, en ur drugarekaat Doue en deus ho kalvet da Rouantelezh an Ne
NeFvoù. Alleluia

KEMPEDENN

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo peurbadel ho trugarez,
gant gouelioù Pask o tistreiñ bep bloaz, ec'h entañt feiz ar bobl a zo
gouestlet deoc'h - kreskit eta ar c'hras hoc'h eus roet
evit ma kompreno an holl evel ma'z eo dleet, gant peseurt badeziant ez int
bet gwalc'het
gant peseurt Spered ez int bet ganet a-nevez ha gant peseurt gwad ez int
bet dasprenet.
WAR AR PROFOU
Degemerit, ni ho ped, Aotrou Doue, ar profou emañ ho pobl o kinnig deoc'h,
ha grit d'ar re a zo bet nevezet dre an zav o feiz en hoc'h anv santel
ha dre ar Vadeziant o deus resevet, gonit an eTrusted peurbadel.

PREFAS 1 PASK paj. 13. Gant ar Bedenn-Veur 1 Communicantes
hag Hanc Igitur a-ratozh.

ANTIFONENN AR GOMUNION (cf Yn 20,27) : Laka da zorn emañ ha gwel plas an
tachoù. Arabat dit bezañ diskredik met kredik. Alleluia !

GOUDE KOMUNIAÑ

Ni ho ped, Aotrou Doue hollc'halloudek, grit d'ar Sakramnt hon eus resevet
hag a zegas da soñj dimp eus Mister Santel Pask, dougen frouezh padus en
hon eneoù.

OFERENNOU WAR AR PEMDEZ
=====

En ofisoù war ar pemdez, pa vez lavaret an oferenn eus an deiz, e vez graet gant an testennoù merket evit pep deiz, en ur gemmañ evel-kent ar Gempedenn hervez an notennoù merket evit pep hini eus an oferennoù.

-EIL SIZHUNTEZH GOUDE PASK-

- LUN -
=====

KAN-DIGERIN (Rom. 6. 9) : Jezuz-Krist savet a varv da vev ne varv mui, an Ankoù n'en deus ket a grog warnañ ken. Alleluia!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 2:

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag hon eus an hardizhegezh da lavarout deoc'h: Hon Tad, startait en hor c'halonoù ar spered hag a ra ac'hanomp gwir vugale deoc'h, evit ma c'hellimp kaout perzh en heritaj prometet.

Sizhunvezh 4:

Aotrou Doue, dre ho Mab en em lakaet izel hoc'h eus savet ar bed kouezet, roit d'ho tud fidel gras al levezet santel, ha grit d'ar re hoc'h eus diframmet eus a sklavelezh ar pec'hed tañva un deiz ar jaoù peurbadus.

Sizhunvezh 6:

Doue leun a drugarez, lakait ar misterioù a enoromp gant Gouelioù-Pask da zougen frouezh evidomp e pep amzer.

LENNADENN 1añ

Pêr ha Yann tennet eus ar prison. Ar gristenion gentañ o trugarekaat an Aotrou Doue evit ar c'hras-se.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (4. 23-31).

- 23 En devezioù-se, Pêr ha Yann o vezañ bet diereet, a zeus davet o zud hag a zisklerias dezho kement o devoa lavaret dezho Priñsed ar Veleien hag ar Re Gozh.
- 24 Hag int-i, p'o devoa o c'hlevet, a savas o mouezh war-zu Doue hag a lavaras:

- " Mestr! Te eo an hini en deus graet an Neñv hag an Douar, ar mor hag an holl draoù a zo enno.
- 25 Te eo ac'h eus lavaret dre ar Spered Santel, dre c'henoù hon Tad David, da servijer:
'Perak an dourmi-se gant ar Baganed ha gant ar pobloù ar grozmol didalvez-se?
- 26 Rouaned an douar hag ar Briñsed en em vod asamblez A-enep an Aotrou hag a-enep e Vesiaz.'
- 27 Rak e gwirionez, er gêr-mañ, a-enep da servijer santel, Jezuz, an hini az poa sakret, ez eo en em vodet Herodez ha Poñs-Pilat gant ar Baganed ha pobloù Israel,
- 28 evit ober kement o devoa da zorn ha da youl divizet en a-rack e vije graet.
- 29 Ha bremañ, Aotrou, sell ouzh o gourdrouzoù, ha re d'az servijerien ar c'hras da embann gant pep hardizhegezh da gomz,
- 30 en ur astann da zorn evit ma c'hoarvezo pareñsoù, sinoù ha burzhudoù, dre anv da Vab Santel Jezuz!"
- 31 Pan o devoa echu o fedenn, o krenas al lec'h ma oant bodet, ha leuniet e voent holl eus ar Spered Santel, hag ec'h embannent Komz Doue gant hardizhegezh.

SALM 2 (1-3, 4-6, 7-9).

R:(13b) Eñrus ar re a laka o fiziañs en Aotrou Doue.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Perak an dourmi-se gant ar Baganed, Gant ar pobloù ar grozmol didalvez-se?
- 2 Rouaned an douar, ar Briñsed en em vod a-gevret (asamblez) A-enep an Aotrou hag a-enep e Vesiaz:
- 3 Drahomp o chadennoù, taolomp diouzhip o ereoù.
- 4 En e goazez en Neñvoù, e c'hearzh an Aotrou, Goad a ra outo.
- 5 Neuze e komz outo gant kounnar, Ha droug ruz ennañ e spont anezho:
- 6 " Me am eus sakret va Roue, war Sion, menez va Santual!"
- 7 Hag ez adlavar an dre urzh an Aotrou: Lavaret en deus din: " Va Mab ez out, me, hiziv, em eus da c'hanet!
- 8 Goulenñ diganin hag e roin pobloù dit en hêrezh Ha perc'henn e vi war harzoù an douar,
- 9 Hag e torri anezho gant ur vazh-houarn, Eval besel ur poder o drailhi."

GWERZADOU AN ALLELUIA
E-PAD AMZER-BASK
=====

- 1 Lk 24. 46 : Ret e oa d'ar C'hrist gouzañv hag adsevel a-douez ar re varv, hag antren evel-se en e o'hloar.
- 2 Yn 10. 14 : Me eo ar Pastor mat, eme an Aotrou hag anaout a ran va defived-me ha va re-me am anavez.
- 3 id. 27 : Va defived a selaou va mouszh Ha me o anavez hag int a zeu war va lerc'h.
- 4 Yn 20. 29 : Dre m'ac'h eus va gwelet, Tomaz, e kredez. Eurus ar re n'o deus ket gwelet hag o deus kredet!
- 5 Rom. 6. 9 : Ar C'hrist oc'h adsevel da vev, ne varv mui; An Ankoù n'en devezo krog ebet warnañ hiviziken.
- 6 Kol. 3. 1 : A-unan gant ar C'hrist ez oc'h savet a varv da vev. Klaskit eta an traoù a zo en nec'h, e-lec'h m'emañ ar C'hrist azezet a-zehoù d'e Dad.
- 7 Disk. 1.5ab : Jezuz-Krist, an test fidel, kentañ-ganet a-douez ar re varv: hor c'haret hoc'h eus ha gwalc'het hor pec'hedoù en ho kwad.
- 8 : Adsavet eo ar C'hrist eus ar bez, hag hor sklerijennet en deus, goude bezañ hon dasprenet gant e wad.
- 9 : Adsavet eo ar C'hrist eus ar bez, Eñ hag a zo bet e-pign ouzh ar Groaz (Koad ar Groaz).
- 10 : Dasorc'het eo ar C'hrist, an hini a grouas pep tra, hag en deus bet truez ouzh an dud.
- 11 : Gouzout a reomp eo savet ar C'hrist da vev, e gwirionez. C'hwi, Rous, Trec'hour, ouzhipm ho pet truez.

AVIEL

Nikodem: Bezañ adganet dre an dour hag ar Spered Santel.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (3. 1-8).

- 1 E-touez ar Parizianed e oa un den anvet Nikodem, unan eus pennoù-bras ar Yuzevien.
- 2 Hemañ a zeuas en noz da gaout Jezuz hag a lavaras dezhañ: " Rabbi, gouzout a reomp ez out deuet a-berzh Doue, evel moestr-kelenner, rak den ne c'hell ober ar sinioù-se a rez-te, mar n'emañ

- ket Doue gantañ."
- 3 Respont a reas Jezuz dezhañ: " E gwirionez, e gwirionez, me a lavar dit, mar ne vez ket ganet unan bennak a-nevez eus an nec'h, ne c'hell ket gwelout Rouantelezh Doue."
- 4 Lavarout a reas Nikodem dezhañ: " Penaos e c'hell un den bezañ ganet hag eñ kozh? Daoust hag e c'hell mont e korf é vamm evit bezañ ganet adarre?"
- 5 Jezuz a respontas: " E gwirionez, e gwirionez, me a lavar dit: mar ne vez ket ganet unan bennak eus an dour hag eus ar Spered, ne c'hell ket antren e Rouantelezh Doue.
- 6 Kement a vez ganet eus ar c'horf a zo korf; ha kement a vez ganet eus ar Spered a zo spered.
- 7 Na vez ket souezhet eta gant ar pezh am eus lavaret dit: ret eo deoc'h bezañ ganet a-nevez eus an nec'h.
- 8 An avel a c'hwez e-lec'h ma kar: he mouezh a glevet, met n'ouzout ket nag eus a belec'h e teu na da belec'h ez a. Eval-se e c'hoarvez gant kement den a zo ganet eus ar Spered."

WAR AR PROFOU:

Plijet ganec'h, ni ho ped, Aotrou Doue, degemer profoù hoc'h Iliz el levenez, ha peogwir ez eo c'hwi hoc'h-unan a zo penn-kaoz d'al levenez Wras-se roit dezhi ivez ar c'hras da dañva un deiz ar joaioù peurbadus.

PREFASOU en amzer Bask
(lezet e diviz an oferenner)

1 PREFAS : ar vuhez nevez e Jezuz-Krist.

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer, met droist-holl ha gant brasoc'h meuludi, en amzer santel-mañ ma'z eo bet Jezuz-Krist, hon Oan-Pask, laket d'ar marv evidomp. Drezañ e vez ganet d'ar vuhez peurbadel Bugale ar sklerijenn, ha d'an dud a gred ennañ e vez digoret dorioù palez an Iñivoù. Rak hor marv-ni a zo bet dasprenet gant e varv dezhañ e-unan, ha pa'z eo bet adsavet d'ar vuhez ez eo bet adsavet an holl dud d'ar vuhez. Rak-se, gant gouelioù santel Pask, e trid ar bed a-bezh en ur mor a leve nez, hag holl Speredoù galloudus an Iñivoù a gan meuludi d'ho kload en ur lavarout da viken:

SANTEL! SANTEL! SANTEL!...

PREFAS 2 : Jezuz-Krist oc'h erbediñ evidomp Doue an Tad.

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer, met droist-holl ha gant brasoc'h meuludi, en amzer santel-mañ ma'z eo bet Jezuz-Krist, hon Oan-Pask, laket d'ar marv evidomp.

Hep paouez e talc'h bremañ d'en em ginnig evidomp,
 hag emañ dirazoc'h, evel hon Alvokad, o tifenn ac'hanomp.
 Bet eo sakrifiet evidomp - ABERZHEZ EVIDOMP -, met bremañ
 ne varv mui,
 ha bev eo da viken goude bezañ bet lakaet d'ar marv.
 Rak-se, gant gouelioù santel Pask, e trid ar bed a-bezh en
 ur mor a levez, hag holl Speredoù galloudus an Neñvoù a gan meuleudi d'ho kloar
 en ur lavarout da viken:

SANTEL! SANTEL! SANTEL!...

PREFAS 3 : Ar bed-holl adsavet ha nevezet gant Mister-Pask.

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel;
 un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer,
 met dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi, en amzer santel-mañ ma'z eo
 bet Jezuz-Krist, hon Oan-Pask, laketaet d'ar marv evidomp.

Rak diskaret en deus ar bed kozh evit adsevel ha nevesaat kement a oa
 kouezhet,
 hag e Jezuz-Krist eo bet rentet dimp en he fezh ar gwir vuhez.

Rak-se, gant gouelioù santel Pask, e trid ar bed a-bezh en ur
 mor a levez, hag holl Speredoù galloudus an Neñvoù a gan meuleudi d'ho kloar
 en ur lavarout da viken:

SANTEL! SANTEL! SANTEL!...

PREFAS 4 : Jezuz, Beleg hag Oan ar Sakrifis.

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel,
 un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer,
 met dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi, en amzer santel-mañ ma'z eo
 bet Jezuz-Krist, hon Oan-Pask, laketaet d'ar marv evidomp.

Rak o kinnig e Gorf war ar Groaz en deus evel-se degaset da wir holl
 sakrifisoù al Lezenn gozh,
 hag ouzh en em reiñ e-unan deoc'h-c'hwi evit hor silvidigezh
 en deus diskouezet e oa war un dro Beleg, Aoter hag Oan ar sakrifis.

Rak-se, gant gouelioù santel Pask, e trid ar bed a-bezh en ur
 mor a levez, hag holl Speredoù galloudus an Neñvoù a gan meuleudi d'ho kloar
 en ur lavarout da viken:

SANTEL! SANTEL! SANTEL!...

ANTIFONENN AR KOMUNION (Yn 20. 19)

Chom a reas Jezuz en e sav e-kreiz e ziskibion hag e lavaras
 dezho : " Ar peoc'h da vezañ ganeoc'h! " ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ :

Taolit ur sell a vadelezh war ho pobl, ni ho ped, Aotrou Doue,
 ha peogwir ez eus bet plijet deoc'h nevesaat anezhañ gant misterioù

peurbadus,
 roit dezhañ ar c'hras da gaout lod e gloar ar c'horfoù marv oc'h
 adsevel evit ar vuhez a bad da viken.

- MEURZH -

KAN-DIGERIÑ (Disk. 19. 7,6): Bezomp laouen, tridomp gant ar joa, ha
 kanomp gloar da Zoue, rak hor Roue eo
 an Aotrou, hon Doue hollc'halloudek.
 ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 2:

Roit dimp ar c'hras, Doue hollc'halloudek, da embann galloud Hor
 Salver o sevel eus ar bez,
 evit ma veritimp kaout un deiz ar madoù hon eus resevet dija an arrez
 anezho.

Sizhunvezh 4:

Roit dimp hor gouleñn, ni ho ped, Aotrou Doue:
 ni a zo o lidañ misterioù Adsav Hor Salver d'ar vuhez,
 grit dimp eta meritout resev un deiz joa ar silvidigezh.

Sizhunvezh 6:

Roit d'ho tud fidel, Aotrou Doue, ar c'hras da vezañ dalc'hmat
 er joa pa'z eo nevesaat yaouankiz an eneoù:
 stad a zo enno bremañ o vezañ m'o deus adkavet ar c'hloar da vezañ
 ho pugale,
 grit dezho gortoz deiz an adsav d'ar vuhez gant un esperañs leun a
 anaoudegezh vat.

ABOSTOL

Ar Gumuniezh kristen gentañ.

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (N. 32-37)

- 32 En deizioù-se, an niver bras eus ar re o devoa degemeret ar feiz
 n'o devoa nemet ur galon hag un ene hag hini anezho ne lavare e oa
 dezhañ ar pezh a berc'henne, met pep tra a oa boutin etrezo.
- 33 Ha gant kalz a nerzh e touge an Ebestel an testeni war Zasorc'h
 Jezuz an Aotrou, hag ur c'hras vras a oa warno holl.
- 34 Ne oa dan ezhommek ebet en o zouez, rak kement hini en deveze doua-
 roù pe diez, o gwerzhe,
- 35 hag a zegase arc'hant ar werzh hag hen lakaent e-hara treid an Ebes-
 tol. Hag adlodenet e veze etre pep hini bep m'en deveze ezhomm.

36 Yozef, lesanvet Barnabaz gant an Ebestel, da lavarout eo Mab ar
Frealzidigezh, ul Leviad anezhañ, ha genidik eus Kiprenez,
37 en devoa ur park; hen gwerzhañ a reas hag e tegasas an arc'hant
hag hen lakaas e-harz troid an Ebestel.

SALM 92 (1ab, 1c-2,5)

R:(1a) : An Aotrou a ren, a splannder gwisket!

(pe) : ALLELUIA!

- 1ab An Aotrou a ren, a splannder gwisket
A c'hloar ez eo en em vantellet
Hag a nerzh en em c'hourizet.
- 1c Diazezet en deus ar bed divrall
- 2 Kempennet eo ho tron abaoe ar penn-kentañ
A-holl-viskoazh emaooc'h!
- 5 Ho testenioù a zo gwirion ha sur
Ouzh ho Ti e tere ar Santelezh
O Aotrou, a-hed an holl amzerioù.

ALLELUIA (Paj. 30)

AVIEL

Diviz etre Jezuz ha Nikodem.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (3. 7-15).

- En amzer-se e lavaras Jezuz da Nikodem:
- 7 " E gwirionez, e gwirionez, me a lavar dit, na vez ket souezhet eta
gant ar pezh am eus lavaret dit:
'Ret eo deoc'h bezañ ganet a-nevez eus an noc'h'!
- 8 An avel a c'hwezh e-loc'h ma kar: he mouzha a glevez, met n'ouzout
ket nag eus a belec'h e teu na da belec'h ez a.
Evel-se e c'hoarvez gant kement den a zo ganet eus ar Spered."
- 9 Respont a reas Nikodem ha lavarout dezhañ:
" Penaos e c'hell an traoù-se c'hoarvezout?"
- 10 Ha Jezuz da respont dezhañ:
" Te a zo moestr-kelenner en Israel ha n'anavezet ket an traoù-se?"
- 11 E gwirionez, e gwirionez, me a lavar dit: ar pezh a ouzomp a
gomzomp diwar e benn, hag ar pezh hon eus gwelet a roomp testeni
diwar e benn, met hon testeni n'her resevit ket.
- 12 Pa gomzan deoc'h eus traoù an douar, mar ne gredit ket, penaos neuze,
pa gomzin deoc'h eus traoù an Neñv, e kredot-hu?
- 13 Ha den ebet n'eo bet pignot d'an Neñv nemet an hini a zo diskennet
eus an Neñv, Mab-an-Den.
- 14 Hag evel m'en deus Moizez uhelsavet ar serpent er gouelec'h, evel-se
e rank bezañ uhelsavet Mab-an-Den,
- 15 evit d'an neb a gred kaout ennañ ar vuhez pourbadus."

WAR AR PROFOU:

Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotrou Doue, dra vertuz miste-
riou Pask emaoomp o lidañ bremañ, da vezañ bepred leun a laouenedigezh,
ha lakit sakrifis ar silvidigezh hag a vez kinniget deoc'h hep pauez,
da vezañ evidomp mammenn ar joa hep fin.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Lk. 24. 46,26).

Rot e oa d'ar Mesiaz gouzav poan hag adsevel a-douez ar re varv,
hag antren evel-se en e c'hloar. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ :

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, selaou hor pedennoù:
grit ma vo an darempredoù santel hon eus gant Mister hor silvidigezh,
ur vammenn a sikour evit buhez ar bed-mañ, hag an arrez eus ar joaioù
pourbadus.

- MERC'HER -

KAN-DIGERIÑ: (Salm 17. 50, 21,2) : Ho meuliñ a rin, Aotrou Doue, e-touez
ar pobloù, hag e kontin gloar hoc'h
anv d'am breudeur. ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvez 2:

Bep bloaz e lidomp ar misterioù o deus adlakaet an den en e renk
uhel, evel ma oa er penn-kentañ, ha rentet dezhañ an esperañs da se-
vel a varv da vev,
a-greiz-kalon eta, Aotrou Doue, e c'houlennomp digant ho madelezh,
ar c'hras da garout dalc'hmat ar pezh emaoomp o lidañ gant feiz.

Sizhunvez 4:

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo buhez an dud fidel, gloar an dud
izel, evurusted an dud santel,
troit ho selloù gant madelezh war-su goulennoù ar re ho ped a wir
galon:
peogwir emañ en c'hreñs ar c'hoant bras d'ar madoù kaer hoc'h eus
prometet gant largetez, roit o gwalc'h dezho e pep amzer, eus ho
pinidigezh.

Sizhunvez 6:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, reiñ dimp hor goulenn:

evel ma'z enoromp dre lidoù santel, Goueliou Adsav ho Mab d'ar vuhez, grit ma c'hellimp bezañ leun a levnezh gant hoc'h holl Sant, pa zeuio en-dro.

LENNADENN 1añ

An Ebestel er prison.

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (5. 17-26).

- 17 En deizioù-se, e savas ar beleg-meur hag ar re holl a oa diouzh e du, da lavarout eo, kostezenn ar Sadukeidi.
- 18 Gant an droug bras a oa enno e taoljont o c'hrabanoù war an Ebestel hag o lakjont e toull-bac'h kêr.
- 19 Met un Ael d'an Aotrou, e-kreiz an noz, a zigoras dorjoù ar prison, ha goude bezañ o dhaset er-maez, e lavaras dezho:
- 20 " Kit eta d'en em lakaat en Templ ha displegit d'ar bobl an holl gomzoù o sellout ouzh ar vuhez (nevez)-mañ."
- 21 Goude bezañ klevet kement-se, ez ejont da c'houlou-deiz d'an Templ hag en em lakjont da gelenn. P'en em gavas ar Beleg-Meur gant ar re a oa diouzh e du e rejont gervel ar C'huzul-Meur hag holl strollad Re Gozh Pobl Israel; hag e voe kaset tud d'ar prison da gorc'hat an Ebestel.
- 22 Met p'en em gavas ar warded war ar plas, n'o c'havjont ket er prison. Neuze e teujont war o c'hiz da lavarout:
- 23 " Ar prison hon eus kavet prennet en doare surañ-holl, hag ar warded en o lec'h e-tal an norjoù; met p'hon eus digoret, den ebet n'hon eus kavet e-barzh."
- 24 O klevout ar c'heloù-se, komandant an Templ hag ar veleien-vras a yeas nec'het diwar-benn an Ebestel hag en em c'houlenne daoust petra 'oa kement-se.
- 25 Erruout a reas unan bennak hag a zegemennas ar c'heloù-mañ dezho: " Setu, ar wazed hag hoc'h eus lakaet er prison, a zo en Templ hag o kelenn er bobl."
- 26 Neuze ez eas ar c'homandant gant e warded hag o degasas, met hep mont dezho dre nerzh, rak aon o devoa rak ar bobl, aon da vezañ meinnet.

SALM 33 (2-3, 4-5, 6-7, 8-9).

R:(7a) : Sed ur paour o c'hervel:
Doue a glev anezhañ!

(pe) : ALLELUIA!

- 2 Bennigañ a rin an Aotrou, e pep amzer,
Dalc'hmat e veuleudi em genoù.
- 3 En Aotrou e kemero gloar va ene,
Ra glevo an dud vihan ma vo laouen o c'halon.
- 4 Kanit braster an Aotrou ganin-mo,
Savomp uhel e anv holl asamblez.
- 5 Me am eus klasket an Aotrou ha respontet en deus din,
Hag eus va spontoù en deus va salvet.

- 6 Sellit outañ hag e viot sklerijennet
ha ne ruzio ket ho tal gant ar vevh.
- 7 Sed ur paour o c'hervel: Doue a glev
Hag eus e holl drubuilhoù e tenn anezhañ.
- 8 O kampiñ emañ Ael an Aotrou en-dro d'ar re hen douj
Hag e vez o Salver.
- 9 Tañvait ha gwelit pegen mat eo an Aotrou
Eñrus an den a fizi emañ.

ALLELUIA (Paj. 30)

AVIEL

Koment en deus Doue karet ar bed, ken en deus roet e Vab Unganet.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANN (3. 16-21).

- 16 En amzer-se e lavaras Jezuz:
" Koment en deus Doue karet ar bed ken en deus roet e Vab Unganet evit ne daio ket da goll an neb a gred emañ, hogen m'en devo ar vuhez peurbadus.
- 17 Evit gwir, Doue n'en deus ket kaset e Vab er bed evit barn ar bed, met evit ma vezo ar bed salvet drezañ.
- 18 An neb a gred emañ n'eo ket barnet; an hini na gred ket a zo dija barnet o vezañ n'en deus ket kredet en anv Mab Unganet Doue.
- 19 Rak homañ eo ar varmedigezh: ar sklerijenn a zo deuet er bed, met an dud o deus karet muic'h an defvalijonn eget ar sklerijenn, dre ma oa fall o oberoù.
- 20 Rak piv bennak a ra an droug, a gasa ar sklerijenn ha ne zeu ket etrezek ar sklerijenn betegout na vefe kavet abeg en e oberoù.
- 21 Met an hini a ra ar wirionez a zeu etrezek ar sklerijenn evit ma vo diskouezet splann evit a sell ouzh e oberoù ez eo o Doue e vezont graet."

WAR AR PROFOU:

Aotrou Doue, dre ar goñvers santel m'eo ar sakrifis-mañ, hoc'h eus graet dimp kaout lod en ho natur-Doue, o Doue neurbet Uhel ha Doue nametañ,
roit dimp ar c'hras, eta, ni ho ped, neket hepken da anaout ho kwirionez evel ma reomp dija,
met ivez d'ho zizhout dre ur vuhez vat.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOUJONN. (Yn. 15. 16,19).

Lavarout a reas Hec Salver: "Ho tibabet em eus a-douez ar bed hag ho tiazonet evit ma'z eot ha ma tougot frouezh ha ma chomo ho frouezh." ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAN :

Sikourit ho pobl, gant madelezh, Aotrou Doue,
ha peogwir hoc'h eus maget anezhañ gant Sakramant Santel eus an Aoter,
grit dezhañ dilezel an traoù kozh evit tizhout ar vuhez nevez.

- YAOU -

KAN-DIGERIÑ: (Salm 67. 8-9, 20) : Aotrou Doue, pa oac'h deuet eus Bro-
Ejipt dirak ho pobl, en ur ober hent
a-unan ganto hag o chom en o c'hreiz,
an Heñvoh a lezas o glizh da gouezhañ.
ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 2:

Doue leun a drugarez, lakait ar misterioù a enoromp gant Gouelioù-
Pask, da zougen frouezh evidomp e pep amzer.

Sizhunvezh 4:

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus lakaet hon natur-den en ur renk
uheloc'h eget na oa bet da gentañ,
plijet ganec'h teurel ho selloù war vister dispar ho karantez hag
ar re hoc'h eus prizet reiñ dezho buhez nevez dre Sakramant an eil
c'hanedigezh,
mirit bepred enno donezonoù ho kras hag ho pennozh.

Sizhunvezh 6: (E-loc'h ma vez graet Gouel Emsav Hor Salver da sul)

Aotrou Doue, fellet ez eus bet deoc'h reiñ ho pobl lod en ho
silvidigezh,
plijet ganec'h eta, ni ho ped, reiñ dimp ar c'hras d'ho trugare-
kaat e pep amzer evit Adsav Hor Salver d'ar vuhez.

LENNADENN 1añ

Gwelloc'h sentiñ ouzh Doue eget ouzh an dud.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (5. 27-33).

- 27 En deizioù-se ar warded a zegasas an Ebestel (eus ar prizon) hag
a reas dezho mont dirak ar C'huzul-Meur da vezañ barnet.
Ha goulennoù a reas ar Belog-Meur outo:
- 28 " Difennet groñs hor boa, ouzoc'h, emezañ, keleenn diwar-benn an anv-
se. Ha setu m'hoc'h eus louniet Jeruzalem gant ho keleennadurezh hag
e fell deoc'h lakaat da gouezhañ warnomp gwad an den-se."

- 29 En o respont Pêr hag an Ebestel a lavaras:
" Sentiñ a ranker ouzh Doue kentoc'h eget ouzh an dud.
- 30 Doue hon Tadoh en deus dasorc'het Jezuz, an hini hoc'h eus graet
dezhañ mervel ouzh e lakaat e-pign ouzh ar groaz.
- 31 Hennezh en deus Doue hon savet uhel evel pennrener ha salver, ouzh
hen lakaat en tu dehoù dezhañ e-unan, evit reiñ da Israel an distro-
a-galon hag ar pardon eus ar pec'hedoù.
- 32 Ha ni a zo testoù eus an holl draoù-se, ni hag ar Spered Santel en
deus Doue roet d'ar re a sent outañ."
- 33 O klevout kement-se e skrignjont o dent gant ar goumar hag e raent
o soñj d'o lakaat d'ar marv.

SALM 33 (2,9, 17-18, 19-20).

R: (7a) : Sed ur paour o c'hervel:
Doue a glev anezhañ.

(pe) : ALLELUIA!

- 2 Bennigañ a rin an Aotrou e pep amzer,
Dalc'hmat e veuleudi em genoù.
- 9 Tañvait ha gwelit pegen mat eo an Aotrou,
Eürus an den a fizi c'mañ.
- 17 Dremm an Aotrou a-enep an drougobourien
Da raskañ diwar an douar an eñvor anezho.
- 18 Garmat a reer hag an Aotrou a glev
Hag eus an holl drubuilhoù e vezer saveteet.
- 19 Tost emañ an Aotrou d'ar re glac'haret o c'halon,
Ar re diskaret o spered a saveteio.

ALLELUIA (Paj. 30)

AVIEL

An neb a gred en devez ar vuhez pourbadus.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANN (3. 31-36).

- 31 En amzer-se e lavaras Jezuz da Nikodem:
" An hini a zo o tont eus an nec'h a zo a-us d'an holl; an hini
o tont eus an douar, eus an douar ez eo hag eus an douar e komz.
- 32 An hini o tont eus an Heñv a zo a-us d'an holl; ha war ar pezh en
deus gwelet ha klevet e ro testeni; met e desteni, den ebet n'hen
degener.
- 33 An hini a zegemer e desteni, a sin ez eo gwirion Doue,
34 Rak an hini en deus Doue dogaset, a lavar komzoù Doue, rak hep
muzul obet e ro Doue ar Spered.
- 35 An Tad a gar ar Mab, ha pep tra en deus lakaet etre e zaouarn.
- 36 An hini a gred er Mab en deus ar vuhez pourbadus; met an hini na
sont ket ouzh ar Mab ne welo ket ar vuhez; koumar Doue avat a
chom warnañ."

WAR AR PROFOU:

Ra savo davedoc'h hor pedennoù, Aotrou Doue, a-unan gant ar profou a ginnigomp deoc'h, evit ma c'hellimp ur wech glanaet hor c'halonoù gant ho kras vadelezhus, bezañ e stad da lidañ mistorioù ho karantez vras.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONEIEN AR GOMUNION (Mzh. 28. 20).

Setu m'emaon ganec'h bemdeiz betek fin an amzerioù. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ :

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag hoc'h eus dre Adsav an Aotrou Krist d'ar vuhez, rentet dimp ar vuhez peurbadus, kreskit ennomp eta, ni ho ped, frouezh mister Pask ha skuilhiet en hor c'halonoù an norzh a zeu eus boued ar silvidigezh.

- GWENER -

KAN-DIGERIN: (Disk. 5. 9-10) : Hon dasprenet hoc'h eus, Aotrou, gant ho kvad, eus pep meuriad, eus pep yezh, eus pep pobl hag eus pep bro, ha graet hoc'h eus ganeomp evit hon Doue ur rouantelezh veleien. ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 2:

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus divizet e savfe ho Mab ar Groaz evidomp, evit hon diframmañ eus galloud an enebour, plijet ganec'h eta, reiñ dimp-ni ho servijorion, ar c'hras da gaout lod en e Adsav d'ar vuhez.

Sizhunvezh 4:

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet dimp ar frankiz hag ar silvidigezh, selacuit mouezhioù ar re a zo ouzh ho pediñ, hag ar re hoc'h eus prenet dre Wad ho Mab skuilhiet war ar Groaz, grit dezho bevañ drezoc'h ha kaout ennoc'h da viken ar gwir yec'hed.

Sizhunvezh 6: (Gwener goude Yaou-Bask)

Aotrou Doue, dro Adsav an Aotrou Krist, e lakit ac'hanomp en-dro e stad da c'honit ar vuhez peurbadus, savit eta hor spered war-zu an Hini a zo azezet en tu-dehoù deoc'h, hag a zo evidomp mammenn ar silvidigezh, ha pa zistroio Hor Salvor e-kreiz e c'hloar, grit d'ar re hoc'h eus lakaet da vezañ adganet dre ar Vadeziant, gwiskañ an divarvelezh evurus.

Sizhunvezh 6: (Er broioù e-lec'h ma vez graet Gouel Emsav Hor Salver da sul).

Selacuit, Aotrou Doue, hor pedennoù: grit ma teuo da wir e pep lec'h dre an Aviel ar santelezh hoc'h eus prometet reiñ dre ho Verb, ha lakit ar bed-holl da vezañ degemeret e-touez ho pugale, evel m' en deus hen asuret en a-rack an Hini a zo Gwirionez.

ABOSTOL

Gamaliel, an Doktor brudet, o komer perzh e prosez an Ebestel.

LEINHADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (5. 31-42).

- 34 En deizioù-se e savas unan bennak e-kreiz ar C'huzul-Meur, ur Farizian anvet Gamaliel e oa, doktor eus al Lezenn, enoret gant ar bobl a-bezh. Urzh a roas da lakaat an Ebestel er-maez ur ponnadig.
- 35 Heuze e lavaras da dud ar C'huzul:
" Tud Israel, taolit evezh bras ouzh ar pezh emaeoc'h o vont d'ober e-keñver an dud-se.
- 36 Rak n'eus ket pell e savas Teudaz hag a lavare bezañ un dra bennak, hag a-du gantañ ez eas war-dro pevar c'hant a dud, met lazhet e voe hag ar re holl o devoa lakaet o feiz ennañ a voe stlabezet a-bep tu ha kaset da netra.
- 37 War e lorc'h e teuas Judaz, ar Galilead, en amzer an niveradeg hag a sachas tud d'o heul; hemañ ivez a varvas hag ar re holl o devoa laketa o feiz ennañ, a voe stlabezet.
- 38 Bremañ eta, e lavaran deoc'h : Na soursiit ket ouzh an dud-se, lezit-i eta da vont, rak ma'z eo eus perzh an dud e teu an embregadenn-se, pe al labour-se, ez aio d'an traoñ;
- 39 met ma'z eo eus Doue, ne c'hellot ket o diskar, gant ar riskl ouzhpenn d'en em gaout oc'h ober brezel da Zeue."
Mont a rejont a-du gantañ.
- 40 Gervel a rejont eta an Ebestel en-dro, ha goude bezañ graet o basha-ta, e tifennjont groñs outo komz an anv Jezuz, hag o lezjont da vont kuit.
- 41 Int-i neuze a yeas kuit eus ar C'huzul-Meur, stad vras enno o vezañ na oant bet kavet dellezek da c'housañv dismegañ evit anv Jezuz.
- 42 Ha bemdeiz, en Templ, hag a di da di, ne ehanant ket da gelenn ha da embann ar c'heloù-mat eus Jezuz ar Mesiaz.

SALM 26 (1, 4, 13-14).

R. (4ab): Un dra a c'houlennan gant an Aotrou:
An dra-se a glaskan: bezañ o chom e ti an Aotrou.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 An Aotrou eo va sklerder ha va Salver,
Rak piv am befe aon?
An Aotrou eonorzh va buhez,
Rak piv e spontfen-me?
- 4 Un dra a c'houlennan gant an Aotrou,
An dra-se a glaskan: bezañ o chom e Ti an Aotrou
A-hed va buhez,
Evit tañva dudioù an Aotrou
Hag arvestiñ ouzh e Naved (E DEMPL).
- 13 Cwell a se pa gredan e welin madoù an Aotrou
E Bro ar re Vev.
- 14 Esper en Aotrou, bez kalonek,
Ra vo kreñv da galon, esper en Aotrou.

ALLELUIA (Paj. 30)

AVIEL

Burzhud ar bara kresket.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (6. 1-15).

- 1 En amzer-se e tremenas Jezuz war an tu all eus mor Galilea pe
Vor-Tiberiaz,
- 2 ha war e lerc'h e teus ur bobl vras a dud, dre ma welent ar siniou
(BURZHUDOU) a rae war ar re glañv.
- 3 Pignat a reas Jezuz war ar monez, hag eno eo'h azezas gant e zis-
kibion.
- 4 Tost e oa ar Pask, gouel ar Yuzevion.
- 5 Jezuz, eta, o vezañ savet e zaoulagad, hag o welout e oa ur bobl
vras a dud o tonet war-zu ennañ, a lavar da Filip:
" A belec'h e prenimp-ni bara evit ma tebro ar re-mañ?"
- 6 Evel-se eo e komze evit e aprouiñ, rak eñ a ouie petra edo o vont
d'ober.
- 7 Filip a respontas dezhañ:
" Daou c'hant dinerad bara ne vefont ket a-walc'h evit m'en devefe
pep hini un tamm bihan."
- 8 Hag unan eus e ziskibien, Andreu, breur Simon, da lavarout dezhañ:
" Bez'ez eus ur c'hrennard amañ hag a zo gantañ pemp bara heiz ha
daou besk, met petra eo an dra-se evit komend-all a dud?"
- 10 Neuze e lavaras Jezuz:
" Grit d'an dud mont en o c'hoazez."
Bez'eo oa geot fonnus el lec'h-se. Azezañ a reas an dud eta, ur pemp
mil bennak a wazed anezho.

- 11 Jezuz a gemeras ar baraennoù eta, ha goude ur bedonn a drugarez e
reas anezho d'ar re azezet; heñvel a reas ivez gant ar pesked,
kement ha ma karent.
- 12 Pan o devoa bet o gwalc'h, e lavar Jezuz d'e ziskibion:
" Dastumit an tammoù manet, evit ne daio netra da goll."
- 13 Hag i d'o dastum eta, hag e kargjont daouzek paner gant an tammoù
diwar ar pemp bara-heiz chomet en dilerc'h ar re o devoa debret.
- 14 Hag an dud o welout ar burzhud en devoa graet, a lavare:
" Hemañ eo e gwirionez ar profed a zle donet er bed."
- 15 Jezuz avat, o c'houzout edont o tonet da dapout krog ennañ evit e
lakaat da roue, en em dennas adarre war ar monez e-unan-penn.

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, en ho truez, degomer profoù ho
familh, ma c'hello, skoazellot ha diwallet ganeoc'h, mirout hep koll
anezho ar grasoù he deus resevet diganeoc'h, ha gonit ar madoù peur-
badus.

PR.FLS PASK : Dibab paj. 31-32. (Pe YAOU -BASK , paj. 93).

ANTIFONENN AR KOMUNION (Rom. 4. 25).

Jezuz-Krist, hon Aotrou, a zo bet roet d'ar marv abalamour d'hor
pec'hedoù, hag adsavet eo bet a varv da vev evit ober tud just ha santel
ganimp. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, diwall hep paouez gant karantez ar
re hoc'h eus salvet, ma c'hellint, pa'z int bet dasprenet dre Basion ho
Mab, kaout joa ha levenez abalamour d'e Adsav d'ar vuhez.

- SADORH -

KAN-DIGERIN: (1 Pêr. 2. 9) : Pobl dasprenet, ombannit oberoù gallou-
dus an Hini en deus ho kalvet eus an
deñvalijenn d'e sklerijenn vurzhdus.
ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 2:

Aotrou Doue, c'hwi eo hoc'h eus hon dasprenet ha graet ganimp
ho pугale,
taolit eta ur sell a vadelezh war ho pугale garot,
evit m'o devozo, pa gredont e Jezuz-Krist,
ar gwir frankiz hag ivez an heritaj peurbadus.

Sizhunvezh 4:

Doze hollc'halloudek ha peurbadel,
dalc'hit e pep amzer da beurechuiñ ennomp Mister Pask,
hag ar re a zo bet plijet ganeoc'h reiñ dezho ur vuhez nevez dre
ar Vadeziant,
roit dezho ho sikour hag ho kwarez evit ma tougint frouezh e-leizh
ha ma'z erruint e joaiou ar vuhez peurbadus.

Sizhunvezh 6 (Sadorn goude Yaou-Bask):

Aotrou Doue, pa savas ho Mab d'ar Baradoz, ho poa teurvezet
prometiñ ar Spered Santel d'an Ebestel,
selaouit eta hor goulenn, ni ho ped:
evel m'o devoa an Ebestel o-unan roezet donezonou a bep doare
d'o sklerijennañ war ar goennadurezh santel,
actreit dimp ivez ar roadou speredel.

Sizhunvezh 6 (E-lec'h ma vez lidet Emsav Hor Salver d'ar Sul):

Stummit hor speredou, ni ho ped, Aotrou Doue, dre an oberoù
mat, ma klaskimp mont war wellaat dalc'hmat
en ur lakaat hor poan da gaout hol lod da viken e grasoù Mister
Pask.

LENNADENN 1añ

Urzh an Diagoned savet gant an Ebestel.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (6. 1-7).

- 1 En deizioù-se, o vezañ ma stankae niver an Diskibled, e savas groz-
mol a-berzh ar re a gomze gresianeg a-enep ar re a gomze hebreeg,
dre ma veze lezet a-gostez, er servij pmedeziek, o intañvezed.
- 2 An Daouzek Abostol eta a c'halvas d'un emvod engroez an diskibled,
hag a lavaras:
" N'eo ket mat e tizezfemp ni komz Doue evit servijañ ouzh taol,
3 klaskit eta, Breudeur, en ho touez, seizh den a vrud mat, leun a
4 Spered hag a Furnez, ha ni o lako e penn ar garg-se; ni avat, ez
eo gant ar bedenn ha servij ar Gomz e pledimp."
- 5 Plijout a reas ar c'homzoù-se d'an holl vodadeg, hag e tibajont:
Stefan, un den leun a feiz hag eus ar Spered Santel, Filip, Proko-
roz, Nikanor, Timon, Parmenaz ha Nikolaz hemañ ur prozelit eus
Antioquia.
- 6 O degas a rejont eta d'an Ebestel hag ar re-mañ, goude bezañ pedet,
a astennas warno o daouarn.
- 7 Ha komz Doue a yae war gresk, hag ez ae war stankaat niver an Dis-
kibled, e Jeruzalem, da vat; hag un toullad bras a veleion a sente
ouzh ar feiz.

SALM 32 (1-2, 4-5, 18-19).

R:(22) Ra vozo ho kras warnomp, Aotrou Doue,
peogwir hon esperet ennoc'h.
EUS

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Youc'hit gant al levenez, tud reizh, evit an Aotrou
Ar re eun a zere outo ar veuleudi.
- 2 Meulit Doue gant an deleunnig
Gant an deleunn dek-kordenn, kanneulit-efñ.
- 4 Eeun eo komz an Aotrou,
E holl labour a zo gwirionez.
- 5 Karout a ra reizhded ha justis
Gant karantez Doue eo leun an Douar.
- 18 Setu lagad an Aotrou war ar re hen douj,
War ar re a esper en e garantez.
- 19 Evit tennañ o ene eus ar marv
Hag o bevañ en amzer ar gernez.

ALLELUIA (Paj. 30)

AVIEL

Jezuz a gerzh war ar mor.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (6. 16-21).

- 16 Pa voe deuet an abardaez, e tiskennas e ziskibien betek ar mor;
- 17 hag o vezañ pigmet en ur vag edont o vont d'an tu all eus ar mor,
war-zu Kafarnaoum: erru e oa an deñvalijenn dija, ha ne oa ket
deuet Jezuz d'o c'haout.
- 18 Ar mor avat, gant un avel vras o c'hwezhañ, a save e houlennoù.
- 19 Met goude bezañ roefivet war-hod pemp war-n-ugont pe tregont sta-
denn bennak, e welont Jezuz o kerzhout war ar mor, hag o tostaat
d'ar vag; spontet e voent.
- 20 Hag efñ da lavarout dezho : " Ma eo, n'ho pet ket aon."
- 21 Fellout a rae dezho e gemer ar vag, met kerkent en em gavas ar
vag en aod, el lec'h m'edont o vont.

WAR AR PROFOU:

Taolit ur sell a drugarez, ni ho ped, Aotrou Doue, war ar
profou-mañ evit o santelaat,
ha degemerit sakrifis hor c'halonoù evit ober ganimp ur brofadenn
beurbadus.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32. (Pe YAOU-BASK, paj.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Yn. 17. 24).

Tad, ar re hoc'h eus roet din-me, e fell din ma vofent ivez
el lec'h m'emaon va-unan, evit ma welint ar c'hloar hoc'h eus roet
din. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAN:

Resevet hon eus grasoù ar Sakrifis-mañ, ha bremañ, Aotrou Doue,

e savomp hor pedenn a-galon izel war-zu ennoc'h:
pa reomp ar pezh en deus bet gourc'hemennet dimp ho Mab ober evit
lidañ ar soñj anezhañ,
grit ma talvezo kement-se da greskiñ en hor c'hreiz ar vertuz a
garantez.

=====

= TREDE SUL GOUDE PASK =

=====

K.N-DIGERIÑ : (Salm 65. 1-2) : Youc'hit d'an Aotrou Doue, douar a-bezh,
Kanit gloar d'e anv,
Roit dezhañ ar vrasañ meuleudi. ALLELUIA!

KEMPEDENN :

Rà vo ho pobl dalc'hmat el levenez, Aotrou Doue,
pa'z eo nevesaet yaouankiz an eneoù,
ha bremañ ma'z omp adlakaet e renk gloriuz ho pugale,
roit dimp ar c'hras da c'hortoz gant un esperañs leun a anaoudegezh vat
adsav ar c'horfoù marv d'ar vuhez.

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Aotrou Doue, degemer profoù hoc'h
Iliz el levenez,
ha peogwir ez eo c'hwi hoc'h-unan a zo penn-kaez d'al levenez vras-se,
roit dezhi ivez ar c'hras da dafva un deiz ar joaioù peubadus.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR KOMUNION:

BLOAVEZH A (Lk 24. 35). Diskibion (Emmaus) a anavezaz Jezuz
pa dorras ar Bara. ALLELUIA!

BLOAVEZH B (Luk 26.46-47). Ret e oa d'ar Mesiaz gouzañv poan
hag adsevel a-douez ar re varv,
ha ma vefe embannet en e anv ar
Binijenn hag ar Pardon eus ar pe-
c'hedoù d'an holl bobloù. ALLELUIA!

BLOAVEZH K (Yn. 21. 12-13) Lavarout a reas Jezuz d'e ziskibion:
Deuit da zebriñ. Kemer a reas Bara
hag hen roas dezho. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Taolit ur sell a garantez, ni ho ped, war ho pobl, Aotrou Doue,
ha peogwir ez eo bet plijet ganeoc'h nevesaat anezhañ gant misterioù
peurbadus,
roit dezhañ ar c'hras da gaout un deiz lod e gloar ar c'horfoù marv
oc'h adsevel evit ar vuhez na dremen ket.

-TREDE SIZHUNVEZH GOUDE PASK-

- LUN -

=====

KAN-DIGERIÑ: Adsavet eo ar Pastor-mat d'ar vuhez, eñ hag en devoa
roet e vuhez evit e zeñved hag en devoa prizet mervel
evit e dropellad. ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 3:

Aotrou Doue, evit ma c'hellfe ar re zianket donet en-dro war
an hent mat e tiskouezit dezho sklerijenn ho kwirionez,
roit eta ar c'hras da gement hini a zoug an anv kristen
da zisteurel ar pezh a zo kontrol d'an anv-se hag en em stagañ
ouzh ar pezh a zere outañ.

Sizhunvezh 5:

Aotrou Doue, c'hwi hag a ro da speredoù an dud fidel ar c'hras
da vezañ unanet,
grit d'ho bobloù karout ar pezh hoc'h eus gourc'hemennet,
c'hoantaat ar pezh a brometit,
evit ma vo hor c'halonoù e-touez traoù cheñch-dicheñch ar bed-mañ
troet dalc'hmat war-zu al lec'h m'emañ ar gwir joaioù.

ABOSTOL

Stefan prizoniet ha barnet.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (Ob. 6. 8-15).

- En deizioù-se,
8 Stefan leun a c'hras hag a nerzh, a rae burzhudoù ha sinoù bras
e-touez ar bobl.
9 Het sevel a reas hinienoù eus ar sinagogenn anvet sinagogenn ar
Frankizidi, ar Gurenidi, Aleksandriz ha Tud eus Kilikia hag eus
Azia, hag e krogjont da vreutaat gant Stefan.
10 Met ne c'hellent ket dero'hel penn ouzh ar furnez hag ar Spered
a rae dezhañ komz.
11 Neuze e prenjont tud evit ma lavarjent:
" E glevet hon eus o lavarout komzoù diskar a-enep Moizes hag
a-enep Doue.
12 Isañ a rejont eta ar bobl hag ar Re Gozh, hag ar Skribed; en em
deurel a rejont warnañ ha tapout krog ennañ hag hen kas ganto d'al
lezvarn.
13 Degas a rejont falstestoù hag a lavare:
" An den-mañ ne baouez ket da lavarout traoù a-enep al lec'h santel
hag a-enep al Lezenn.

- 14 E glevet hon eus o lavarout e tiskaro Jezuz a Nazared al lec'h-mañ hag e kenno ar gizioù en deus Moizez roet dimp."
- 15 Hag o vezañ sellet pizh outañ, ar re holl a oa azezet el lezvarn a welas e zremm heñvel ouzh dremm un Ael.

SALM 118 (23-24, 26-27, 29-30).

R:(1a) Eürus ar re didamall o hent

(pe) : ALLELUIA!

- 23 Ha pa azeffe priñsed da guzuliañ a-enep din,
Ho servijer a zalc'h da brederiañ war ho reolennoù
- 24 Ho testenioù, setu va jozioù,
Setu va c'huzulierien din-me.
- 26 Va hentoù am eus kontet ha respontet hoc'h eus.
Deskit din ho reolennoù,
- 27 Hent hoc'h urzhioù, grit din e gompren
Me a brederio war ho purzhudoù.
- 29 Hent ar gevier, distroit-efñ diouzhin
Hag ho Lezenn roit-hi din dre c'hras
- 30 Hent ar wirionez am eus dibabet,
Ho pardedigezhioù am eus c'hoantaet.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Prezegenn war Bara ar Vuhez (Rann gentañ).

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (6. 22-29).

- 22 Antronoz, ar bobl a dud hag a oa chomet en tu all d'ar mor, a daolas pled ne oa bet bag all ebet eno, nemet unan, ha ne oa ket Jezuz aet enni a-unan gant e ziskibien, met e oa aet e ziskibien o-unan-penn war-raok.
- 23 Hogen erruout a reas bagoù eus Tiberiaz tost d'al lec'h m'o devoa debret ar bara, goude ma oa bet lavaret ur bedenn a drugarez gant an Aotrou.
- 24 Pa welas eta ar bobl n'edo ket Jezuz eno, nag e ziskibien kennebeut, e savjont er bagoù hag e teujont da Cafarnaoum en ur glask Jezuz.
- 25 Hag o vezañ e gavet en tu all d'ar mor, e lavarjont dezhañ:
" Rabbi! pegoulz ez out deuet amañ?"
- 26 Ha Jezuz a respontas dezho:
" E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, va c'hlsak a rit neket dre m'hoc'h eus gwelet sinoù, met dre m'hoc'h eus debret eus ar baraennoù ha bet ho kwalc'h."
- 27 Labourit neket evit ar boued a ya da goll, met evit ar boued a bad betek ar vuhez peurbadel, hag a vo roet deoc'h gant Mab-an-Den; rak heñvel eo an hini en deus Doue an Tad merket gant e siell."

- 28 Neuze e lavarjont dezhañ:
" Petra a raimp-ni evit ober oberoù Doue?"
- 29 Respont a reas Jezuz ar c'homsoù-mañ dezho:
" Homañ eo oberenn Doue: kredañ en hini en deus degaset."

WAR AR PROFOU:

Ra savo davedoc'h hor pedennoù, Aotrou Doue, a-unan gant ar profoù a ginnigomp deoc'h, evit ma c'hellimp ur wech glanaet hor c'halonoù gant ho kras vadelezh, bezañ e stad da lidañ misterioù ho karantez vras.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR KOMUNION (In. 14. 27).

Ar peoc'h a lezan ganec'h, va feoc'h a roan deoc'h, met neket evel ma ra ar bed e roan anezhañ deoc'h, eme Hor Salver. ALLELUIA!

COUDE KONUNIAÑ:

Doue Hollc'halloudek ha Peurbadel, c'hwi hag hoc'h eus hon adlakaet e stad da c'honit ar vuhez peurbadus dre an Adsav eus ho Mab, Jezuz, d'ar vuhez, kreskit ennomp, ni ho ped, frouezh Mister Pask, ha skuilhit en hor c'halonoù an nerzh a sav diwar boued ar silvidigezh.

- MEURZH -

KAN-DIGERIN: (Disk. 19. 5; 12. 10): Meñhit hon Doue-ni, c'hwi holl hag hoc'h eus doujañs outañ, bras ha bihan, rak bremañ eo deuet da vir ar silvidigezh, an Nerzh, Rouantelezh Doue ha Galloud e Grist. ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 3:

Aotrou Doue, d'ar re a vez adganet eus an dour hag eus ar Spered e tigorit dor Rouantelezh an Neñvoù, kreskit eta en ho servijerion ar c'hras hoc'h eus roet evit na vo ket ar re a zo bet glanaet eus o fec'hedoù dibourvezet eus hini ebet eus promesaoù hoc'h eus graet dezho dre garantez.

Sizhunvezh 5:

Aotrou Doue, dre an Adsav eus ho Mab d'ar vuhez, hoc'h eus rentet dimp ar vuhez peurbadus, roit eta d'ho pobl ar c'hras da vezañ start er feiz hag en esperañs, evit n'hor bo tamm doustañ ebet e teuy da wir ar promesaoù hoc'h eus graet dimp dre garantez.

ABOSTOL

Prezegenn Sant Stefan d'ar re a oa prest d'e gondaññ.

LENNADEIN TEHNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (7. 51-8. 1a).

- En deizioù-se e lavare Stefan d'ar bobl, d'ar Re-Gozh ha d'ar Skribed:
- 51 " Choukoù reut, kalonoù ha divskouarn diamdroc'h, c'hwi hoc'h eus dalc'hmat enebet ouzh ar Spered Santel. E-giz m'edo ho Tadoù, emaooc'h c'hwi ivez!
 - 52 Pehini eus an diouganerion (BROFEDED) n'o deus ket ho Tadoù heski-
net? Lazhet o deus zoken ar re o devoa degemmet en a-raok donedi-
gezh ar Just, an hini hoc'h eus c'hwi trubardet ha drouklazhet,
 - 53 c'hwi hag hoc'h eus resevet al Lezenn dre vinistrerezh an Aeled ha
n'hoc'h eus ket miret!"
 - 54 O Klevout kement-se e save koummar ruz en o c'halonoù hag e skrignent
o dent a-enep dezhañ.
 - 55 Met eñ leun eus ar Spered Santel, a baras e sell war-zu an Neñv hag
e welas Klod Doue, ha Jezuz en e sav en tu dehoù da Zoue.
 - 56 Hag e lavaras : " Setu ma welan an Neñvoù digor ha Mab-an-Den en e
sav en tu dehoù da Zoue."
 - 57 Youc'hal a rejont a-bouez-penn en ur stoufañ o divskouarn, ha
sailhañ warnañ a-gevret.
 - 58 Hag o vezañ e daolet er-maez eus kêr, e krogjont d'e veinañ. An
testoù a lakas o dilhad e-harz treid ur paotr yaouank anvet Saoul.
 - 59 Meinañ a raent Stefan e-keit ha ma pede ha ma lavare:
" Aotrou Jezuz, degemer va spered!" Hag o taoulinañ e krias gant ur
vouezh kreñv
 - 60 " Na gontit ket ar pec'hed-mañ a-enep dezho."
Hag en ur lavarout kement-se, e varvas.

8 1a Ha Saoul a oa a-du gant an drouklazh anezhañ.

SALM 30 (3cd-4; 6ab, 7b, 8a; 17, 21ab).

R:(6a) : En ho taouarn e fizian va spered.

(pe) : ALLELUIA!

3cd Bezit evidon ur roc'hell difennour

Ur c'hastell din d'en em-saveteiñ

4 Rak va roc'h ha va c'hastell ez oc'h

Abalamour d'hoc'h anv, va renit ha va soutenit.

6ab En ho taouarn e fizian va spered
Va dasprenit, Aotrou, Doue fidel.

7b Evidon-me, en Aotrou emañ va fiziañs.

8a Stad ha levezet a zo ennon gant ho garantez.

17 Sklaerait ho tremm war ho servijer
Va salvit dre garantez.

21ab Gwareziñ a rit dindan varez ho tremm, ar re ho touj,
ouzh troioù-kamm an dud.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Prezegenn war ar Bara a vuhez. Ar gwir Vara a zeu eus an Neñv.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (6. 30-35).

- En amzer-se e lavaras ar bobl da Jezuz:
- 30 " Peseurt sin eta a rez evit ma welimp ha ma kredimp ennon?
Peseurt oberenn a rez-te?
 - 31 Hon Tadoù o deus debret ar mann er gouelec'h, hervez m'eo skrivet:
Bara eus an Neñv a roas dezho da zebriñ."
 - 32 Jezuz a respontas dezho:
" E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, n'eo ket Moizez a
roas deoc'h ar Bara eus an Neñv, met va Zad eo a ro deoc'h ar Bara
eus an Neñv, an hini gwirion.
 - 33 Rak Bara Doue eo an hini a ziskenn eus an Neñv, hag a ro buhez
d'ar bed."
 - 34 Lavarout a rejont eta dezhañ:
" Aotrou, ro dimp e pep amzer ar bara-se."
 - 35 Jezuz a respontas dezho:
" Me eo Bara ar vuhez. An hini a zeu d'am c'haout, n'en devo ket
a naon ken, hag an hini a gred ennon n'en devo ket a sec'hed ken
biken."

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Aotrou Doue, degemer profoù hoc'h
Iliz el levezet,
ha peogwir ez eo c'hwi hoc'h-unan a zo penn-kaoz d'al levezet vras-se,
roit dezhi ivez ar c'hras da dalva un deiz frouezh ar joioù peurbadus.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Rom. 6. 8).

Mar domp bet marvet a-unan gant ar C'hrist,
e kredomp ivez hor bo ar vuhez a-unan gant Jezuz-krist. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAN:

Taolit ur sell a garantez, ni ho ped, war ho pobl, Aotrou Doue,
ha peogwir ez eo bet plijet nevesaat anezhañ gant misterioù peurbadel,
roit dezhañ ar c'hras da gaout un deiz lod e gloar ar c'horfoù marv
oc'h adsevel evit ar vuhez na dremen ket.

- MERC'HER -

KAN-DIGERIN: (Salm 70. 8,23) : Ra vo karget va genoù gant ho meuleudi,
ma c'hellin kanañ,
va muzelloù a drido pa ganin deoc'h.
ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 3:

Selaout, ni ho ped, pedennoù ho familh,
teurvezit stouñ etrezek enni
ha d'ar re hoc'h eus roet gras ar Feiz,
plijet ganeoc'h reiñ dezho lod en Adsav ho Mab d'ar vuhez.

Sizhunvezh 5:

Aotrou Doue, c'hwi a blij ar santelezh hag a rent anezhi en-dro,
renit war-zu ennoc'h kalonoù ho servijerien
ha na lezit ket ar re hoc'h eus tennet eus teñvalijenn an difeiz da
bellaat biken diouzh sklerijenn ho kwirionez.

ABOSTOL

Goude marv Stefan, Paol o terc'hel da wallgas an Iliz.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (8. 1b-8).

- 1b Tarzhañ a reas en deiz-se un heskinadeg vras a-enep an Iliz a oa e Jeruzalem. Holl e voe skignet dre vaezioù Judea ha Samaria, nemet an Ebestel.
- 2 Gwazed devot a seblias Stefan hag a reas kañvoù bras warnañ
- 3 Saoul, e-pad ar c'heit-se, a wallgase an Iliz; mont a rae eus an eil ti d'egile, hag o sachañ dre nerzh paotred ha merc'hed e kase anezho ar prison.
- 4 Evit pezh a sell ar re skignet, ez aent eus an eil lec'h d'egile en ur embann keloù-mat ar Gomz.
- 5 Filip a ziskennas d'ur gêr a Samaria hag a grogas da brezeg dezho ar Mesiaz.
- 6 Hag ar bobl, holl a-unan, a daole evezh bras ouzh an traoù a lavare Filip, diwar e glevout ha diwar welout ar burzhudoù a rae.
- 7 Rak kalz eus ar re a oa speredoù hudur enno, ez ae ar re-mañ er-maez anezho en ur youc'hal a-bouez-penn. Kalz a dud seizet ha kamm a voe pareet.
- 8 Hag e voe kalz a levenez er gêr-se.

SALM 65 (1-3a, 4-5, 6-7a).

R:(1) : Youc'hit d'an Aotrou, douar a-bezh.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Youc'hit d'an Aotrou, douar a-bezh,
Kanit gloar (KLOD) e anv,
Roit dezhañ ar brasañ meuleudi.
- 3a Lavarit da Zoue: Pegen apouronus hoc'h oberoù!
- 4 An douar a-bezh a stou dirazoc'h,
Kanañ a ra, kanañ a ra d'hoc'h anv.
- 5 Deuit da welout labourioù Doue:
Spontus e daolioù-kaer e-kañver mab-den.
- 6 Treiñ a reas ar mor e douar sec'h
Hag ar stêr a dremenjont war o zroad.
Enc hor boa bet levenez e Doue.
- 7a Mestr eo dre e c'halloud da viken.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Jezuz Bara ar Vuhez.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (6. 35-40).

- En amzer-se e lavaras Jezuz da bobl ar Yuzevion:
- 35 " Me eo Bara ar Vuhez. An hini a zeu d'am c'haout, n'en devo ket a naon ken, hag an hini a gred ennon n'en devo ket a sec'hed ken biken.
- 36 Met, lavaret em eus deoc'h, kaer hoc'h eus bet va gwelout, ne gredit ket.
- 37 Kement a ro va Zad din a zeulo davedon; hag an hini a zeu davedon, me n'hen taolin ket er-maez.
- 38 Rak diskennet ez on eus an Neñv neket evit ober va bolontez va-unan, met bolontez an Hini en deus va degaset.
- 39 Ha bolontez an Hini en deus va degaset eo na gollin netra eus ar pezh en deus roet, hogen ma hen adsavin en deiz diwezhañ.
- 40 Rak homañ eo bolontez va Zad: m'en devezo buhez peurbadel, kement hini a wel ar Mab hag a gred ennañ ha ma hen adsavin d'an deiz diwezhañ."

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Aotrou Doue, reiñ dimp ar c'hras da vevañ e levenez, dre nerzh ar Misterioù-mañ a zegas da soñj eus Pask Hor Salver, evit ma c'hello ar sakrifis a vez kinniget hop paouez evit silvidigezh ar bed, bezañ evidomp mammenn ar joa hep fin.

ANTI FONENN AR GOMUNION:

Adsavet eo Hor Salver d'ar vuhez,
hag hor sklerijennet en deus ni hag a zo bet prenet gant e vad. ALLELUIA!
GOUDE KOMUNIAN : Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, selaou hor pedennoù:
grit ma vo an darepredoù santel hon eus gant Mister
hor silvidigezh ur vammenn a sikour evidomp evit buhez ar bed-mañ hag
un arrez eus ar joaioù peurbadus.

KAN-DIGERIN: (Exm. 15. 1-2) : Kanomp d'an Aotrou Doue, rak laket en deus e c'hloar da barañ.
Va nerzh ha va meuleudi ez eo an Aotrou Doue
bet eo va silvidigezh. ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 3:

Doue hollc'halloudek ha peurbadus,
grit dimp santout ho karantez muoc'h eget kustum,
en deizioù-mañ dreist-holl m'hon eus, gant sikour ho kras, hoc'h anavezet gwelloc'h,
evit ma c'hellimp, pa'z omp bet tennet geneoc'h eus teñvalijenn ar gaou, en em stagañ ouzh ar wirionez hoc'h eus diskuilhet dimp.

Sizhunvezh 5:

Aotrou Doue, hon tennet hoc'h eus gant ho kras eus ar pec'hed hag eus ar reuzeudigezh evit reiñ ar santelezh hag an evurusted skoazellit ar re hoc'h eus leuniet gant ho tonezonoù evit ma kendalc'ho ar re a zo bet redet just dre ar feiz, d'ho servijañ betek ar fin.

LENNADENN 1af

Istor servijer Rouanez Etiopia.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (3. 26-40).

- 26 En deizioù-se e lavaras Ael an Aotrou da Filip:
" Sav, ha kae war-zu ar c'hreisteiz betek an hent a ziskenn eus a Jeruzalem da C'haza." (Henezh eo an Hent dizarempred).
- 27 Hag eñ o sevel hag o vont en hent. Hag eñ o welout un den eus Etiopia, un eunuk anezhañ, ministr da Gandake, rouanez Etiopia, hag e penn hec'h holl deizorioù. Hemañ a oa bet e perc'herinded e Jeruzalem, ha bremañ edo war hent ar gêr, azezet en e garr, hag o lenn a vouezh uhel ar profed Izaiaz.
- 29 Ar Spered a lavaras da Filip:
" Tosta, adtap ar c'harr-se!"
- 30 Filip a dostaas d'ar red hag a glevas egile o lenn ar profed Izaiaz.
Hag eñ da lavarout dezhañ:
- 31 " Daoust hag e komprened ar pezh emacut o lenn?
- Penaos, eme hemañ, e c'hellfen-me kompren ma ne zeu den ebet d'am sklerijennañ?" Neuze e pedas Filip da bignat ha da azezañ en e gi-chen.
- 32 Ar pennad eus ar Skritur edo o lenn a oa hemañ:
" Evel un dañvad eo bet kaset d'ar gigerez,
hag evel un oan hag a chom mut dirak an hini e douz,

- 33 evel-se n'en deus ket digoret e c'henoù.
Izelaet eo bet ha n'eus ket bet graet justis dezhañ.
E lignez piv a raio an daolenn anezhi?
Rak lamet eo bet e vuhez diwar an douar."
- 34 " Bremañ eta, eme an eunuk da Filip, lavar din, mar plij, diwar-benn piv e lavar ar profed kement-se? Diwar e benn e-uman, pe diwar-benn unan bennak all?"
- 35 Neuze e stagas Filip da gomz. En ur gregiñ dre ar pennad-se eus ar Skritur, e prezegas dezhañ Kelou-Mat Jezuz.
- 36 Hag evel ma talo'hent gant o hent, ec'h en em gavjont e-lec'h ma oa dour:
" Sell, eme an eunuk, amañ ez eus dour; petra a zo o virout ouzhin da vezañ badezet?"
- 37 Ha Filip da lavarout : " Mar kredez a-greiz da galon, ez eo mat dit." - Kreidiñ a ran, emezañ, ez eo Jezuz-Krist Mab Doue", hag e roas urzh da chom a-sav gant ar c'harr.
- 38 Neuze e tiskennjont o-daou en dour, Filip hag an Eunuk, hag hen badezif a reas.
- 39 Pa voent deuet er-maez eus an dour, Spered Doue a zibradas Filip; hag an Eunuk n'hen gwelas mui hag a zalc'has neuze gant e hent, leun a levonez.
- 40 Ha Filip en em gavas en Azotoz, ha dre ma tremene dre ar vro, e prezege ar C'helou-Mat, en holl gêrioù, betek ma tegouezhas e Kaezaria.

SALM 65 (8-9, 16-17, 20).

R:(1a): Youc'hit d'an Aotrou, douar a-bezh!

(pe) : ALLELUIA!

- 8 Benniget, o pobloù, hon Doue,
Lakit ho mouezh d'e veulif.
- 9 Rentet en deus dimp ar vuhez,
N'en deus ket lezet hon treid da vrallañ.
- 16 Deuit, selaouit ma kontin deoc'h, tud hag a zouj Doue
Ar pezh en deus graet evit va ens.
- 17 War-zu ennañ e krie va genoù,
Uhel e oa e veuleudi war va zeod!
- 20 Ra vo benniget an Aotrou Doue,
N'en deus ket distalet va fedenn,
Hag e garantez diouzhin!

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Ar bara a roin eo va c'horf evit buhez ar bed.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANN (6. 44-51).

- 44 En amzer-se e lavare Jezuz d'ar bobl:
" Den ebet ne c'hell dont davedon nemet an Tad hag en deus va de-

- gaset, hen sachfe; ha me hen adsavo da vev d'an deiz diwezhañ.
- 45 Skrivet eo er Brofeded: 'Holl e vezint kelennet gant Doue'.
Kement hin en deus selaouet an Tad, ha desket e gelennadurezh,
a zeu davedon.
- 46 N'eo ket en defe unan bennak gwelet an Tad, nemet an hini a zo
o tont eus Doue, hennezh hepken en deus gwelet an Tad;
- 47 E gwirionez, e gwirionez, me a lavar desoc'h: an hini a grod en
deus ar vuhez peurbadel.
- 48 Me eo Bara ar Vuhez.
- 49 Ho Tadoc'h o deus debret er gouelec'h ar manna, hag a zo marvet.
- 50 Evel-hen omañ ar Bara a ziskenn eus an Neñv: an hini a zebr dicoutañ
ne vary ket.
- 51 Me eo ar Bara bev a zo diskennet eus an Neñv. An neb a zebr eus ar
Bara-se, a vevo da viken; hag ar Bara a roin eo va c'horf evit bu-
hez ar bed."

WAR AR PROFOU:

Aotrou Doue, dre ar goñvers santel m'eo ar sakrifis-mañ hoc'h
eus graet dimp kacut lod en ho natur-Doue, O Doue Neurbet-Uhel ha Doue
nemetañ,
roit dimp ar c'hras, eta, ni ho ped, neket hepken da anaout ho kwirio-
nez evel ma reomp dija, met ivez d'he zizhout dre ur vuhez vat.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR KOMUNION (Kor. 2. 5,15)

Evit an holl dud ez eo bet marvet Jezuz-Krist,
evit na vevo mui ar re a zo bev, evito o-unan,
met evit an Hini a zo bet marvet hag adsavet a varv da vev evito.
ALLELUIA!

GOUE KOMUNIAN:

Sikourit ho pobl, gant madelezh, Aotrou Doue,
ha peogwir hoc'h eus maget anezhañ gant Sakramant santel an aoter,
grit dezhañ dilezel an traoù kozh evit tizhout ar vuhez nevez.

- GWENER -

KAN-DIGERIN: (Disk. 5. 12) : Din (pe: DELLEZEK) eo an Oan a zo bet
lazhet, da resev galloud ha pinvidigezh,
furnez ha nerzh, hag enor. ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Sizhunvezh 3:

Ni ho ped, Doue Hollc'halloudek,
p'hon eus ar c'hras da anavezout Adsav Hor Salver d'ar vuhez,

grit dimp eta, dre garantez ar Spered Santel, adsevel d'ur vuhez
nevez.

Sizhunvezh 5:

Roit dimp hor goulen, ni ho ped, Aotrou Doue:
tre m'emaomp o lidañ Misterioù Santel Pask,
lakit ac'hanomp er stad a zere outo,
ma vint gant o nerzh peurbadus difenn ha silvidigezh evidomp.

LENNADENN 1-añ

Distro Sant Paol d'ar Feiz.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (9. 1-20).

- 1 En deizioù-se, Saoul, atav o tialaniñ gourdrour ha lazhadeg a-enep
diskibled an Aotrou, a yeas da gaout ar Beleg-Meur
- 2 hag a c'houlennas digantañ lizheroù evit sinagogennoù Damask evit
gallout, mar kavje hiniennoc'h o heuliañ an Hent (Nevez), paotred
ha merc'hed, o degas chadennet da Jeruzalem.
- 3 P'edo c'hoazh war an hent hag o tostaat da Zamask, a-daol-trumm e
luc'has en-dro dezhañ ur sklerijenn eus an Neñv.
- 4 Kouezhañ a reas d'an douar hag e klevas ur vouezh hag a lavare
dezhañ:
" Saoul! Saoul! Perak am heskinez?
- Lavar din, emezañ, piv ez out Aotrou!"
Hag eñ a respontas:
- 6 " Me eo Jezuz, an hini a heskinez. Met sav ez sav, ha kae e kêr,
ha lavaret e vo dit petra ac'h eus da ober."
- 7 Ar wazed hag a oa gantañ o veajiñ, a oa chomet a-sav, dilavar:
klevout a raent a-walc'h ar vouezh, den avat ne welent
- 8 Sevel a reas Saoul diwar an douar, hag eñ digor e zaoulagad gantañ,
ne wela banne. Ouzh o ren war-bouez an dorn, e kasjont anezhañ da
Zamask.
- 9 Chom a reas tri devezh hep gwelout, ha ne zebras na ne evas.
- 10 Bez'e oa un diskibl, e Damask, e anv Ananias. Hag e lavaras dezhañ
an Aotrou en ur veledigezh:
" Ananias!"
Hag homañ a respontas:
" Setu me amañ, Aotrou."
- 11 An Aotrou a lavaras dezhañ:
" Sav! Kae d'ar straed a vez graet anezhi ar Straed Beun, ha gou-
lenn e Ti Youda un den eus Taroaz anvet Saoul. Setu m'emañ o pedifi,
ha gwelet en deus en ur veledigezh un den anvet Ananias oc'h antreal
hag oc'h astenn e zaoarn warnañ evit rentiñ ar gwelod dezhañ."
- 13 Met Ananias a respontas:
" Aotrou, klevet em eus gant meur a hini, diwar-benn an den-se,
pegement a zroug en deus graet d'az tud santel, e Jeruzalem.
- 14 Hag amañ emañ gant ar galloud a-berzh ar veleien-vras da lakaat er
chadennoù kement hini a bed da anv."
- 15 Met an Aotrou a lavaras dezhañ:
" Kae, rak ur benveg eus an dibab eo hennezh, da zougen va anv dirak

- 16 ar Baganed, dirak ar Rouaned ha Bugale Israel.
Me va-unan a ziskouszo dezhañ kement a vo ret dezhañ gouzañv evit va anv."
- 17 Mont a reas Ananias eta; antreal a reas en ti hag e lakaas e zaouarn war Saoul hag e lavaras:
" Saoul, va breur, an Aotrou en deus va degaset, Jezuz, an hini a zo en em ziskouszet dit war an hent edos o tont gantañ, evit ma weli adarre, ha ma vi leuniet gant ar Spered Santel."
- 18 Ha kerkent e kouezhas eus e zaoulagad evel skant, hag ec'h adkavas ar gweled.
Neuze e savas hag e vos badezet.
- 19 P'en devoa kemeret boued, e teuas nerzh dezhañ. Chom a reas gant an diskibled a oa e Damask, un nebeut deizioù.
- 20 Ha kerkent en em lakas da brezeg, er sinagogennoù, diwar-benn Jezuz, oc'h embann ez eo Eñ Mab-Doue.

SALM 116 (1, 2).

R: (Mark 16. 15) : It dre ar bed-holl, prezegit an Aviel.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Meulit an Aotrou, c'hwi-holl, broadoù,
Meulit-efñ, c'hwi-holl, pobloù.
- 2 Rak kreñv eo evidomp e garantez,
Fidel eo an Aotrou da viken.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Va c'horf a zo boued e gwirionez ha va gwad a zo evaj e gwirionez.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (6. 52-59).

- 52 En amzer-se e tabute ar Yuzevion kenetrezo hag e lavarent:
" Pennaos e c'hell hemañ reiñ dimp e gorf da zebriñ?"
- 53 Lavarout a reas eta Jezuz dezho:
" E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h: mar ne zebrit ket korf Mab-an-Den, ha mar ne evit ket e wad, n'ho pet ket ar vuhez ennoc'h."
- 54 An neb a zebr va c'horf hag a ev va gwad en deus buhez peurbadel, ha me e zasorc'ho d'an deiz diwezhañ.
- 55 Rak va c'horf a zo magadurezh wirion, ha va gwad a zo evaj gwirion;
- 56 An hini a zebr va c'horf hag a ev va gwad a chom ennon ha me ennañ.
- 57 Evel m'en deus an Tad hag a zo bev va degaset, hag evel ma vevan dre an Tad, evel-se an neb am zebr, a vevo eñ ivez drezon-me.
- 58 Evel-se emañ ar bara diskennet eus an Nefiv. N'emañ ket evel an hini o deus debret ho Tadoù ha n'en deus ket miret outo da vervel; an neb a zebr ar bara-mañ a vevo da virviken."

WAR AR PROFOU:

- Resevet hon eus grasoù ar sakrifis-mañ, ha bremañ, Aotrou Doue, e savomp hor pedenn war-zu ennoc'h gant ur galon-izel: pa reomp ar pezh en deus gourc'hemennet dimp ho Mab ober evit lidañ ar soñj anezhañ,
grit ma talvezo kement-se da greskiñ en hor c'hreiz ar vertuz a garantez.

- Taolit ur sell a drugarez, ni ho ped, Aotrou Doue, war ar profoù-mañ evit o santelaat, ha degemerit sakrifis hor c'halonoù evit ober ganimp ur brofadenn beurbadus.

PREPAS PASK : Dibab Paj. 31-32.

ANTIFONENN AR KOMUNION:

An Hini a zo bet staget ouzh ar Groaz a zo adsavet a varv da vev, hag en deus hon dasprenet. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Resevet hon eus grasoù ar Sakrifis-mañ, ha bremañ, Aotrou Doue, e savomp hor pedenn a-galon-izel war-zu ennoc'h: pa reomp ar pezh en deus bet gourc'hemennet dimp ho Mab ober evit lidañ ar soñj anezhañ,
grit ma talvezo kement-se da greskiñ en hor c'hreiz ar vertuz a garantez.

- SADORN -
=====

KAN-DIGERIÑ: (KoL. 2. 12) : Beziet ez oc'h bet a-unan gant an Aotrou Krist dre ar Vadeziant,
evit sevel a varv da vev,
hag ivez dre ar feiz e galloud nerzhus
Doue en deus graet dezhañ sevel a-douezh ar re varv.

KEPEDENN:

Sizhunvezh 3:

Aotrou Doue,
C'hwi hag hoc'h eus roet dre zour ar Vadeziant ur vuhez nevez d'ar re a gred ennoc'h,
plijet ganeoc'h gwarezñ ar re a zo bet ganet a-nevez en Aotrou Krist,
en doare ma vint trec'h da holl dagadennoù ar falskredennoù ha ma virint fidel gras ho pennozh.

Sizhunvezh 5:

Deus hollc'hallowdek ha peurbadel,
C'hwi hag hoc'h eus prizet rañf dimp buhez an Meñv dre
eil c'hannedigezh ar Vadeziant,
roit ar c'hras, ni ho ped, d'ar re hoc'h eus lakaet gouest da
gout ar vuhez divarvel, da erruout, heñchet ha renet gameoc'h
betek ar c'hloar en he leunder.

LENNADENN 1-añ

Burzhuoù gant Sant Pêr: Den seizet Lidda. Tabita dasorc'het.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (9. 31-42).

- 31 En deizioù-se, an Iliz dre Judea, Calilea ha Samaria a-bezh a oa e peoc'h. Sevel a rae e-giz un ti ha bevañ a rae e doujañs an Aotrou ha gant kennerzh ar Spered Santel ez ae war gresk.
- 32 Dichañs a reas da Bêr hag a veze o vont hag o tont dre ar broioù-se, diskenn e ti an dud fidel a oa o chom e Lidda.
- 33 Eno e kavas un den anvet Aeneaz hag a oa, abaoe eizh vloaz, astennet war un gwele, gant ar seizi.
- 34 Ha Pêr o lavarout dezhañ:
" Aeneaz, Jezuz-Krist a ro dit ar pare. Sav ez sav ha gra da wele da-unan", ha kerkent e voe en e sav.
- 35 An holl dud hag a oa o chom e Lidda hag e Saron, hen gwelas hag en em dross ouzh an Aotrou.
- 36 E Yoppe e oa e-touez an diskibien ur vaouez anvet Tabita (e gresianeg Dorkas, da lavarout eo Gazelenn). Karget e oa a oberoù-mat hag a aluzenou graet ganti.
- 37 En deizioù-se e kouezhas klañv hag e varvas.
Ha goude bezañ he gwalc'het, e voe lakaet en ur gambr war-laez.
- 38 Evel m'emañ tost Lidda da Yoppe, an diskibion o klevout edo Pêr eno, a gasas daou zen betek ennañ d'ober ar c'houvi-mañ dezhañ:
" Deus du-mañ hepdale!"
- 39 Ha Pêr kerkent en hent ganto.
Diouzhtu ma voe en em gavet, e voe graet dezhañ mont d'ar gambr war-laez; an holl intañvezed en ur ouelañ en em zastumas en-dro dezhañ hag a ziskouezas dezhañ ar saeoù hag ar mantilli a rae Dorkas p'edo ganto.
- 40 Pêr a lakaas an holl dud er-maez, ha neuze ez eas war e zaoulin da bediñ. O treifiñ etrezek ar c'horf e lavaras:
" Tabita, sav alese!"
Hag hi o tigeriñ he daoulagad, ha pa welas Pêr ez eas en he c'hoazez.
- 41 Pêr o tapout krog en he dorn a reas dezhi sevel. Gervel a reas neuze an dud fidel hag an intañvezed hag he diskouezas dezho bev-mat.
- 42 Anavezet e voe kement-se dre gêr-Yoppe a-bezh, hag e kredas kalz a dud en Aotrou.

SALM 115 (12-13, 14-15, 16-17).

R:(12): Petra a rentin-me d'an Aotrou
Evit an holl vad en deus graet din?

- 12 Petra a rentin-me d'an Aotrou
Evit an holl vad en deus graet din?
- 13 Kalir ar silvidigezh a gemerin
ag anv an Aotrou a bedin.
- 14 Va gouestloù d'an Aotrou a sevenin
Dirak ar bobl a-bezh.
- 15 Prizius eo ouzh daoulagad an Aotrou
Narv e vignoned.
- 16 O, Aotrou, ho servijer ez on,
Ho servijer ha mat ho servijerez
- 17 Dibrennet hoc'h eus va hualoù
Ur sakrifis a veuleudi a ginnigin deoc'h,
Hag anv an Aotrou a bedin.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Prezegenn war Bara ar Vuhez. Grozmol a-berzh darn eus an diskibien ha feiz darn all.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT Yann (6. 60-69).

- 60 Kalz eus e ziskibien o klevout (Jezuz) a lavaras:
" Kalet eo ar gomz-se, piv a c'hell klevout anezhi?"
- 61 Met Jezuz o c'houzout ennañ e-unan e c'hrozmoles e ziskibien diwar-benn an dra-se a lavaras dezho:
" Ur skoilh evidoc'h eo kement-se?"
- 62 Mar gwelfec'h neuze Mab-an-Den o pignat d'al lec'h m'edo diagent?..
- 63 Ar spered eo a re ar vuhez; ar c'horf ne servij da netra. Ar c'homzoù am eus-me lavaret deoc'h a zo spered hag a zo buhez.
- 64 Met bez'ez eus en ho touez, hiniennou ha na gredont ket." Rak gout a ouie Jezuz adalek ar penn-kentañ pere a oa ar re na gredent ket ha piv a oa an hini a zlee hen gwerzhañ.
- 65 Ha lavarout a rae : " Setu perak em eus lavaret deoc'h ne c'hell nikun donet davedon, mar n'eo ket bet roet kement-se dezhañ gant va zad."
- 66 Diwar neuze, kalz eus e ziskibien a yeas war o c'hiz, hag a baouezas da vont gantañ.
- 67 Jezuz a lavaras eta d'an Daouzeg:
" Ha c'hwi ivez, ha ne fell ket deoc'h mont kuit?"
- 68 Respont a reas Simon-Pêr dezhañ:
" Aotrou, da gaut piv ez afeomp? Komzoù ar vuhez peurbadus a zo ganit.
- 69 Evidomp-ni hon eus kredet hag anavezet ez out-te ar Sant eus Doue."

WAR AR PROFOU:

Plijet gameoc'h, Aotrou Doue, en ho truez, degemer profoù ho familh,

ma c'hello, skoazellet ha diwallet ganeoc'h, mirout hep koll anezho ar grasoc'h eus resevet diganeoc'h, ha gonit ar madoù peurbadus.

ANTIFONEENN AR KOMUNION (Yn. 17. 20-21):

Tad, ho pediñ a ran evit ma vezint unan ennomp-ni, evit ma kredo ar bed ez eo Te ac'h eus va degaset, eme Hor Salver. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, diwall hep paouez gant karantez, ar re hoc'h eus salvet, ma c'hellint, pa'z int bet dasprenet dre Basion ho Mab, kaout joa ha levezeg abalamour d'e Adsav d'ar Vuhez.

-PEVARE SUL GOUDE PASK-
SUL AR PASTOR

KAN-DIGERIÑ: (Salm 33. 5-6): Leun eo an douar gant karantez Doue, dre an Aotrou Doue ez eo bet diazezet start an Neñvoù. ALLELUIA!

KEMPEDEENN:

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, renit ac'hanomp d'ar joaiou peurbadus, evit ma c'hello deñved dinerzh ho tropellad erruout el lec'h m'eo aet a-raok dezho ar Pastor Nerzhus.

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Aotrou Doue, reiñ dimp ar c'hras da vevañ el levezeg dre nerzh ar Misterioù-mañ a zegas da soñj eus Pask Hor Salver, evit ma c'hello ar sakrifis a vez kinniget hep paouez evit silvidigezh ar bed, bezañ evidomp mammenn ar joa hep fin.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONEENN AR KOMUNION:

Adsavet eo ar Pastor Mat en devoa roet e vuhez evit e zeñved, hag en devoa teurvezet mervel evit e dropell.

GOUDE KOMUNIAÑ:

Taolit ur sell a garantez, Aotrou Doue, war zeñved ho tropell, ha peogwir hoc'h eus o salvet dre wad priziuz ho Mab, plijet ganeoc'h o lakaat da ziskuizhañ da virviken e pradoc'h glas ar Baradoz.

-PEDERVET SIZHUNVEZH GOUDE PASK-

- LUN -

Kan-digeriñ, Kempedenn evit ar sizhunvezh 4: gwelout paj. 28.

LENNADENN 1-añ

Badeziant an ofiser roman, ar c'hantener Kornelius.

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (11. 1-18).

- 1 En deizioù-se e klevas an Ebestel hag ar Breudeur a oa e Judea, o devoa ar Baganed ivez degemeret Komz Doue.
- 2 Met pa voe savet Pêr en-dro da Jeruzalem, e krogas ar re a oa an androc'hidi da dabutal gantañ:
- 3 " Bet out antreet e ti tud diamdroc'h, emezo, ha debret ac'h eus ganto."
- 4 Pêr neuze a stagas da zisplegañ dezho an traoù dre ar munud:
- 5 " Me, emezañ, a oa e kêr-Yoppe, o pediñ, ha me, goursavet a spered, a welas ur weledigezh: un dra bennak o tiskenn eus an Neñv hag a seblante bezañ un doubier vras o tonet d'an traoù, dalc'het war-bouez ar pevar c'horn anezhi, hag a zeuas betek ennon.
- 6 Ha me o sellout pizh outi hep tennañ lagad ebet diwami, a welas enni loened pevarzroadek an douar, al loened gouez, al loened-stlej ha laboused an Neñv.
- 7 Neuze e klevis ur vouezh o lavarout din:
- 8 " Sav, Pêr, laz ha debr."
- 9 Met respont a ris:
- 10 " Tamm ebet, Aotrou, rak tra hudur pe zic'hlan biskoazh n'eo aet em genoù."
- 11 Evit an eil gwech avat, e lavaras ur vouezh eus an Neñv:
- 12 " Ar pezh en deus Doue diskleriet glan, arabat dit her sellout evel dic'hlan."
- 13 Kement-se a c'hoarvezas a-benn teir gwech, ha neuze e voe sachet en-dro an holl traoù d'an Neñv.
- 14 Ha setu war an taol, tri den oc'h erruout dirak an ti m'edomp hag a oa bet degaset eus Kaezarea betek ennon.
- 15 Hag e lavaras ar Spered din-me mont ganto hep chom en entremar. Ganin-me ez eas ivez ar c'hwec'h breur-mañ hag oc'h antreomp e ti an den.
- 16 Hemañ a gontas dimp penaos e welas an Ael en e di ouzh en em ziskouez dirazhañ hag o lavarout:
- 17 " Kas tud da Yoppe da gere'hat Simon, an hini lesanvet Pêr.
- 18 Hemañ a lavaro dit ar c'homzoù a zegaso ar silvidigezh dit-te ha d'az tiegezh a-bezh."
- 19 Met a-boan ma oa krog da gomz ma kouezhas ar Spered Santel warno, evel ma oa kouezhet warnomp-ni, er penn-kentañ.
- 20 Neuze e teuas da soñj din eus ~~ar Komz~~ Komz an Aotrou hag a lavare:
- 21 " Yann en deus badezet gant dour, c'hwi avat, a vo badezet gant ar Spered Santel."

- 17 P'en devoa Doue eta roet dezho an hevelep donezon hag hor boa bet hon-unan pa 'z omp deuet da grediñ en Aotrou Jezuz-Krist, petra oan-me evit enebif ouzh Doue?
- 18 O klevout kement-se e sioulaas o spered; hag e rejont klod da Zoue en ur lavarout:
" Neuze'ta d'ar Baganed zoken en deus Doue roet an distro-a-galon a gas d'ar vuhez."

SALM 41 (2-3); 42 (3-4).

R:(41,3a): Sec'hed en deus va ene eus Doue, an Doue bev.

(pe) : ALLELUIA!

- 41. 2 Evel heizez gant c'hoantadenn gwazhioù-dour Emañ va ene gant c'hoantadenn Doue.
- 3 Sec'hed en deus va ene eus Doue, an Doue bev, Feur ez in da welout Dremm Doue?
- 42. 3 Degasit ho sklêrder hag ho kwirionez, Ar re-mañ am reno hag am c'haso, D'ho Menez Santel, D'an Ti e-lec'h m'emaoc'h o chom.
- 4 Ha me a yelo etrezek aoter va Doue, Davet va Doue a zo va joa ha va levenez. Ha me ho meulo gant an delenn, O Doue, va Doue!

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Parabolenn ar Pastor Mat.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (10. 1-10).

- En amzer-se e lavaras Jezuz:
- 1 " E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, an hini na zeu ket dre an nor e kraou an deñved, met a bign dre ul lec'h all, hennezh a zo ul laer hag ur forbann.
- 2 Met an hini a zeu e-barzh dre an nor eo mesaer (PASTOR, BUGUL) an deñved.
- 3 Dezhañ e tigor ar porzhier hag an deñved a glev e vouezh, hag e zeñved dezhañ e-uman o gervel a ra war-bouez o anv, hag e kas anezho er-maez.
- 4 Ha p'en devez lakaet er-maez kement hini a zo dezhañ, e kerzh en o rack, hag an deñved a ya war e lerc'h dre ma'z anavezont e vouezh.
- 5 An diavaezour avat, ne deont ket war e lerc'h; hogen tec'hel a reont dioutañ dre n'anavezont ket mouezh an diavaezourion."
- 6 Ar parabolenn-se a lavaras Jezuz dezho, met ar re-mañ ne ententjont ket petra a oa dindan ar pezh a lavare.

- 7 Ha Jezuz da lavarout dezho adarre:
- " E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h: me eo dor an deñved.
- 8 Ar re holl, hag a zo bet deuet a-rack din a zo laeron ha forbanned anezho: met an deñved n'o deus ket o selacuet.
- 9 Me eo an nor. An neb a yelo e-barzh drezon a vo salvet. Mont a raio e-barzh, mont a raio er-maez, ha peurif a gavo. Al laer avat, ne zeu nemet evit c'hwipañ (LAEREZH), lazhañ ha distrujañ; me a zo deuet evit ma o devezo buhez, ha ma o devezo anezhi dreist-muzul."

AVIEL BLOAVEZH A

E-lec'h an Aviel a-us e vo tu da gemerout ar pennad-mañ, er bloavezh A, dre ma vez lennet egile da sul.

Diskloriadur Parabolenn ar Pastor Mat.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (10. 11-18).

- 11 En amzer-se e lavaras Jezuz:
- " Me eo ar Pastor Mat. Ar Pastor Mat a ro e vuhez evit e zeñved.
- 12 Met ar gopread, an hini n'eo ket pastor ha n'eo ket an deñved dezhañ, pa wel ar bleiz o tonet, a zilez an deñved hag a dec'h kuit; hag ar bleiz a dap krog enno hag o stlabez a bep tu, rak ur gopread n'eo ken, ha n'eo ket nec'het gant an deñved.
- 13 Me eo ar Pastor Mat; anaout a ran va deñved-me ha va re-me am anavez,
- 14 evel m'am anavez an Tad ha ma'z anavezan-me ivez an Tad; ha va buhez a roan evit va deñved.
- 15 Deñved all am eus ha n'int ket eus ar c'hloz-mañ, ar re-se ivez eo ret din o degas e-barzh; ha va mouezh a glevint ha ne vo neuze nemet ur bagad hag ur pastor hepken.
- 16 En abeg da gement-mañ e kar an Tad ac'hanon-me; dre ma roan va buhez evit he c'hemerout a-nevez.
- 17 Den ebet n'he lam diganin, met he reif a ran ac'hanon va-uman; ar galloud am eus d'he reif hag ar galloud d'he c'hemerout a-nevez. Hennezh eo ar gourc'hemenn am eus bet digant va Zad."

WAR AR PROFOU : Gwel. paj. 31

PREFAS PASK : Dibab Paj. 31-32.

ANTIFONENN AR KOMUNION ha GOUDE KOMUNIAN : Paj. 32

- NEURZH -

KAN-DIGERIN, KEMPEDENN evit ar sishunvezh 4: gwelout paj. 33.

LENNADENN 1-añ

An Iliz diazezet e kêr-Antiokia.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (11. 19-26).

- En deizioù-se,
- 19 ar re a oa bet strewet (SKIGHET) da geñver an drubuilhadeg savet e-skeud Stefan, a yeas betek Feniko, Kiprenez ha kêr-Antiokia, en ur zisplegañ ar Gorn da zen all ebet nemet d'ar Yuzevion hepken.
 - 20 Bez'e oa koulskoude en o zouez un nebeut Kipriz ha Kirenaiz deuet betek Antiokia hag a gomze ivez ouzh ar C'hresianed en ur zegemenn dezho Keloù-Mat an Aotrou Jezuz.
 - 21 Dorn Doue a oa ganto ha bras e voe niver an dud a gredas hag en em droas ouzh an Aotrou.
 - 22 Donet a reas ar c'heloù betek divskouarn Iliz Jeruzalem, hag e voe kaset Barnabaz da Antiokia.
 - 23 P'en em gavas eno ha pa velas ar c'hras bet roet gant Doue, e voe laouen hag o atizas holl da chom gant ur galon start fidel d'an Aotrou,
 - 24 rak un den mat e oa ha leun eus ar Spered Santel hag a feiz. Hag un niver bras a dud en em stagas ouzh an Aotrou.
 - 25 Neuze ez eas Barnabaz da Darsos da glask Saoul.
 - 26 Ha p'en devoe e gavet, e tegasas anezhañ da Antiokia. E-pad ur bloavezh penn-da-benn e vevjont dorn-ouzh-dorn evel ostizien an Iliz, hag e kelennjont ur bobl vras a dud. En Antiokia eo e voe roet da gentañ d'an diskibien an anv a Gristenien.

SALM 86 (1-3, 4-5, 6-7).

R:(116,1a): Meulit an Aotrou, c'hwi holl, broioù!

- (pe) : ALLELUIA!
- 1 War ar Menezioù Santel emañ diazez kêr-Doue,
 - 2 An Aotrou a gar dorojoù Sion muioc'h eget holl chomajoù Yakob.
 - 3 Traoù klodus a lavarer diwar da benn, o kêr Doue!
 - 4 Kontañ a ran Rac'hab ha Babilon
E-touez ar re anavez.
 - 5 Setu, Filistia, Tir hag Etiopia
Hen-ha-hen a zo ganet eno.
 - 6 Met evit Sion a lavarer: an Den-mañ-Den a zo ganet omni
An hini en deus he lakaet divrall eo an Uheleñ.
 - 7 An Aotrou a gont en ur enskrivañ ar pobloù:
" Hen-ha-hen a zo ganet eno."
 - 8 Kanerion ha muzikerion!
Va holl andonioù a zo ennout.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Da Ouel an Dedi: Jezuz o reñ a-nevez testeni diwar e benn e-unan, evel Mesiaz ha Doue.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANN (10. 22-30).

- 22 En em gaout a reas d'ar mare-se Gouelioù an Dedi, e Jeruzalem; hag ar goañv a oa anezhi.
- 23 O vont hag o tont edo Jezuz en Templ, dindan borched Salomon.
- 24 En em zastum a reas eta ar Yuzevion tro-war-dro dezhañ, hag e lavarjont dezhañ:
" Betek pegoulz e talc'hi hor spered en entremar?
Mar dout-te ar Mesiaz, lavar dimp sklaer."
- 25 Ha Jezuz da respont dezho:
" Lavaret em eus deoc'h, met ne gredit ket; an oberoù a ran en anv va Zad, ar re-se a ro testeni diwar va fenn.
- 26 Met c'hwi ne gredit ket dre ma n'oc'h ket eus va deñved.
- 27 Va deñved a selaou va mouezh; ha me o anavez hag int-i a zeu war va lerc'h;
- 28 reñ a ran dezho ar vuhez peurbadus; ha ne daint da goll biken, ha den ebet n'o diframmo eus va dorn.
- 29 Va Zad hag en deus o roet din-me a zo brasoc'h eget an holl, ha den ebet ne c'hell o diframmañ eus dorn va Zad.
- 30 Va Zad ha me a zo unan."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 35.

PREFAS PASK : Dibab Paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ : paj. 35.

- MERC'HER -
=====

KAN-DIGERIN, KEMPEDENN evit ar sizhunvezh 4: gwelout paj. 35.

LENNADENN 1-añ

Damskeud eus buhez an Iliz e kêr-Antiokia. Barnabaz ha Saoul kaset da visioniñ.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (12. 24; 13. 5a).

- 24 En deizioù-se e kreske hag en em leda Komz Doue.
- 25 Barnabaz ha Saoul a zistroas eta diouzh Jeruzalem, kaset ganto da benn o c'hefridi, en ur zegas ganto Yann lesanvet Mark.

- 13
- 1 Bez e oa en Iliz diazezet en Antiokia, profedet ha doktored: Barnabaz, Simeon lesanvet Niger, Lukioz eus Kirena, Manahen bet savet a-unan gant Herodez, an Tetrac'h, ha neuze Saul.
 - 2 Hogen un deiz m'edont o lidañ servij-sakr an Aotrou hag o yun, e lavaras ar Spered Santel dezho: "Lakit eta din a-gostez Barnabaz ha Saoul evit al labour am eus o galvet da ober."
 - 3 Neuze, goude bezañ yunet ha pedet ec'h astennjont o daouarn warno hag o lezjont da vont en hent.
 - 4 Ar re-mañ eta, kaset da visioniñ gant ar Spered Santel, a ziskennas da Seleukia hag ac'hano e kemerjont ar vag betek Kiprenez.
 - 5 Ha pa voent erruet e Salamiz ec'h en em lakjont da embann Komz Doue, e sinagogennoù ar Yuzevion.

SALM 66 (2-3, 5, 6 & 8).

R:(4) : Ar pobloù d'ho meulo, o Doue!
An holl bobloù d'ho meulo!

(pe) : ALLELUIA!

- 2 Doue da gaout ouzhimp truez ha d'hor bennigo,
Ra lugernio seder e zremm warnomp.
- 3 Ra vo anavezet e Lezenn war an douar
Ha dre an holl vroioù, e silvidigezh.
- 5 Joa ha levenez d'an holl vroioù,
Dre ma renit gant justis
Ha ma c'houarnit ar broioù
War an douar!
- 6 Ar pobloù d'ho meulo, Aotrou Doue!
An holl bobloù d'ho meulo.
- 8 Doue d'hor bennigo,
An douar a-bezh d'e zoujo!

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

"Evel sklerijenn ez on deuet er bed-mañ."

+ PENNAD TENNET EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (12. 44-50).

- 44 En amzer-se, Jezuz a grias gant ur vouezh krefiv:
" An hini, emezañ, a gred ennon, n'eo ket ennon-me eo e kred, met en Hini en deus va degaset,
- 45 hag an hini am gwel, a wel an Hini en deus va degaset.
- 46 Me, ez eo evel sklerijenn ez on deuet er bed-mañ, evit na chomo ket en deñvalijenn hini ebet eus ar re a gred ennon.
- 47 Mar deus unan bennak a glev va c'homzoù, ha n'o mir ket, n'eo ket me hen barn, rak ne dcn ket deuet evit barn ar bed, met evit salviñ ar bed.

- 48 An hini am distaol kuit ha na zegemer ket va c'homzoù a gavo unan d'e varn: ar gomz am eus lavaret, honnezh eo hen barno d'an deiz diwezhañ.
- 49 Rak n'eo ket dre va galloud va-unan eo am eus komzet, met an Tad hag en deus va degaset, en deus e-unan gourc'hemennet din petra da lavarout ha penaos komz.
- 50 Ha gouzout a ran ez eo e c'hourc'hemenn buhez peurbadus. An traoù a lavaran eta, a lavaran evel m'en deus an Tad o lavaret din."

WAR AR PROFOU : Gwel. paj. 37.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONEH AR GOMUNION : paj. 37.

GOUDE KOMUNIAÑ : paj. 38.

- YAOU -

KAN-DIGERIÑ, KEMPEDENN evit ar sizhunvezh 4 : gwelout paj. 38.

LENNADENN 1-añ

Barnabaz ha Saoul e kêr Antiokia eus Pisidia.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (13. 13-25).

- En deizioù-se, Paol hag ar re a oa gantañ
- 13 a gemeras ar vatimant e Pafos, evit mont da Berge, e Pamfilia. Met Yann en em zispartias diouto hag a zistroas da Jeruzalem.
- 14 Hag i o vont pelloc'h eget Perge a drouzas ar vro hag a erruas en Antiokia eus Pisidia. Un deiz-Sabad ez ejont d'ar sinagogenn hag ez azezjont.
- 15 Goude ma oa bet lennet al Lezenn hag ar Profedet, e reas pennoù ar sinagogenn goulema diganto:
" Breudou, m'hoc'h eus ur gomz bennak a gemerzh da lavarout d'ar bobl, komzit."
- 16 Paol neuze a savas, a reas sin gant e zorn da devel hag a lavaras:
" Tud Israel ha tud a zoujañs-Doue, selaout!
- 17 Doue ar bobl-mañ, hini Israel, en deus dibabethon Tadoù ha savet uhel ar bobl-mañ p'edont en harlu e Bro-Ejipt,
ha gant e vreo'h nerzhus en deus o zennet er-maez anezhi.
- 18 Hag e-pad war-dro 40 vloaz amez, e reas war o zro, gant pasianted, er gouleso'h.
- 19 Goude bezañ distrujet seizh broad e Bro-Canaan e verkas dezho, en hêrzh, douar ar re-se,
- 20 evit pevar c'hant hant-er-kant vloaz bennak.
Da c'houde e reas Barnabaz, betek ar profed Samouel.

- 21 Neuze e c'houlennjont ur roue hag e roas Doue dezho Saoul, mab Kiz, ur gwaz eus meuriad Benjamin, e-pad daou-ugent vloaz.
- 22 O vezañ e daolet kuit, Doue a savas David da roue dezho, ha da hemañ en deus douget an testiñ-mañ: "Kavet em eus David, mab Yese, un den hervez va c'halon hag a raio va holl vonnadoù."
- 23 Diwar lignez hemañ en deus Doue, hervez e bromesa, savet da Israel, ur Salver: Jezuz.
- 24 Yann, evit prientiñ e zonedigezh, en devoa prezeget badeziant an distro-a-galon d'an holl bobl a Israel.
- 25 P'edo Yann war-nes disoc'h gant e redadenn, e lavare: "Ar pezh a soñj ganeoc'h ez on-me, ne don ket. Met setu o tonet war va lerc'h an hini n'on ket dellezek da zilasañ e sandalenoù."

SALM 88 (2-3, 21-22, 25 & 27).

R:(2a) : Madelezhoù an Aotrou
Da viken a ganin.

(pe) : ALLELUIA!

- 2 Madelezhoù an Aotrou da viken a ganin
A rumm da rumm ec'h embanno va gench ho fealded.
- 3 Rak, emezon, da viken emañ diazezet ar vadelezh
P'hec'h eus war an Neñvoù harpet ho fealded.
- 21 Kavet em eus David, va servijer,
Gant va eoul santel em eus e sakret.
- 22 Va dorn e zalc'ho start
Ha va brec'h e gemerzho.
- 25 Va fealded ha va madelezh a vo gantañ
Hag em anv e vo trec'h e zorn.
- 27 Evel-hen e pedo ac'hanon: Va Zad ez oc'h,
Va Doue ha Roc'hell va silvidigezh.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

" An hini am degemer a zegemer an Hini en deus va degaset."

+PENNAZ EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (13. 16-20).

- 16 Goude bezañ gwalc'het o zreid d'e ziskibien e lavaras Jezuz dezho:
" E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, n'eo ket ar servijer brasoc'h eget e vestr, nag ar c'hannad a-us d'an hini en deus e gaset.
- 17 Mar gouzoc'h an traoù-se e vlot eñrus gant ma lakot anezho en hoc'h oberoù.
- 18 N'eo ket diwar ho penn c'hwi holl eo e komzan; anacut a ran pere am eus dibabat, met evit ma touic da wir ar Skritur: an hini a veze o tebrifiñ va bara, en deus savet seul e droad a-enep din'.
- 19 A-vremañ a lavaran deoc'h an dra-se, a-raok na tegouezho, evit ma kredot, pa zegouezho, ez on-me an Hini a zo.

- 20 E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, an neb a zegemer an hini a gasan, am degemer; hag an hini am degemer a zegemer an Hini en deus va c'haset."

WAR AR PROPOU: Gwel. paj. 40.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ : Gwel. paj. 40.

- GWENER -

KAN-DIGERIÑ, KEMPEDEUN evit ar sizhunvezh 4 : gwelout paj. 40.

LENNADENN 1-añ

Doue en deus sevenet e bromesa dre zasorc'hiñ Jezuz.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN ERETEL (13. 26-33).

- En deizioù-se, Paol en em gavet en Antiochia eus Pisidia a lavare er sinagogen:
- 26 Breudeur, bugale eus lignez Abraham, ha c'hwi, tud a zoujañs-Doue, deoc'h-c'hwi eo bet kaset ar gomz eus ar silvidigezh-mañ.
- 27 Ar re a oa o chom e Jeruzalem hag o fennrenerien n'o deus ket anavezet Jezuz nag ententet komzoù ar Brofedad a vez lennet bep sabad, ha sevenet o deus ar re-mañ dre E gondacñiñ.
- 28 Hop kaout abeg ebet emañ d'e lakaat d'ar marv, e c'houlennjont digant Pilat lemal e vuhez digantañ.
- 29 Goude bezañ peure-hraet-kement a oa bet skrivet diwar e benn, e tiskonnjont anezhañ diouzh ar groaz d'e lakaat en ur bez.
- 30 Met Doue en deus e zasorc'het a-douez ar re varv.
- 31 En em ziskouez a reas, e-pad kals a nevezioù, d'ar re a oa savet gantañ eus Galilea da Jeruzalem, ar re and-seun a zo bremañ e deutoù dirak ar bobl.
- 32 Ha ni neuze a zegas deoc'h ar c'heloù-mat o sellout ouzh
- 33 ar bromesa graet d'hon Tadoù; ar bromesa-se, Doue en deus he degaset da wir evidomp-ni, o bugale, en ur adsevel Jezuz a varv da vev, evel m'emañ skrivet en eil Salm:

" Va Mab ez out, me hiziv am eus da c'hanet."

SALM 2 (6-7, 8-9, 10-11).

R:(7) : Va Mab ez out; ne hiziv am eus da c'hanet!

(pe) : ALLELUIA!

- 6 Me am eus sakret va Roue
Mar Sion, Menez va Santual
- 7 Lavaret en deus an Aotrou din-me:
Va Mab ez out; me hiziv am eus da c'hanet.
- 8 Goulenn diganin hag e roin ar pobloù dit en hêrezh
Ha perc'henn e vi war harzoù an douar,
- 9 Hag e torri anezho gant ur vazh-houarn
Evel besel ur poder o drailhi.
- 10 Ha bremañ, Rouaned, komprenit,
Deskit, c'hwi, Gouarnourion an douar.
- 11 Servijit an Aotrou gant aon,
Gant levenez, en ur grenañ.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

" Me eo an ent, ar Wirionez hag ar Vuhez".

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (14. 1-6).

- En amzer-se, e lavaras Jezuz d'e ziskibien:
" Arabat d'ho kalon bezañ trubuilhet. Krediñ a rit e Doue, kredit ivez ennon-me.
- 1 E ti va Zad ez eus chomajoù a-leizh; mar ne vije ket evel-se em bije lavaret deoc'h; setu m'emaon o vont d'aozañ plas deoc'h.
- 2 Ha pa vin aet, ha p'am bo kempennet plas deoc'h, e tistroin hag ho komerin ganin evit ma viciot c'hwi ivez el lec'h m'emaon-me.
- 3 Ha d'al lec'h ma'z an, c'hwi a oar an hent."
- 4 Ha Tomaz o lavarout dezhañ:
" Aotrou, ne ouzomp ket da boleoc'h emañ o vont, ha penaos e c'hell- femp gouzout an hent?"
- 5 Ha Jezuz da respont dezhañ:
" Me eo an Hent, ar Wirionez hag ar Vuhez! Den ebet ne zeu d'an Tad nemet drezon-me."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 43.

PREFAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTI FONENN AR GOMUNION ha GOUDE KOMUNIAN: Gwel. paj. 43

- SADORN -

KAN-DIGERIÑ, KEMPEDENN evit ar sizhunvezh 4 : gwelout paj. 43-44.

LENNADENN 1-añ

Paol ha Barnabaz o prozeg d'ar Baganed.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (13. 44-52).

- 44 Ar sabad war-lerc'h, holl dud kêr Antiokia pe dost,
- 44 en em vodas evit klevout Komz Doue.
- 45 O welout ar bobl-se, ar Yuzevion a voe leun a warizi, hag a zisla- vare gant blasfemoù komzoù Paol.
- 46 Met Paol ha Barnabaz savet hardizhegezh dezho, a lavaras:
" Deoc'h-c'hwi da gentañ e oa ret e vije displeget Komz Doue. Met peogwir e tiarbennit anezhi, ha peogwir n'en em sellit ket dellezek eus ar vuhez peurbadus, setu m'en em droomp war-zu ar Baganed.
- 47 Rak evel-se en deus an Aotrou gourc'hommet deomp:
' Da lakaet em eus evel sklerijenn d'ar Broadoù
Evit ma kasi ar silvidigezh betek ar penn-pellañ eus ar bed.'
- 48 O klevout ar gerioù-se, ar Baganed a voe laouen hag en em lakaas da reiñ Klod (GLOAR) da Gmz an Aotrou, ha kement hini a oa merket evit ar vuhez peurbadus a zeuas d'ar feiz.
- 49 En em skignañ a rae Komz an Aotrou dre ar vro-se a-bezh.
- 50 Met ar Yuzevion a blantas pennadoù er gwraez devot a renk uhel hag e pennoù-bras kêr hag a lakaas da zirollañ heskinadeg a-enep Paol ha Barnabaz; ha kêriz o argasas diouzh o douar.
- 51 Met int-i a hejas a-enep dezho ar bultrenn diwar o zreid hag a yeas da Ikonion.
- 52 Hag an diskibled a oa leun a levenez hag eus ar Spered Santel.

SALM 97 (1, 2-3ab, 3cd-4).

R:(3c) : Gwelet o deus holl harzoù an douar
Silvidigezh hon Doue.

(pa) : ALLELUIA!

- 1 Kanit d'an Aotrou ur c'hantik nevez
Rak traoù burzhudus en deus graet.
An trec'h en deus roet dezhañ e zorn dehoù
Hag e vrec'h santel.
- 2 Diskuilhet en deus an Aotrou e silvidigezh
Dirak ar pobloù en deus diskleriet e reizhded
- 3a Soñj en deus bet eus e vadelezh hag eus e fealded
- 3b E-keñver Israel.
- 3c Gwelet o deus holl harzoù an douar
- 3c Silvidigezh hon Doue.
- 4 Youc'hit d'an Aotrou, douar a-bezh
A-bouez-penn, gant safar ha soniri.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

" An neb am gwel, a wel va Zad."

+ PENNAD EUS AN AVIE SANTEL HERVEZ SANT YANN (14. 7-14).

- En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibien:
- 7 " E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, m'am anavezfec'h
oc'h anavezfec'h va Zad ivez... Met a-vremañ e anaout a rit hag
e wetet hoc'h eus.
- 8 - Aotrou, eme Filip, diskouez dimp an Tad ha trawalc'h e vo dimp."
- 9 Ha Jezuz a lavar dezhañ:
- " Keit a amzer a zo abaoe m'emaon ganeoc'h, ha n'am anavezec'h ket
c'hoazh, Filip? An hini am gwel, a wel ivez an Tad. Penaos e lava-
10 rez: diskouez dimp an Tad? Ha no gredez ket emañ an Tad hag emañ
an Tad ennon? Ar c'homzoù a lavaran-me deoc'h, n'eo ket ac'hanon
va-unan o lavaran. An Tad hag a chom ennon eo a ra e oberoù.
- 11 Va c'hredit pa lavaran: Emaon an Tad hag emañ an Tad ennon-me. Ha
pa ne ve ken, kredit en abeg d'an oberoù o-unan.
- 12 E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, an neb a gred ennon,
a raio eñ ivez an oberoù a ran-me, ha reoù vrasoc'h zoken a raio,
dro m'emaon o vont davet an Tad.
- 13 Ha n'eus fonzh petra a c'houlennot em anv, an dra-se a rin evit
ma vo kledusaet (ROET KLOD, CLOAR D'AN) an Tad er Mab.
- 14 Kement a c'houlennot diganin em anv, me her graic.

WAR AR PROFOU : Gwel. paj. 45.

PREFAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ: Gwel. paj. 45.

-PEMPVET SUL GOUDE PASK-

KAN-DIGERIN (Salm 97. 1-2) : Kanit d'an Aotrou ur c'hantik nevez
rak traoù burzhudus en deus graet an
Aotrou Doue: dirak ar pobloù en deus
diskuilhet e justis. ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Aotrou Doue,
c'hwi eo hoc'h eus hon dasprenet ha graet ganimp ho pugale,
taolit eta ur sell a vadelezh war ho pugale garet,
evit m'o devezo, pa gredont e Jezuz-Krist,
ar gwir frankiz hag ivez an heritaj peurbadus.

LENNADENNOU : gwelout LEKSIONAL.

WAR AR PROFOU:

Aotrou Doue,
dre ar goñvars santel m'eo ar sakrifik-mañ,
hoc'h eus graet dimp kacut led en ho natur-Doue, c'hwi an Doue
Mourbet Uhel ha Doue nemetañ,
roit dimp ar c'hras, ni ho pad, neket hepken da anaout ho kwirionez
ovel ma reomp dija, met ivez d'he zizhout dre ur vuhez vat.

ANTIFONENN AR GOMUNION: (Yn. 15. 1,5).

Me eo ar winienn wirion ha c'hwi ar skourroù, eme Hor Salver;
an hini a chom ennon ha me ennañ,
hennozh a zoug kalz a frouzsh. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Sikourit ho pobl, gant madelezh, Aotrou Doue,
ha paogwir hoc'h eus maget anezhañ gant Sakramant santel an Aoter,
grit dezhañ dilezel an traoù kozh evit tizhout ar vuhez nevez.

-PEMPVET SIZHUNVEZH GOUDE PASK-

- LUJ -

KAN-DIGERIN, KEMPEDENN evit ar sizhunvezh 5: gwelout paj. 47.

LENNADENN 1-añ.

Paol ha Barnabaz a rank tec'hel kuit; e kêr-Listra avat, ez int keme-
ret evit doueed.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (14. 5-18).

- 5 En deizioù-se e voe un emsavadeg gant ar Baganed hag ar Yuzevion
war un dro, a-unan gant pennoù-bras kêr, da wallgas ha da veinañ
an Ebestel,
- 6 met ar-ré-mañ o vezañ gouezet an dra-se, a dec'has kuit etrezek
kêrioù Likaonia: Listra ha Derbe hag ar vro tro-war-dro.
- 7 Hag eno e prezegent ar C'heloù-Mat.
- 8 Bez'e oa e Listra un den notet e dreid, kamm abaoe ma oa ganet
ha n'en devoa biskoazh balaet.
- 9 Hennezh a selaouas Paol o komz. Ha Paol o sellout pizh outañ hag
o welout en devoa feiz a-walc'h evit bezañ salvet, a lavaras a
vouezh uhel:

- 10 " En em laka ez sav, sonn war da droid."
- An den a yeas en o sav en ul lamm hag en em lakaas da vale.
- 11 Ar bobl o welout ar pezh en devoa graet Paol, a savas o mouezh o likaonieg da lavarout:
- " An doueed dindan stumm tud a zo diskennet en hon touez!"
- 12 Ober a raent Zeuz (JUPITER) eus Barnabaz hag Hermez eus Paol peogwir ez eo hemañ a oa rener ar gaoz.
- 13 Houze beleg ar Jupiter hag a zo e dempl er-maez eus kêr, a zegasas betek ar porched tirvi (KOLEED) gant garlanteziou, ha prest e oa a-unan gant ar bobl, da ginnig ur sakrifik.
- 14 Met an Ebestel, Barnabaz ha Paol o klevout kelou eus kement-se, a rogas o dilhad hag en em strinkas war-zu ar bobl en ur youc'hal kement-mañ:
- 15 " Mignoned, petra a rit-hu aze? Ni ivez a zo tud, galvet d'ar memes planedenn ganeoc'h, tud a zagemenn deoc'h dilezel an holl idolennoù didalvez-se evit en em dreifi ouzh an Doue bev en deus graet an neñv hag an douar, ar mor ha kement a zo enno.
- 16 E-kerz ar rummadoù tremenet, en deus lezet an holl vroadoù da heuliañ o hentoù o-unan;
- 17 met koulskoude n'en deus ket manket da reiñ testeni a-du gantañ e-unan dre e vadoberoù, en ur reiñ eus an neñv glaveier, trevadoù d'o o'houlz, hag en ur reiñ d'ho kalonoù o gwalc'h a voued hag a levenez."
- 18 Met gant ar c'homzoù-se o devoa bec'h o virout ouzh ar bobl da ginnig dezho ur sakrifik.

SALM 113b (1-2, 3-4, 15-16).

R:(1) : N'eo ket dimp-ni, Aotrou, n'eo ket dimp-ni,
Met d'hoc'h anv roit gloar hag enor.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 N'eo ket dimp-ni, Aotrou, n'eo ket dimp-ni,
Met d'hoc'h anv roit gloar hag enor.
Abalamour d'ho karantez, abalamour d'ho fealded
- 2 Perak e lavarfe ar pobloù: Pelec'h emañ'ta o Doue?
- 3 Hon Doue-ni en neñvoù emañ,
Ha kement a blij dezhañ, hen ober a ra.
- 4 O idolennoù-i a zo aour hag arc'hant
Labour diwar zorn an dud.
- 15 Benniget ra vicot gant an Aotrou
En deus graet an neñvoù hag an douar.
- 16 An neñvoù a zo neñvoù an Aotrou
Met an douar en deus roet da vab-den.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

" Ar Frealzer, ar Spered Santel a zesko pep tra deoc'h."

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (14. 21-26).

- En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibion:
- 21 An hini en deus va gourc'hemennou hag a mir, hennezh eo an hini am c'har; hag an hini am c'har a vo karet gant va Zad, ha me e garo hag en em ziskuilho dezhañ."
- 22 Youda (n'eo ket an Iskariot) da lavarout dezhañ:
- " Aotrou, petra a zo kaoz emsout o vont d'en em ziskuilhañ dimp-ni ha neket d'ar bed?"
- 23 Jezuz a respontas kement-mañ dezhañ:
- " Ma's eus unan bennak hag am c'har, va c'homzoù a viro, ha va Zad e garo, ha davetañ e teump, hag hor chomaj a raimp gantañ.
- 24 An neb n'am c'har ket, ne vir ket va c'homzoù; hag ar gomz a glevit n'eo ket va hini: bez'ez eo komz an Tad en deus va degaset.
- 25 An traou-se am eus lavaret deoc'h tra ma choman ganeoc'h.
- 26 Met ar Frealzer, ar Spered Glan hag a vo kaset gant an Tad, hennezh a zesko deoc'h pep tra, hag a zegaso soñj deoc'h eus kement am eus lavaret deoc'h."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 49.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ: Gwel. Paj. 49.

- MEURZH -
=====

KAN-DIGERIÑ ha KEMPEDENN: Gwel. paj. 49.

LENNADENN 1-añ.

Paol meinnet gant e enebourion e Listra. Urzh ar Re-Gozh, Presbiterion,
savet en ilizoù kristen.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (14. 19-28).

- 19 En deizioù-se ec'h erruas e (Listra) Yuzevion, eus Antiokia hag eus Ikonion. Ar re-mañ a c'honezas spered ar bobl, ha goude bezañ meinnet Paol e stlejchont anezhañ er-maez eus kêr, o krudif e oa marv.
- 20 Met pa oa bodet e ziskibion en-dro dezhañ, e savas en e sav hag e tistroas e kêr. Hag an deiz war-lerc'h, ez eas kuit asamblez gant Barnabaz etrezek Derbe.
- 21 Ha goude bezañ prezeget an Aviel er gêr-se ha graet eno un niver bras a ziskibion, e tistroas Paol ha Barnabaz da Listra, da Ikonion ha da Antiokia.

- 22 Startaat a raent kalon an diskibion hag o alient start da chom feal d'ar feiz. Hag e lavarent dezho:
" A-dreuz kalz a drubuilhoù e rankomp tremen evit mont e-barzh Rouantelezh Doue."
- 23 Dibab a rejont dezho, e pep iliz, henaourion (RE-GOZH) ha goude bezañ graet pedennoù gant yunioù da houl, e fizjont anezho en Aotroù o devoa lakaet ennañ o feiz.
- 24 Treuziñ a rejont Bro-Bisidia evit mont da Bamfilia,
- 25 ha goude bezañ displeget ar Gmez, e Perge, e tiskennjont betek Attalia.
- 26 Ac'hano ez ejont dre vor etrezek Antickia, al lec'h ma cant ast kuit dioutañ, goude bezañ fiziet e gras Doue evit al labour edont bremañ o paouez kas da benn.
- 27 Pa voent erruet ha goude m'o devoe bodet an iliz, e rejont ur rentañ-kont eus kement en devoa Doue graet en ur reññ sikour dezho, ha penaos en devoa digoret d'ar Baganed dor ar Feiz.
- 28 Hag e chomjont eno da dremen ur pennadig brav a amzer gant an diskibled.

SALM 144 (10-11, 12-13ab, 21).

R : (12a) : Ho mignoned, Aotroù,
Da lavarò klod ho rouantelezh.

(pe) : ALLELUIA!

- 10 Hoc'h oberoù, Aotroù, d'ho maulo,
Ho mignoned da vennigo hoc'h anv.
- 11 Ra lavarint gloar (KLOD) ho Rouantelezh,
Ra gomzint eus ho kalloud.
- 12 Evit reññ da anaout ho kalloud da vugale an dud.
Ha klod ho Rouantelezh veur.
- 13 ab Ho Rouantelezh a zo ur Rouantelezh Peurbadus,
Hag ho Mestroni a bad a-rumm da-rumm da virviken.
- 21 Meuleudiñ an Aotroù a lavarò va genoù
Ra vennigo kement krouadur a zo e anv santel
A-hed an (holl) amzerioù
Da virviken.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

"Me a lez va feoc'h ganeoc'h, me a ro deoc'h va feoc'h!"

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANN (14.27-31a).

- En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibion:
- 27 Ar peoc'h a lezan ganeoc'h, va feoc'h-me a roan deoc'h;
N'eo ket evel ma ro ar bed, e roan me deoc'h.
Ha vezet ket ho kalon strafuilhet na spontet.
- 28 Va c'hlevet hoc'h eus o lavarout deoc'h: Nont a ran, hag e tistroan

- davedoc'h. Ma karfec'h ac'hano, e vefec'h laouen o vezañ ma'z an da gaout an Tad, rak an Tad a zo brasoc'h egedon.
- 29 Ha bremañ, lavaret em eus deoc'h, a-raok ma tegouezho, abalamour deoc'h, pa zegouezho, da grediñ.
- 30 Ne gomzin mui nemeur ganeoc'h, rak o tont emañ Priñs ar bed-mañ; n'eo ket en defe galloud warnon,
- 31 met evit ma ouezo ar bed e karan an Tad, hag e ran evel m'en deus goude hemennet din."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 51.

PREFAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTI-FONENN AR KOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ: Gwel. paj. 51.

- MERC'HER -

KAN-DIGERIÑ ha KEMPEDENN: Gwel. paj. 52.

LENNADENN 1-añ.

Ar Sened-Meur kentañ, Sened Jeruzalem.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (15; 1-6).

- 1 En deizioù-se, tud diskennet eus Bro-Judea a gelenne d'an diskibled:
/hoc'h
" Mar na rit androc'hañ, hervez ar c'hiz deuet a-berzh Moizes, ne c'hellit ket bezañ salvet."
- 2 Bec'h a savas neuze, ha kaoz start e-walc'h etre Paol ha Barnabaz diouzh un tu hag ar re-se diouzh an tu all. Neuze e voe divizet e pignje Paol, Barnabaz hag hiniennoù all eus Antickia betek Jeruzalem da gaout an Ebestel hag ar Bresbiterion (AR RE GOZH) diwar-benn ar gudenn-se.
- 3 Hag ar re-mañ goude bezañ bet digant an Iliz ar pash o devoa ezhomm evit o beaj, a drouzas Bro-Fenikia ha Bro-Samaria, en ur gentañ dre ar munud an distro eus ar Baganed, ha kalz a levanes a roent evel-se d'an holl vreudeur.
- 4 Pan errujont e Jeruzalem, e voent degemeret gant an Iliz, an Ebestel hag ar Re-Gozh, hag e rejont ar rentañ-kont eus kement en devoa Doue graet en ur reññ sikour dezho.
- 5 Met seval a reas hiniennoù eus kostezenn ar Farizianed hag o devoa degemeret ar Feiz, hag int da lavarout e oa ret androc'hañ ar Baganed ha goude hemenn dezho heuliañ Lezenn Moizes.
- 6 Neuze en em vodas an Ebestel hag ar Re-Gozh evit studiañ an afer-se.

SALM 121 (1-2, 3-4a, 4b-5).

R:(1) : Stad a oa ennon pa'z eus bet lavaret din:
Deomp da di an Aotrou Doue.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Stad a oa ennon pa'z eus bet lavaret din:
Deomp da di an Aotrou Doue!
- 2 Setu ni gant hon treid war da dreuzoù,
Jeruzalem.
- 3 Jeruzalem savet evel ur gêr
E-lec'h m'emañ an tiez unanet,
Di ez a da bardonañ ar meuriadoù
- 4a Meuriadoù an Aotrou.
- 4b Evit meulih, hervez Lezenn Israel
Anv an Aotrou,
- 5 Rak enni emañ tronioù al lezvarn
Ha tron Rouantelezh David.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Jezuz eo ar winienn wirion ha ni ar brankoù.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (15. 1-8).

- En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibion:
- 1 " Me eo ar winienn wirion ha va Zad ar gwiniennour.
- 2 Kement skourr ennon ha na zoug ket a frouezh, e lam anezhañ kuit,
ha kement hini a zoug frouezh, hen naetaat a ra, hen krennañ a ra.
evit ma tougo muoc'h.
- 3 Dija ez oc'h glan abalamour d'ar gomz am eus lavaret deoc'h.
- 4 Chomit ennon ha me ennoc'h. Evel ne c'hell ket ar skourr dougen
frouezh anezhañ e-unan, mar ne chom ket stag ouzh ar winienn,
evel-se na c'hwi kennebeut, mar ne chomit ket ennon.
- 5 Me eo ar winienn ha c'hwi ar skourrou. An hini a chom ennon ha me
ennañ, hennezh a zoug kalz a frouezh; rak a-ziavaez din, ne c'hell
lit ober netra.
- 6 Met an neb na chomo ket ennon, a vo taolet er-maez evel ar skourr
a ziseoc'h; dastumet e vez ar re-mañ neuze ha taolet en tan hag e
tevon.
- 7 Mar chomit ennon ha mar chom va c'homzoù ennoc'h, goulennit kement
a garot, hag e resevot.
- 8 Ar pezh a ro gloar d'am Zad eo e tougfeoc'h frouezh e-leizh ha ma
vefec'h evel-se va ziskibien.

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 53.

PREFAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ: Gwel. paj. 53.

- YAOU -

=====

KAN-DIGERIÑ ha KEMPEDENN: Gwel. paj. 54.

LENNADENN 1-añ.

Ar Sened-Meur kentañ, e Jeruzalem. An diviz etre an Ebistel hag ar re
all. Prezegenoù Sant Pêr ha Sant Jakez.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (15. 7-21).

- 7 Goude ur vreurtedeg hir, Pêr a savas hag a lavaras d'an Ebistel (all)
ha d'ar Re-Gozh:
" Breudeur! c'hwi a oar penaos, adalek an devezhioù kentañ, en deus
Doue va dibabet en ho touez, evit ma klevje ar Baganed dre va genoù-
me, komz ar C'heloù-Mat, ha ma tegemerjent ar feiz.
- 8 Ha Doue hag a anavez ar c'halonoù, en deus douget testeni a-du ganto,
en ur reif dezho ar Spered Santel kerkoulz ha dimp-ni.
- 9 Ha diforc'h ebet n'en deus graet strezomp-ni hag i, p'en deus glana-
et o c'halonoù dre ar feiz.
- 10 Bremañ eta, perak e temptit Doue o lakaat war chouk an diskibled, ur
yev ha n'omp ket bet gouest, nag hon Tadoù na ni, da zougen?
- 11 Met kredif a reomp ez eo dre c'hras an Aotrou Jezuz e vezimp-ni sal-
vet, dre an hevelep stumm hag ar re-se."
- 12 Tevel a reas neuze an holl bobl a oa eno hag e selaoujont Barnabaz
ha Paol o tanevellañ an holl sinitoù ha burshudoù en devoa graet Doue
e-touez ar Baganed drezo.
- 13 Goude ma oa paouezet Paol ha Barnabaz da gomz, Jakez d'e dro a res -
pontas:
" Breudeur, emezañ, va selaouit.
- 14 Simon en deus danevellet penaos, adalek ar penn-kentañ, ez eo bet
plijet gant Doue tennañ a-douez ar Baganed, ur bobl da zougen e anv.
- 15 Kement-se a glot gant komzoù ar Brofeded, pa gaver kement-mañ er
Skritur:
- 16 -Goude-se e tistroin hag ec'h adsavin teltenn David hag a oa
kouezhet;
an dismantrou anezhi a adsavin, hag hec'h adlakaat a rin sonn
en he sav,
evit ma klasko ar peurrest eus an dud, an Aotrou,
kerkoulz hag an holl bobloù bet galvet va anv warno
- 18 - eme an Aotrou a ra an traoù-se anavezet (gantañ) a-viskoazh.
- 19 Dre-se e tezvaman-me na zleer ket mui trubuilhañ ar re eus ar Baga-
ned hag en em dro ouzh Doue,
- 20 met skrivañ dezho en em virout ouzh ar pezh saotret gant an idolen-
noù, hag ouzh an hudurnez, ouzh ar c'hig mouget hag ouzh ar gwad.
- 21 Rak Moizez, abaoe an amerioù koshañ, en deus, e pep kêr, prezege-
rion hag hen lenn er sinagogennoù, bep deiz-sabad."

SALM 95 (1-2a, 2b-3, 10).

- R:(3) : Kontit d'an holl bobloù Oberoù burzhudus an Aotrou.
- (pe) : ALLELUIA!
- 1 Kanit d'an Aotrou ur c'hantik nevez
Kanit d'an Aotrou, Douar a-bezh,
Kanit dezhañ, meulit e anv.
- 2a
- 2b Brudit a zeiz da zeiz ez eo Hor Salver,
Kontit e c'hloar d'ar Pobloù,
D'an holl vroioù, e oberoù burzhudus.
- 3
- 10 Lavarit e-touez ar broadoù: an Aotrou a ren
Diazezet en deus ar bed divrall,
Gouarn a ra ar pobloù gant lealded.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Karantez an Tad evit Hor Salver, karantez Hor Salver evidomp.

+ PENHAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (15, 9-11).

- 9 En amser-se e lavaras Jezuz d'e ziskibien:
" Ewel m'en deus va Zad va c'haret,
evel-se me ivez em eus ho karet.
Chomit em c'harantez.
- 10 Mar mirit va gourc'hemennoù e chomit em c'harantez, evel m'am
eus-me miret gourc'hemennoù va Zad, ha ma choman en e garantez.
- 11 An traoù-se am eus lavaret deoc'h evit ma vezo va levenez ennoc'h
ha ma vezo leun ho levenez."

WAR AR PROFOU : Gwel. paj. 56.

PREFAS PASK : Dibab paj. 31-32.

ANTI FONENN AR KOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ: Gwel. paj. 56.

- GWENNER -

KAN-DIGERIN: paj. 56.

KEMPEDENN : paj. 57.

LENNADENN 1-añ.

Respont Sened-Meur kontañ Jeruzalem da c'houlennoù Iliz Antiokia.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (15, 22-31).

- 22 En deizioù-se e kavas mat an Ebestel hag ar Re-Gozh (BRESBITERION)
gant asant an Iliz a-bezh dibab dileuridi (KANNADED) en o zouez
d'o c'has da Antiokia asamblez gant Paol ha Barnabaz, (da lavarout
eo) Jud lesanvet Barsabaz ha Silaz, tud a-bouez e-touez ar breu-
deur, hag al lizher-mañ a rojont dezho:
- 23
- " Ni, an Ebestel gant ar Bresbiterion, ho predeur, deoc'h-hu
hor Breudeur deuet a-douez ar Baganed, hag a zo o chom e Kêr-
Antiokia, e Bro-Siria hag e Bro-Gilikia, salud!
O vezañ m'hon eus klevet e oa aet hiniennoù eus hon tud d'ho
trubuilhañ gant o lavarich, ha da lakaat strafuilh en ho spe-
redoù, hep bezañ bet karg nag urzh ebet eus hor perzh evit se,
hon eus divizet holl a-uan, dibab kannaded d'o c'has betek
ennoc'h, gant hor breudeur muiañ-karet Barnabaz ha Paol,
anezho tud hag o deus gouestlet o buhez da servij anv hon
Aotrou Jezuz-Krist.
- 24
- 25 Kaset hon eus eta Jud ha Silaz, hag ar re-mañ a adlavaro deoc'h
dre gomz ar gemennadurezh-mañ:
Divizet ez eus bet gant ar Spered Santel ha ganimp-ni, chom hep
lakaat warnoc'h bec'h ebet, en tu-hont d'an traoù-mañ hag a zo
ret-holl:
- 26 en em virot diouzh ar boued bet kinniget d'an idolennoù, diouzh
ar gwad, diouzh ar c'hig mouget ha diouzh an hudumez (ORGEDE-
REZH). Mar en em virit diouto, e reot ar pezh a zo mat. Gant
hor gourc'hemennoù."
- 27
- 28 Ar gannaded eta a voe lavaret kenavo dezho, hag e kemerjont hent
Antiokia; eno goude galvet ar bobl d'en em vodañ, e rojont al
lizher.
- 29
- 30 Goude ma oa bet lennet ganto, o voe leun a levenez, abalamour d'ar
c'hennerezh a zegase dezho.

SALM 56 (8-9, 10-12).

R:(10a) : Me a fell din ho meuliñ, Aotrou,
E-touez ar pobloù.

(pe) : ALLELUIA!

8 Prest eo va c'halon, o Doue,
Prest eo va c'halon.

9 Kanañ a rin! Seniñ a rin evidoc'h,
Dihun, o va ene! Dihunit kitar ha telenn,
Me a zihuno gouloù-deiz.

10 Ho meuliñ a rin e-touez ar pobloù, Aotrou,
Seniñ a rin evidoc'h e-touez ar broadoù,

11 Rak bras eo betek an Heñvoù ho karantez
Ha betek an cahl ez oc'h fidel!

12 Uhel en Heñvoù emañ Doue
War an douar a-bezh (emañ) e c'hloar.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

" Va gourc'hemenn eo m'en em garfec'h an eil egile".

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (15. 12-17).

- En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibion:
- 12 " Hemañ eo va gourc'hemenn: en em garit an eil egile, evel m'am eus ho karet.
- 13 N'en deus den brasoc'h karantez eget homañ: reif e vuhez evit e vignoned.
- 14 C'hwi, va mignoned ez oc'h, mar grit ar pezh a c'hourc'hemennan deoc'h.
- 15 Ne roan ket ken deoc'h an anv a servijerien, rak ar servijer ne oar ket petra a ra e vestr; deoc'h em eus roet an anv a vignoned, rak kement am eus klevet digant va Zad am eus roet deoc'h da anaout.
- 16 N'eo ket c'hwi hoc'h eus va dibabet; me eo am eus ho tibabet hag ho tiazezet evit ma'z eot ha ma tougot frouezh, ha ma chomo ho frouezh; evel-se kement tra a c'houlennot digant an Tad, em anv, heñ a raio deoc'h.
- 17 Hemañ eo va gourc'hemenn evidoc'h: en em garit an eil egile."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 59.

PREPAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR KOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ: Gwel. paj. 59.

- SADORN -

KAN-DIGERIÑ: paj. 59.

KEMPEDENN: paj. 60.

LENNADENN 1añ.

Divizoù Sened-Meur Jeruzalem lakaet en implij. Paol e Makedonia.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (16. 1-10).

- En deizioù-se, Paol goude bezañ treuzet Siria ha Kilikia en ur startaat an ilizoù
 - 1 a erruas e Derbe hag e Listra; hag eno e kavas un diskibl, e anv Timoteoz, mab d'ur Yuzevez deuet d'ar feiz, met e dad a oa gresian.
 - 2 Ar breudeur eus Listra hag Iconion a roe testiñ mat diwar e benn.
 - 3 Paol a reas e soñj d'e gas gantañ.
- E gomerout a reas hag e androc'hañ en abeg d'ar Yuzevion a oa el lec'hioù-se; rak gouzout a raent holl e oa e dad ur gresian.

- 4 Dre ma tremenent dre ar c'hêrioù, e roent dezho da virout an urzhioù divizet gant an Ebestel hag ar Re-Gozh eus Jeruzalem.
- 5 Evel-se ez ae an Ilizoù war greñvaat er feiz, hag e kreskent e niver, a zeiz da zeiz.
- 6 Beajiñ a rejont a-dreuz Bro-Frigia ha Bro-C'halatia, o vezañ ma oa bet harzet oute gant ar Spered Santel da brezeg ar Gouz, en Azia.
- 7 Pa voent erru tost da Vro-Visia ec'h esaejont mont da Vro-Vitina, met ne voe ket permetet dezho gant Spered Jezuz.
- 8 Neuze goude bezañ treuzet Misia e tiskennjont betek Troaz.
- 9 En noz, en devoe Paol ur weledigezh: ur Makedoniad, en e sav, oc'h ober ar bedenn-mañ dezhañ:
- 10 " Tremen e Makedonia, deus d'hor sikour!"
- Goude ar weledigezh-se, e klaskjomp kerkent mont en hent etrezek Makedonia, en ur soñjal diwar se en devoe Doue hor galvet da gas an Aviel dezho.

SALM 99 (2, 3, 5).

R:(2a) : Youc'hit d'an Aotrou, Douar a-bezh.

(pe) : ALLELUIA!

2 Youc'hit d'an Aotrou, Douar a-bezh
Servijit an Aotrou gant levnez,
It dirazañ en us ganañ.

3 Gouezit ez eo an Aotrou
Peurbadus eo e vadslezh
Hed-ha-hed ar c'hantvedoù e fealded!

ALLELUIA (paj. 30).

AVIEL

Kasoni ar bed ouzh Jezuz hag e dud.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (15. 18-21).

- En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibien:
- 18 " Mar en deus ar bed kasoni ouzhoc'h, gouezit en deus bet da gentañ kasoni ouzhin-me.
- 19 Mar befec'h eus ar bed, e karfe ar bed e beadra; met dre ma n'oc'h ket eus ar bed, dre m'am eus ho tibabet eus a-douez ar bed, abalamour da se en deus ar bed kasoni ouzhoc'h.
- 20 Ho pet soñj eus ar gouz am eus lavaret deoc'h: N'eo ket ar servijer brasoc'h eget e vestr. Mar o deus va gwallgaset va-unan, c'hwi ivez a wallgasint; mar o deus miret va c'homz, hoc'h hini ivez a virint.
- 21 Met an holl draoù-se a raint a-eneb deoc'h, en abeg d'am anv, dre n'anavezont ket an Hini en deus va degaset."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 61.

PREPAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR KOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ: Gwel. paj. 62.

-C'HMEC'HVET SUL GOUDE PASK-

KAN-DIGERIÑ (Iz. 48. 20). : Gant kriadennoù a levezeg embannit ar c'heloù, ma vo klevet! Embannit anezhañ betek ar penn all eus an douar: An Aotrou Doue en deus dieubet e bobl.

KEMPEDENN:

Doue hollc'halloudek, an deizioù-mañ a levezeg hag a dremenomp en enor d'Hor Salver oc'h adsevel a varv da vev, roit dimp ar c'hras d'o lidañ (pe: d'o berzañ) gant aked ha karantez, en doare m'en em ziskouez bepred en hon oberoù ar pezh a adtre-menomp warnañ dre soñj hor spored.

LENNADENNOU : LEKSIONAL 2.

WAR AR PROFOU:

Ra savo davedoc'h hor pedennoù, Aotrou Doue, a-unan gant ar profoù a gimigomp deoc'h, evit ma c'hellimp ur wech glanaet hor c'halonoù gant ho kras vadelezhuz, bezañ e stad da lidañ misterioù ho karantez vras.

PREFAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTIFONEENN AR KOMUNION: (Yn. 14. 15-16).

Ma karit ac'hanon, e virot va gourc'hemennnoù, eme Hor Salver. Ha me a bedo an Tad, hag eñ a roio deoc'h ur Frealzer all evit ma chomo ganeoc'h da viken. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, dre Hor Salver o sevel a varv da vev e rentit dimp ar vuhez peurbadel, kreskit ennomp frouezh mister Pask, ha silit en hor c'halonoù nerzh ar bevañs-mañ a ro ar silvidigezh.

+
++++
+

-C'HMEC'HVET SIZHUNVEZH GOUDE PASK-

- LUN -

KAN-DIGERIÑ paj. 28.

KEMPEDENN paj. 28.

LENNADENN 1añ

Badeziant Lidia.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (16. 11-15).

- 11 Goude bezañ kemeret ar vatimant e Troaz, e skojoomp war-seun etrezek Samotrake, hag en deiz war-lerc'h etrezek Neapoliz,
- 12 hag ac'hano da Filipoz hag a zo ur gêr eus ar renk kentañ er c'hornad-se eus Makedonia, hag un drevadenn roman. Tremen a rejomp er gêr-se un nebeut devezhioù.
- 13 Deiz ar sabad, ez ejomp er-maez eus kêr, en tu-hont d'an nor, betek ribl ur stêr, e-lec'h ma soñjomp edo un ti-bedif. Goude bezañ aet en hor c'hoazez, en em lakjomp da gomz gant ar merc'hed a oa en em vodet eno.
- 14 Unan anezho, anvet Lidia, ur varc'hadourez limestra, eus Tiatira, ur vaouez a-zoujañs-Doue, a selaoue ouzhimp. An Aotrou a zigoras dezhi he c'halon evit ma lakje evezh ouzh ar pezh a lavare Paol.
- 15 Badezet e voe, hi hag he ziegezh ganti, ha neuze e reas dimp ar badenn-mañ:
" Mar hoc'h eus kavet ez on unan fidel d'an Aotrou, deuit d'am zi da lojañ."
Hag e talc'has warnomp evit ma rajomp.

SALM 149 (1-2, 3-4, 5-6a & 9b).

R:(4a) : En em blijout a ra an Aotrou en e bobl.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Kanit d'an Aotrou ur c'hantik nevez
Meuleudi dezhañ e bodadeg e vignoned,
- 2 Joa da Israel en e Grouer,
Da vibien Sion, levezeg en o Roue!
- 3 Meuleudi d'e anv gant dañsoù,
Soniri taboulin ha toleñn evitañ.
- 4 Rak en em blijout a ra an Aotrou en e bobl
An dud vihan a gempenn gant e silvidigezh.

- 5 Tridal a ray e vignoned gant ar c'hloar
Ra ganint gant ar joa war o gwele
- 6a Meuleudiou Doue 'leizh o c'horzailhenn,
- 9b Gloar ha Klod d'e holl vignoned.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Ar Spered a Wirionez degaset gant Jezuz a zougo testeni a-du gantañ.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANN (15. 26 - 16.4a).

- En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibien:
- 26 Pa zeuio ar Frealzer a gasin-me deoc'h a-berzh an Tad, ar Spered
a Wirionez hag a zeu eus an Tad, e roio testeni diwar va fenn;
- 27 ha c'hwi ivez a zougo testeni, rak adalek ar penn-kentañ emaoch
ganin.

16

- 1 An traoù-se am eus lavaret deoc'h evit na viot ket laket e riskl
da gouzhañ.
- 2 Ho teurel a raint er-maez eus ar sinagogennoù, ha donet a ra an
eur ma kredo an neb ho lakaio d'ar marv, ober un akt a relijion
e-keñver Doue.
- 3 Evel-se eo e raint deoc'h, dre n'o deus ket anavezet nag an Tad
na me.
- 4 Hogen an traoù-se am eus lavaret deoc'h, evit m'ho pezo soñj, pa
zeuio an amzer-se, em eus bet o lavaret deoc'h.

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 31.

PREFAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOMUNION ha GOUDE KOMUNIAÑ: Gwel. paj. 32.

- MEURZH -
=====

KAN-DIGERIÑ ha KEMPEDENN: Gwel. paj. 33.

LENNADENN 1-añ.

Paol ha Silaz er prison e kêr-Filippo.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBBSTEL (16. 22-34).

- En deizioù-se,
- 22 pobl kêr-Filippo a savas a-enep Paol ha Silaz; ha gouarmerion
kêr a reas tennañ o dilhad d'ar re-mañ hag a c'houro'hennas o
bazhata.

- 23 Goude bezañ roet dezho ur gwall-wiskad-bazhadoù, e taoljont anezho
en toull-bac'h, en ur reiñ urzh d'ar gardian d'o diwall ervat.
- 24 Hemañ goude bezañ bet un urzh evel-se, o zaolas er prison-diabarzh
hag a ereas start o zreid er c'hefiou.
- 25 War-dro hanternoz, Paol ha Silaz hag a oa gant o fedemnoù, a gane
meuleudiou Doue; hag ar brizonidi all a oa o selaou.
- 26 A-greiz-holl e voe ur c'hren-douar ken bras ma voe horellet dia-
zesoù an toull-bac'h. War an taol e tigoras frank an holl zorioù,
hag an holl brizonidi a voe distaget o liammoù dezho.
- 27 Ar gardian dihonet-kronn hag o welout e oa digor dorrojoù an toull-
bac'h a dennas e gleze hag a oa o vont d'en em lashañ, o krediñ e
oa tec'het kuit ar brizonidi.
- 28 Net Paol a youc'has gant ur vouezh kreñv:
" H'a ket d'ober droug dit-te da-unan, rak holl emaoamp amañ!"
- 29 Hemañ a c'houlennas goulaouemnoù, a reas ul lamm e diabarzh ar
prison hag en ur grenañ gant ar spont ec'h en em daolas e-harz
treid Paol ha Silaz;
- 30 Hag ouzh o c'has er-maez e lavaras
" Actronez, petra am eus da ober evit bezañ salvet?"
- 31 Hag ar re-mañ a lavaras:
" Kred en Aotrou Jezuz, hag e vi salvet, te ha da diegezh!"
- 32 Hag e tisplegjont dezhañ Komz an Aotrou, dezhañ ha da gement hini
a oa en e di.
- 33 Hag ofñ, d'an eur-se eus an noz o c'hemeraz gantañ, hag a walc'has
o gouliou; ha badezet e voe ofñ hag e holl dud, kerkent goude.
- 34 Ober a reas dezho pignat d'e di, hag a reas serviñ ur pred; hag
en em laouenat a reas gant e holl diegezh o vozañ m'en devoa kre-
det e Doue.

SALM 137 (1-2a, 2bc-3, 7c-8).

R:(7c) : Salvet ez on bet gant ho torn dehoù, Aotrou!

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Ho meuliñ a ran, Aotrou, a greiz va c'halon,
Dirak an Aelod e kaman deoc'h
- 2 Hag e stouan etrezek ho Templ Santel.
- 2bc Hoc'h anv a veulan evit ho madelezh hag ho fealded!
Rak uheloc'h eget pep tra emañ hoc'h anv hag ho lavar.
- 3 En deiz m'am eus ho kalvet hoc'h eus va selaouet
Gwelloc'h: nerzhet hoc'h eus va ene!
- 7c Ho torn a astennit ha va salviñ a rit!
- 8 Ho torn dehoù en deus graet pep tra evidon
Aotrou! Peurbadus eo ho karantez
Oberoù ho taouarn arabat deoc'h o dilezel.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Labour ar Spered Santel.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANN (16. 5-11).
En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibien:

- 5 "Bremañ ez an da gaout an Hini en deus va degaset hag hini ebet ac'hanoc'h ne c'houlenn diganin: Da belec'h emacout o vont?
- 6 Met dre m'am eus lavaret kement-se deoc'h an dristidigezh he deus karget ho kalon.
- 7 Me avat, ez eo ar wirionez eo a lavaran deoc'h: talvoudus eo deoc'h ez afen kuit, rak mar ne dan ket kuit, ne zeuo ket ar Frealzer davedoc'h; met ma'z an kuit, me a gaso anezhañ deoc'h.
- 8 Hag Hennezh o tonet, a brouc d'ar bed edo ar gaou gantañ diwar-benn ar pec'hed, ar reizhded hag ar varmedigezh;
- 9 diwar-benn ar pec'hed, dre m'o deus nac'het krediñ ennon;
- 10 diwar-benn ar reizhded, dre ma'z an da gaout an Tad ha n'am gwelot mui,
- 11 diwar-benn ar varmedigezh, dre ma'z eo barnet Priñs ar bed-mañ."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 35.

PREFAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR KOMUNION ha GOUDE KOMUNIAN: Gwel. paj. 35.

- MERC'HER -
=====

KAN-DIGERIÑ ha KEMPEDENN: Gwel. paj. 35.

LENNADENN 1-añ.

Prezegenn Sant Paol en Atene dirak ar filozofed.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (17. 15,22 - 18. 1).

- 15 En deizioù-se ar re a oa oc'h ambroug Paol, e gasas betek Atene, ha goude bezañ bet urzh da lavarout da Silaz ha da Dimozez donet ar c'hentañ ar gwellañ d'e gaout, ez ejont kuit...
- 22 Paol, en e sav, e kreiz an Areopaj, a lavaras:
" Ateneiz! Gwelout a ran ez oc'h e pep keñver, ar re relijiusañ holl eus an dud.
- 23 Rak dre ma tremenen ha ma sellen ouzh ho savadurioù sakr, em eus merzet e-touez an traoù all, un acter hag a oa skrivet warni:
D'an Doue dizanav. An Hini a enorit (CEHELIT) hep hen anavezout, Hennezh eo a brezegenn-me deoc'h.
- 24 An Doue 'hag en deus graet ar bed ha kement a zo ennañ, Eñ hag a zo ~~se~~ Mestr an Neñv hag an Douar, n'emañ ket o chom e temploù graet gant daouarn an dud.
- 25 N'eo ket kennebeut gant daouarn tud e vez servijet, evel p'en devije ezhomm eus un dra bennak, pa'z eo Eñ e-unan a ro ar vuhez hag an anal ha pep tra.

- 26 Diwar uman hepken en deus lakaet da zont an holl dud da chom war c'horre an douar a-bezh. Merket en deus amzervezhioù o istor hag harzoù o douaroù,
 - 27 evit ma klaskjent Doue, e kement da vihanañ ha na c'hellont, war-bouez tastornat, e gavout. Hag evit gwir n'emañ ket pell diouzh pep hini ac'hanomp,
 - 28 rak ennañ eo hon eus ar bevañ, ar fiftal hag ar bezañ, evel m'o deus lavaret hiniennoù eus ho parzhed: Rak eus e ouenn ez omp ivez.
 - 29 Peogwir eta emacomp eus gouenn Doue, ne zleomp ket soñjal ez eo an douezelezh heñvel ouzh skeudennoù aour, arc'hant pe vaen stummet gant labour hag ijin mab-den.
 - 30 Met Doue bremañ, o serriñ e zaoulagad war amzerioù an diouiziegezh, a ro da c'houzout d'an dud e tleont holl hag e pep lec'h distreiñ a wir galon,
 - 31 rak lakaet en deus an Deiz ma tle barn ar bed gant reizhded, dre un den en deus merket, ha diskouezet d'an holl evel din da vezañ kredet, ouzh hen lakaat da sevel a varv da vev."
 - 32 O klevout komz eus adsav ar re varv da vev, darn a rae goap, darn all a lavare : " Da glevout a raimp diwar-benn kement-se ur wech all."
 - 33 Evel-se eo ez eas Paol kuit eus ar vodadeg.
 - 34 Hiniennoù koulskoude eus ar baotred a yeas d'e heul hag a zegemeras ar feiz, en o zouez Denez an Areopagiad, hag ur vaouez anvet Damariz, ha reoù all ganto.
18. 1 Goude-se, Paol a guitaas Atene hag a yeas da gêr-Corintoz.

SALM 148 (1-2, 11-12b, 12c-14a, 14bd).

R: Leun eo gant ho kloar, an neñv hag an douar!

(pe) ALLELUIA!

- 1 Meulit an Aotrou eus lein an neñvoù
Meulit-eñ en uhelderioù
- 2 Meulit-eñ, c'hwi, e holl Aeled,
Meulit-eñ, c'hwi, e holl armeoù!
- 11 Rouaned an douar hag an holl bobloù
Priñsed hag holl varmerion an douar
- 12a Paotred yaouank ha merc'hed yaouank
- 12b Tad kozh ha bugale
- 12c Ra veulint anv an Aotrou
Rak e anv-eñ hepken a zo uhel
- 13 E veurdez a zo a-us d'an neñv hag an douar.
- 14a Uhel en deus savet korn e bobl.
- 14b Meulet ra vezo gant e holl vignoned
- 14c Gant mibien Israel
- 14d Ur bobl hag a zo tost dezhañ.

ALLELUIA (Paj. 30).

AVIEL

Promessa ar Spered Santel hag a zeuio da zeskiñ ar wirionez d'an Ebestel penn-da-benn.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANNI (16. 12-15).

- En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibien:
- 12 " Kalz a draoù am eus c'hoazh da lavarout deoc'h, met ne c'hellit ket o dougen bremañ.
- 13 Met pa vo deuet Henezh, ar Spered a wirionez, e heñcho ac'hanoc'h war-zu ar wirionez en he fezh; rak ne gomzo ket anezhañ e-unan, met kement a glev, a lavaro, hag e tisklerio deoc'h an traoù da zont.
- 14 Henezh a roio gloar din, rak eus ar pezh a zo din e kemero, evit hen diskleriañ deoc'h.
- 15 Holl gement a zo d'an Tad, a zo din; setu perak em eus lavaret: Eus ar pezh a zo din e kemero evit hen diskleriañ deoc'h."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 37.

PREFAS PASK: Dibab paj. 31-32.

ANTIFONENN AR GOMUNION: Gwel. paj. 37.

GOUDE KOMUNIAÑ: Gwel. paj. 38.

=====

= Y A O U - B A S K =

=====

KAN-DIGERIÑ (Ob. 1. 11) : Tud a C'halilea, perak ez oc'h souezhet hag e chomit da sellout ouzh an Neñv? Evel m'hoc'h eus gwelet Jezuz o sevel d'an Neñv, evel-se e teuio en-dro. ALLELUIA!

KEMPEDENI:

Doue hollec'halloudek, plijet ganeoc'h kargañ hor c'halonoù a levnez santel hag a anaoudegezh vat, rak Hor Salver o pignat d'ar Baradoz a sach ac'hanomp war e lerc'h, ha peogwir ez eo antreet en ho kloar evel ar Penn, e ro esperañs dimp-ni hag a zo izili e Gorf, da vont d'al lec'h m'emañ e-unan.

LENNADENNOU hag all: gwelout al LEKSIONAL.

Lavaret e vez ar CREDO

WAR AR PROFOU:

Evit enoriñ ho Mab Jezuz o pignat d'ar Baradoz, e kinnigomp deoc'h, Aotrou Doue, gant ur galon izel, ar sakrifia-mañ, plijet ganeoc'h eta dre ar marc'had santel-mañ m'eo an oferenn treiñ hor selloù etrezek traoù an Neñvoù.

PREFAS 1 (+ Communicantes gant ar Bedenn-Veur 1).

(Ar Prefas-mañ a vez lavaret deiz ar Gouel hag en deizioù war-lerc'h betek Sadorn ar Pantekost).

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollec'halloudek ha peurbadel, un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer: Rak Hor Salver Jezuz-Krist, Roue a C'hloar, trec'hour war ar marv hag ar pec'hed, a zo savet (en deiz-mañ) dirak selloù souezhet an Aeled betek lein ar Baradoz, evel Hanterour etre Doue hag an Dud, Barnour ar bed, ha Mestr war bep tra; ha ma ra kement-se n'eo ket evit pellaat diouzh hon stad dister-ni, met evit reiñ dimp-ni, izili e Gorf, an esperañs da vont un deiz d'al lec'h m'eo aet en hor rack an Hini a zo hor Penn ha mammenn pep gras evidomp.

Rak-se gant Gouelioù Santel Pask, e trid ar bed a-bezh en ur mor a levnez, hag holl Speredoù galloudus an Neñvoù a gan meuleudi d'ho kloar en ur lavarout da viken:

SANTEL!...

PREFAS 2 (+ Communicantes gant ar Bedenn-Veur 1).

(Ar Prefas-mañ a vez lavaret deiz ar Gouel hag en deizioù war-lerc'h betek Sadorn ar Pantekost).

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollec'halloudek ha peurbadel, un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer dre Jezuz-Krist, Hor Salver.

Rak goude adsevel eus ar bez ez eo en em ziskouezet bev d'e holl ziskibion, ha dirak o daoulagad eo pignet d'an Neñvoù, evit hol lakaat da gaout perzh en e natur-Doue.

Rak-se gant Gouelioù Santel Pask e trid ar bed a-bezh en ur mor a levnez, hag holl Speredoù galloudus an Neñvoù a gan meuleudi d'ho kloar en ur lavarout da viken: SANTEL!...

ANTIFONENN AR GOMUNION: (Mzh. 28. 20).

Setu m'emaon ganeoc'h bemdeiz,
betek fin ar bed. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Doze hollc'halloudek ha peurbadel,
tra m'emaomp o'hoazh war an douar e roit dimp ar c'hras
da gaout darempred gant traoù an Neñv,
plijet ganeoc'h eta, treiñ karantez hor c'halonoù etrezek
al lec'h m'emañ ganeoc'h hon natur-den.

- GWENER GOUDE YAOU-BASK -

KAN-DIGERIÑ: Gwel. paj. 40.

KEMPEDENN: Gwel. paj. 41.

LENNADENN 1-añ

Paol kennerzhed gant an Aotrou Doue.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN ERETEL (18. 9-18).

- 9 Tra m'edo Paol e Korintoz, an Aotrou a lavaras dezhañ en noz dre weledigezh:
" Arabat dit kaout aon; met komz ha na dav ket!
- 10 Rak me a zo ganit, ha den ne lako e zorn warnout-te d'ober droug dit, rak bez'am eus ur bobl niverus er gêr-mañ."
- 11 Chom a reas eta Paol eno ur bloaz ha c'hwec'h miz, o kelenn en o zouez, Komz Doue.
- 12 Hogen d'ar c'houlz m'edo Gallio prokonsul Bro-Ac'haia, ar Yuzevion, goude en em glevout holl, a savas a-enep Paol hag hen degasas d'al lezvarn:
- 13 " Hemañ, emezo, a zoug an dud da servijiñ Doue en un doare hag a zo a-enep d'al lezenn."
- 14 Paol a oa o vont da gomz, pa lavaras Gallio d'ar Yuzevion:
" Ma vije meneg eus un torfed bennak pe eus ur gwalldaol bennak, o Yuzevion, an befe, evel just, kemeret va amzer d'ho selaou, met p'emañ an tabut diwar-benn gerioù, anvioù ha diwar-benn ho lezenn-c'hwi, pledit gant se c'hwi hoc'h-unan, rak barnet war an traoù-se me ne fell ket din bezañ!"
- 16 Hag e lakas anezho er-maez eus al lezvarn.
- 17 Neuze an holl C'hresianed a dapas krog e Sostenez hag a oa e penn ar sinagogenn, hag a roas bazhad dezhañ a-wel d'al lezvarn; met van ebet ne rae Gallio ouzh kement-se.

18 Paol a chomas o'hoazh ur pennad amzer e Korintoz; neuze e lavaras kenavo d'ar breudeur hag ez eas dre vro etrezek Siria, e kompagnunezh Friskilla hag Akilaz. E Kenc'hras e reas touzañ e vlev, rak ur gouestl en devoa graet.

SALM 46 (2-3, 4-5, 6-7).

R (8a) : Roue an douar a-bezh ez eo an Aotrou.

(pe) : ALLELUIA!

- 2 Holl bobloù, strakit ho tacuam
Youc'hit d'an Aotrou a-bouez-penn
- 3 Rak an Aotrou eo an Uheleñ, an Hini spouronus!
Roue Meur an douar a-bezh.
- 4 Sujet en deus ar pobloù dindanomp
Ar broadoù dindan hon treid
5 Dibabet en deus dimp hon hêrezh
Gloar Jakob, e vignon karet.
- 6 Pignal a ra Doue e-kreiz ar soniri
An Aotrou ouzh trouz trompilhoù
- 7 Sonit evit hon Doue, sonit!
Sonit evit hor Roue, sonit!

GWERZADOU AN ALLELUIA

GOUDE YAOU-BASK

- 1 Mzh. 28. 19 & 20 : It, grit diskibion gant an holl vroadoù.
Setu me a zo ganeoc'h bemdeiz betek fin ar bed.
- 2 Yn. 14. 16 : Me a bedo an Tad, hag eñ a roio deoc'h ur
Frealzer all evit ma chomo ganeoc'h da viken.
- 3 Yn. 14. 18 : N'ho lezin ket emzivaded, eme an Aotrou;
mont a ran kuit hag e tistroin, hag e vo laouen ho kalon.
- 4 Yn. 14. 26 : Ar Frealzer, ar Spered Glan, a zesko deoc'h
pep tra;
hag a zegaso soñj deoc'h eus kement am eus lavaret deoc'h.
- 5 Yn. 16. 7 & 13 : Kas a rin deoc'h ar Spered a wirionez, eme
an Aotrou,
Hennezh hoc'h hencho war-zu ar wirionez a-bezh.
- 6 Yn. 16. 28 : Deuet on er-maez eus an Tad ha deuet er bed;
ha bremañ e kuitaan ar bed hag e tistroan da
gaout an Tad.

7 Kol. 3, 1 : A-unan gant ar C'hrist ez oc'h savet a vary da vev. Klaskit eta an traoù a zo en nec'h, e-lec'h m'emañ ar C'hrist azezet a-zehoù d'an Tad.

AVIEL

"Den ebet ne lammo ho levenez diganeoc'h."

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (16. 20-23a).

En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibien:

- 20 " E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, c'hwi a leñvo hag a hirvoudo, tra ma vo ar bed el levenez; c'hwi a vo en dristidigezh, met ho tristidigezh a vo troet e levenez.
- 21 Ar vaouez, pa vez o willoudiñ, a vez en dristidigezh dre ma'z eo deuet hec'h eur; met pa vez ganet ar c'hrouadur, n'he devez mui a soñj eus he foan, gant al levenez he deus, dre ma'z eus bet ganet un den er bed.
- 22 C'hwi eta bremañ hoc'h eus tristidigezh; met ho kwelout a rin a-nevez hag e vo laouen ho kalon, hag ho levenez ne vo den ebet evit he lemel diganeoc'h.
- 23 Hag en deiz-se, ne reot mui a c'houlennoù ouzhin diwar netra."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 43.

PREPAS YAOU-BASK: Gwel. paj. 93.

ANTIFONENN AR GOMUNION ha GOUDE KOMUNIAN: Gwel. paj. 43.

=====
= SADORN =
=====

KAN-DIGERIN: Gwel. paj. 43.

KEMPEDEHN: Gwel. paj. 44.

LENNADENN 1-añ.

Apolloz en Efezoz hag e Korintoz.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (18. 23-28).

- 23 Goude bezañ tremenet ur pennad amzer en Antiochia, ez eas Paol kuit hag e tremenas a bep eil a-dreuz Bro-C'halatia ha Bro-Frigia en ur startaat an holl ziskibled.
- 24 Ur Yuzev anvet Apolloz, genidik eus aleksandria a erruas en Efezoz. Un helavar e oa ha barrek war ar Skriturioù-(Sakr).
 - /den

- 25 Kentelist e oa bet war Hent an Aotroù, ha gant an tan a oa en e galon, e prezege hag e kelenne reizh-mat ar pesh a sell ouzh Jezuz, evitañ da anaout hepken Badeziant Yann.
- 26 En em lakaat a reas eta da gomz gant hardizhegezh, er sinagogenn. Priskilla hag Akilas hag o devoa e glevet, e gemeras ganto hag a zisplegas perveshoc'h dezhañ Hent Doue.
- 27 Evel ma c'hoantae mont da Ac'hais, ar breudeur hen alias start d'hen ober hag a skrivas d'an diskibled ober degemer mat dezhañ. Eñ, p'len em gavas eno, a reas, gant sikour ar c'hraas, kalz a vad d'ar re o devoa resevet ar feiz.
- 28 Rak gant nerzh e tizarbenne ar tuzevion dirak an holl, en ur ziskouez fraezh ha sklaer dre ar Skriturioù ez eo Jezuz ar Mesiaz.

SALM 46 (2-3, 8-9, 10).

R (8a) : Roue an douar a-bezh ez eo an Aotroù Doue.
(pe) : ALLELUIA!

- 2 Holl bobloù, strakit ho taouarn Youc'hit d'an Aotroù a-bouez-penn,
- 3 Rak an Aotroù eo an Uheleñ, an Hini spouronus Roue Meur war an douar a-bezh.
- 8 Roue an douar a-bezh ez eo Doue Sonit ur meulgan kaer
- 9 Emañ Doue o ren war ar broioù, Doue azezet war e Dron Santel.
- 10 Priñsed ar broioù en em vodo Gant pobl Doue Abraham, Rak da Zoue emañ skoedoù an Douar, Uhel-meurbet ez eo bet savet!

ALLELUIA (Paj. 95-96).

AVIEL

"Kement a c'houlennot digant va Zad, hen reiñ a ray deoc'h em anv."

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (16. 23b-28).

- 23b En amzer-se e lavaras Jezuz d'e ziskibien:
 - " E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, mar goulennit un dra bennak digant an Tad, e roio deoc'h em anv.
- 24 Betek-hen n'hoc'h eus goulennet netra em anv; goulennit hag e resevot, evit ma vo leun ho laouenedigezh.
- 25 An traoù-se ez eo e parabolennoù am eus o lavaret deoc'h. Donet a ra an eur ma ne gomzin mui ouzhoc'h e parabolennoù, met ma komzin fraezh ha sklaer diwar-benn an Tad ouzhoc'h.
- 26 En deiz-se, e c'houlennot em anv, ha ne lavaran ket deoc'h e pedin-me an Tad evidoc'h,
- 27 rak an Tad e-unan ho kar, dre m'hoc'h eus va c'haret, ha m'hoc'h eus kredet ez on deuet eus Doue.
- 28 Deuet on eus an Tad hag ez on deuet er bed; hag adarre e kuitaan ar bed hag e tistroan davet an Tad."

WAR AR PROFOU: Gwel. paj. 45.

PREFAS YAOU-BASK: Gwel. paj. 93.

ANTIFONENN AR GOMUNION ha GOUDE KOMUNIAN: Gwel. paj. 45.

=====

= SEIZHVET SUL GOUDE PASK =

SUL GOUDE YAOU-BASK

=====

KAN-DIGERIN (Slm 26. 7-9) : Selaouit, Aotroù Doue, ouzh va mouszh.
O c'hervel emañ!
Din-me e lavar va c'halon: Klask e Fas.
Ho Fas, Aotroù Doue, eo a glaskan. Na
guzhit ket ho Fas ouzhin.

KEMPEDENN:

Selaouit gant madelezh hor pedennoù, Aotroù Doue:
evel ma kredomp emañ ganeoc'h en ho kloar, Jezuz, Salver ar bed,
grit dimp ivez kompren e chom ganimp-ni betek fin ar bed,
evel m'en deus prometet e-unan.

LENNADENNOU, ALLELUIA, AVIEL: gwelout LEKSIONAL 2.

PREFAS YAOU-BASK: Gwel. paj. 93.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Yn. 17. 22).

Ho pediñ a ran, Tad, evit ma vint unan,
evel ma'z omp ni ivez unan hepken. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAN:

Hor selaouit, Aotroù Doue, c'hwi hor silvidigezh,
ha dre vertuz an oferenn hag ar gomunion santel-mañ,
roit dimp ar fiziañs start e teuo da wir evit Korf
an Iliz a-bezh,
ar pezh a zo en em gavet a-benn bremañ gant an Hini
a zo ar penn anezhi.
Dre Hor Salver Jezuz-Krist, ho Mab hag Hon Aotroù.



-SEIZHVET SIZHURVEZH GOUDE PASK-

- LUN -

KAN-DIGERIN (Ob. 1. 8) : Resev a reot nerzh ar Spered Santel a
ziskenno warnoc'h, hag e viot testoù
din betek ar penn-pellañ eus an douar.
ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Ra ziskenno warnomp, ni ho ped, Aotroù Doue, nerzh ar Spered
Santel, ma c'hellimp heuliañ gant un ene fidel ho polontez,
hag he diskouez dre hor buhez santel.

LENNADENN 1-añ:

Ar Spered Santel reot ivez d'ar gristenien nevez.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (19. 1-8).

- 1 En deizioù-se, e-pad m'edo Apolloz e Korintoz, e veajas Paol dre
gornad uhelañ ar vro ken na zeuas da Efezoz. Eno e kavas un nebeut
diskibled, hag e lavaras dezho:
- 2 " Daoust hag ar Spered Santel hoc'h eus-hù resevet pa oac'h deust
d'ar Feiz?
- N'hon eus ket, emezo; n'hon eus ket zoken klevet ez eus ur Spered
Santel."
- 3 Hag eñ a lavaras dezho:
" Peseurt badeziant hoc'h eus-hu resevet?
- Badeziant Yann, emezo.
- 4 - Ar Vadeziant a roe Yann, eme Baol, a oa ur vadeziant a binijenn,
hag e lavare d'ar bobl lakaat o feiz en unan hag a oa o tonet war
e lerc'h, da lavarout eo, Jezuz."
- 5 O klevout kement-se e voent badezet en anv Jezuz,
- 6 ha goude m'en devoe Paol lakaet e zaouarn warnezho, e teuas ar
Spered Santel warnezho, hag e stagjont da gomz e meur a yezh ha
da ziouganañ (DA BROFESIAN).
- 7 Bez'e cant holl war un dro un daouzek bennak a dud.
- 8 E-pad an tri miz goude, e tarempredas Paol ar sinagogenn, hag oc'h
arguliñ hag oc'h aliañ, e komze gant hardizhegezh hag e pep frankiz
diwar-benn Rouantelezh Doue.

SALM 67 (68) (2-3, 4-5a, 6-7ab).

R (33a) : Rouantelezhioù an Douar,
Kanit da Zoue.

(pe) : ALLELUIA!

- 2 Doue a sav, e enebourion a red kuit,
Tec'hout a ra a-zirazañ ar re o deus kasoni outañ,
- 3 Evel m'en em zispenn moged, en em zispennont
Evel ma teuz koar ouzh tan, ez ay da get ar re fall
a-zirak Doue.
- 4 An dud reizh a vo lacus,
Tridal a raint dirak Doue gant ar joa hag al levenez.
- 5 Kanit da Zoue, sonit d'e anv,
Dañsit dirazañ!
- 6 Tad an emzivadad, advokad an intañvezed
Ez eo Doue en e chomlec'h santel.
- 7ab Doue a loj ar re a zo o-unan en un ti,
Digeriñ a ra d'ar brizonidi dor an evurusted.

ALLELUIA (Paj. 95-96).

AVIEL

"Bezit fiziañs, trec'het em eus ar bed!"

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANN (16. 20-33).

- 29 En amzer-se e lavaras e ziskibion da Jezuz:
" Bremañ e komzez dizolo, ha ne lavarez parabolemm ebet.
Bremañ ec'h ouzomp ec'h anavezet pep tra ha n'ac'h eus ket ezhomm
e vefe graet goulennoù ouzhit; en abeg da se e kredomp ez out deuet
eus Doue."
- 31 Ha Jezuz da respont dezho:
" Bremañ e kredit?"
- 32 Setu ma teu an eur ha deuet eo dija, ma viot skignet pep hini
diouzh e du, ha m'am lezet va-unan-penn. Nemet n'emaon ket va-unan-
penn, rak an Tad a zo ganin.
- 33 Antraoù-se am eus lavaret deoc'h evit m'ho pezo ar peoc'h ennon-me.
Er bed, trubuilh ho po, met ho pet fiziañs, me am eus trec'het ar
bed."

WAR AR PROFOU:

Ra zeuio, ni ho ped, Aotrou Doue, ar sakrifis dinamm-mañ
d'hor glanaat
ha da reiñ d'hon eneoù nerzh ho kras divin.

PREFAS YAOU-BASK: Gwel. paj. 93.

ANTI-FONEMN AR KOMUNION (In. 14. 18, 16. 22).

N'ho lezin ket emzivadad, eme Hor Salver:
dont a rin d'ho kaout hag e vo leun ho kalon a levenez. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Sikourit ho pobl gant madelezh, ni ho ped, Aotrou Doue,
hag ar re hoc'h eus maget gant mister santel an aoter, grit dezho
dilezel an traoù kozh a zo en o c'hreiz evit ren ur vuhez nevez.

- MEURZH -

=====

KAN-DIGERIÑ (Disk. 1. 17-18) : Me eo ar c'hentañ hag an divezhañ,
an Hini bev. Bet on marv, ha setu
me bev evit kantvedoù ar c'hantve-
doù. ALLELUIA!

KEMPEDEMM:

Doue hollc'halloudek ha peurbadel,
grit ni ho ped, pa zeuio ar Spered Santel,
ma plijo gantañ dont da chom en hor c'hreiz d'ober ganimp Templ
e c'hloar.
Dre Hor Salver J.K.

LENNADEMM 1-añ.

Paol o tegemenn d'ar Re Gozh eus Efezoz emañ o vont kuit.

LENNADEMM TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (20. 17-27).

- 17 En deizioù-se, Paol a gasas eus Miletoz tud da Efezoz da c'hervel
- 18 ar Re Gozh eus an Iliz, ha pa voent en em gavet gantañ, e lavaras
kement-mañ dezho:
" C'hwi a oar e peseurt stumm, diwar an deiz kentañ m'am eus lakaet
va zreid en Azia, ez on en em renet en ho touez, e-pad an holl
amzer,
- 19 o servijañ an Aotrou gant pep izelegezh, ha gant daeroù, hag e-kreiz
ar gwall-drubuilhoù am eus gouzavet da heul itrikoù (TROIOU-KAMN)
ar Yuzevien.
- 20 Gout a rit n'em eus lezet a-gostez netra eus ar pezh a c'halle bezañ
talvoudus deoc'h, pa veze ezhomm da brezeg deoc'h ha d'ho keleenn, pe
a-wel d'an holl, pe a di da di,
- 21 en ur desteniañ a-vouezh-uhel d'ar Yuzevien ha d'ar C'hresianed e
tleont kaout keuz e-keñver Doue, ha krediñ e Jezus hon Aotrou.
- 22 Ha bremañ setu me chadenet gant ar Spered, o vont da Jeruzalem,
hep gouzout petra en em gavo eno ganin,
- 23 nemet emañ ar Spered Santel eus an eil kêr d'eben, o tiskleriañ
fraezh din-me ez eus chadennoù ha trubuilhoù ouzh va gortoz.
- 24 Met ne ran van, ha ne sellan ket va buhez prizius evidon va-unan,
gant ma kasin da benn va redadenn hag ar ministrerezh am eus bet
digant Jezuz, an Aotrou, da lavarout eo, dougen testiñ da Aviel
gras Doue.
- 25 Ha bremañ, setu ma ouzon na welot mui va dremm, c'hwi holl hag em
eus tremenet en ho touez en ur brezeg ar Rouantelezh.
- 26 Setu perak e touan hiziv dirazoc'h ez on dinamm diouzh gwad an holl.
- 27 Rak n'em eus lezet netra a-gostez pa veze ezhomm da regemenn deoc'h
en he fezh bolontez Doue."

SALM 67 (10-11, 20-21).

R (33a) : Rouantelezhioù an Douar
Kanit da Zoue.

- (pe) : ALLELUIA!
- 10 Ur glaviad madelezhoù ho poa skuilhet, O Doue!
An hini diskaret ha skuizh-divi ho poa kennerzhed;
 - 11 O gwalc'h o devoa bet eus ho pevañs,
Ho poa, en ho madelezh, aozet d'ar paour, Aotrou Doue.
 - 20 Bennozh da Zoue bemdeiz!
Hor bec'hioù a zoug, Eñ hon Doue, hor silvidigezh,
 - 21 Hon Doue-ni a zo un Doue Salver,
An Aotrou Doue a denn eus ar marv.

ALLELUIA (Paj. 95-96).

AVIEL

Pedenn Jezuz goude ar goan dizezhañ: "Tad ro gloar d'az Mab."

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (17. 1-11a).

- 1 En amzer-se, Jezuz a savas e zaoulagad war-zu an Neñv hag a lavaras:
" Tad, deuet eo an eur; ro gloar d'az Mab evit ma roio da Vab gloar dit-te,
- 2 hervez ar galloud ac'h eus roet dezhañ war bep korf, evit ma roio ar vuhez peurbadus da gement hini ac'h eus roet dezhañ.
- 3 Hogen homañ eo ar vuhez peurbadus ma'z anavezint ac'hanout-Te, ar gwir Doue n'eus nemetañ, hag an hini ac'h eus degaset, Jezuz-Krist.
- 4 Me am eus roet gloar dit war an douar; peurc'hraet em eus al labour az poa roet din da ober.
- 5 Ha Te bremañ, ro gloar din-me,Tad, ez kichen, gant ar c'hloar-se am boa ez kichen a-raok ma oa eus ar bed.
- 6 Diskouezet em eus da anv d'an dud ac'h eus roet din eus a-douez ar bed; dit-Te e cant, ha din-me ac'h eus o roet, ha da lavar o deus miret.
- 7 Bremañ ec'h ouzont ez eo digant e teu kement ac'h eus roet din.
- 8 Rak ar c'homzou ac'h eus roet din, am eus roet dezho; o degemeret o deus hag anavezet o deus e gwirionez, ez eo ac'hanout-Te ez on deuet, ha kredet o deus ez eo Te ac'h eus va degaset.
- 9 Pedif a ran evito; ne bedan ket evit ar bed, met evit ar re ac'h eus roet din, dre ma'z eo dit-Te ez int;
- 10 ha kement a zo din-me a zo dit-Te, ha kement a zo dit-Te a zo din-me ha gloar a gavan enno.
- 11 N'emaon ket mui er bed, int-i avat, er bed emaint, tra ma'z an me etrezek ennout.

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, degemer pedennoù ho tud fidel, a-unan gant ar profou-mañ a gimnigomp deoc'h, ma c'hellimp dre an deverioù-mañ a reomp en ho keñver evel ho servijerion, kaout lod e gloar an Neñv.

PREFAS YAOU-BASK: Gwel. paj. 93.

ANTIFONENN AR KOMUNION: (Yn. 14. 26).

Ar Spered Santel a vo kaset gant va Zad em anv, hennezh a zesko deoc'h pep tra hag a zegaso soñj deoc'h eus kement am eus lavaret deoc'h, eme Hor Salver. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Resevet hon eus grasoù ar sakrifis santel, hag e c'houlennomp diganeoc'h, Aotrou Doue, a galon izel, ma talvezo ar sakrifis-mañ hag hon eus bet urzh gant Hor Salver d'hen kinnig evit lidañ ar soñj anezhañ, da greskiñ hor c'harantez.

- MERC'HER -

KAN-DIGERIN (Salm 46. 2) : Holl bobloù, strakit ho taouarn, youc'hit evit an Aotrou a-bouez-penn. ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Doue leun a drugarez, teurvezit reiñ d'hoc'h Iliz hag a zo bet dastumet asamblez gant ar Spered Santel, ar c'hras d'ho ser-vijañ a-greiz-kalon, ha⁴vezañ unanet hec'h-unan e skouln ar gwir garantez.

LENNADENN 1-añ.

Paol o lavarout kenavo da Re Gozh Efezoz.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (20. 28-38).

- En deizioù-se e lavaras Paol da Re Gozh Efezoz:
- 28 " Taolit evezh ouzhoc'h hoc'h-unan hag ouzh an holl dropell en deus ar Spered Santel ho lakaet da veserion warmañ, evit heñchañ Iliz Doue, an Iliz-se hag en deus Doue prenet gant e vad e-unan.
 - 29 Me a car en em silo, goude ma vin aet kuit, bleizi kriz en ho touez ha na zamantint ket d'an tropell;
 - 30 Hag eus ho touez hoc'h-unan e savo gwazed oc'h embann treuzkredennoù da sachañ an diskibled war o lerc'h.
 - 31 Dre-se, chomit war evezh; dalc'hit soñj penaos e-pad tri bloavezh noz-deiz, n'em eus ket ehanet da gelem gant daeroù, pep hini ac'ha-noc'h.
 - 32 Ha bremañ, ho fiziout a ran e Doue hag e Komz e C'hras hag a zo gouest da sevel an ti ha da reiñ deoc'h ho lodenn-hêrezh gant kement hini a zo bet santelaet (dre ar Vadeziant).
 - 33 Aro'hant pe aour, pe zilhad, n'em eus c'hoantaet kaout digant den.
 - 34 C'hwi hoc'h-unan a car o deus an daouarn-mañ pourvezet d'am ezhommoù ha da ezhommoù va c'hompagnuned.

- 35 E pep keñver em eus diskouezet deoc'h ez eo o poaniañ evel-se e ranker skoazellañ ar re wan, ha kaout soñj eus komzoù an Aotrou Jezuz hag en deus lavaret e-uan:
" Brasoc'h evurusted a zo o reiñ eget o resev."
- 36 ha goude bezañ lavaret ar c'homzoù-se, (Paol) en em lakas war e zaoulin a-uan ganto-holl hag a bedas.
- 37 Neuze e tirollas an holl da ouelañ ha da zifronkañ, hag o lammat ouzh gouzoug Paol e pokent dezhañ.
- 38 Glac'haret e oant dreist-holl gant ar gomz en devoa lavaret: penaos ne zleent mui gwelout e zremm.
Hag e ambroug a rejont betek ar vatimant.

SALM 67 (68) (29-39, 33-35a, 35b-36c).

R (33a) : Rouantelezhioù an Douar
Kanit da Zoue.

(pe) : ALLELUIA!

- 29 Diskouezit, o Doue, ho nerzh
Kemperzhit, o Doue, ar pezh hoc'h eus graet evidomp
- 30 Eus ho Templ e Jeruzalem
Deoc'h-hu e kinnigo ar Rouaned profoù.
- 33 Rouantelezhioù an Douar, kanit da Zoue, kanneulit
an Aotrou
- 34 A zo o varc'hegezh war an Neñvoù, an Neñvoù peurbadus,
Setu ma sav e vouezh, e vouezh nerzhus:
- 35a "Anavezit galloud Doue".
- 35b War Israel emañ e splander, hag e c'halloud en oabl,
36 Spontus eo Doue eus e santual, Doue Israel,
Eñ eo a ro nerzh ha galloud d'e bobl:
"Bennozh da Zoue".

ALLELUIA: (Paj. 95-96).

AVIEL

Pedenn diwezhañ Jezuz evit e ziskibion: kensakriñ, santelaat anezho er wirionez.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (17. 11b-19).

- 11b En amzer-se, Jezuz o vezañ e zaoulagad war-zu an Neñv a lavaras:
" Tad Santel, mir anezho dre o'halloud da anv ac'h eus roet din,
evit ma vezint unan evelomp.
- 12 P'edon ganto, me o mire dre c'halloud da anv ac'h eus roet din;
o miret em eus hag hini anezho n'eo set da goll nemet an hini a
oa da vezañ kollet evit ma vije sevenet ar Skritur.
- 13 Ha bremañ ez an davedout, hag an traoù-se a lavaran tra m'emaon
er bed, evit ma o devezo va levenez enno, en he leunder (EN HE FESH).

WAR AR PROFOU:

Degemerit, ni ho ped, Aotrou Doue, ar sakrifis-mañ hag a zo
bet savet dre ho kourc'hemenn,
hag ar misterioù sakr a lidomp evit seveniñ hon devedioù a servi-
jerion, prizit o leuniañ gant santelezh ho silvidigezh.

PREFAS YAOU-BASK:Gwel. paj. 93.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Yn. 15. 26-27).

Pa zeuio ar Frealzer a gasin-me deoc'h a-berzh va Zad,
ar Spered a wirionez hag a zeu eus an Tad,
e roio testiñ diwar va fenn,
ha c'hwi ivez a rento testiñ, eme Hor Salver. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Aotrou Doue,
ar Sakramant hon eus kemeret perzh ennañ, ra lako ar c'hras da
greskiñ mui-ouzh-mui ennomp,
hag ouzh hon maetaat gant e nerzh efedus ra zalc'ho hep paouez
d'hon lakaat e stad da resev un donezon ken bras.

- YAOU -
=====

KAN-DIGERIÑ (Hebr. 4. 16). : Tostaomp eta gant fiziañs ouzh tron ar
c'hras evit ma kavimp trugarez ha ma
resevimp ar c'hras evit kaout sikour e
koulz vat. ALLELUIA!

KEMPEDENN:

Ho Spered, ni ho ped, Aotrou Doue, ra skuilho ennomp gant
nerzh, e zonezonol,
evit reiñ dimp ur spered a blijjo deoc'h,
hag evit hol lakaat gant karantez e stad da heuliañ ho polontez.

LENNADENN 1-añ.

Paol tapet prizoniad e Jeruzalem en em zifenn a-enep tamalloù e enebou-
rion dirak Kuzul-Meur ar Yuzevion.

LENNADENN TENNET EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL (22. 30, 23. 6-11).

- 30 En deizioù-se, c'hoant dezhañ da c'houzout resis petra a oa tamallet
da Baol gant ar Yuzevion,
ar c'homandant a reas e zic'hadennañ hag a c'hourc'hemennas d'ar vele-
ien-vras ha da holl dud al lezvarn en em vodañ; ha neuze e reas da-
gas Paol dirazo.

- 23
6 Paol hag a ouie e oa lod eus e varmerien Sadukeidi ha lod all Farizianed, a youc'has e-kreiz al lezvarn:
" Breudeur, me a zo Farizian, mab da Farizianed; hag hor spi e dasorc'h (EN ADSAV) ar re vary setu pelec'h emañ dalc'h va frosez." Kerkent ha m'en devoa laosket ar gomz-se, e savas tabut etre ar Farizianed hag ar Sadukeidi, hag en em rannas ar vodadeg e div gostezenn.
- 7 Rak ar Sadukeidi a lavar n'eus na dasorc'h, nag ael, na spered, e lec'h ar Farizianed a anzav an eil hag egile.
- 8 Enc e oa bet ur youc'hadeg vras; hag hiniennoc'h eus ar Skribed diouzh tu ar Farizianed a savas hag a lavaras groñs o soñj:
" Netra fall ne gavomp-ni en den-mañ! Ha mar bofe ur spered en defe komzet outañ pe un Ael?"
- 9 War washaat ez eas an trouz, kement ha ken bihan ma savas aon d'ar c'homandant na vije lakaet Paol a-dammoù ganto hag e c'houro'hemenas d'ar soudarded diskenn ha d'e ziframmañ eus o zouez ha d'e gas d'ar c'hazarn.
- 10 En noz war-lerc'h en em ziskouezas an Aotrou dezhañ hag e lavaras:
" Bez kalonek! Rak evel m'ac'h eus douget testeni war ar pezh a sell ouzhin-me e Jeruzalem, evel-se e rankez ivez dougen testeni e Roma."

SALM 15 (1-2a-5, 7-8, 9-10, 11).

R (1) : Va mirit, Aotrou, va Doue
Va holl fiziañs ennoc'h emañ!

(pe) : ALLELUIA!

1 Va mirit, Aotrou, va Doue,
Va fiziañs ennoc'h emañ!

2a Lavarout a ran d'an Aotrou: " C'hwil eo va Mestr!
5 Aotrou, c'hwil eo va lod-heritaj ha va c'haliriad.
En ho torn emañ va flanedenn.

7 Bennozh d'an Aotrou en deus va c'huzuliet
Ya! e-kerz an noz e kelenn va c'halon

8 Derc'hel a ran an Aotrou dirazon dalc'hmat
P'emañ en tu dehoù din, ne vrallin ket.

9 Setu perak ez eus levenez em c'halon, stad em ene!
Va c'horf zoken a ziskuilho e peoc'h,

10 Rak n'am dilezot ket e Bro an Anaon
Ha ne reot ket d'ho mignon gwelout ar vreinañdurezh.

11 Hent ar vuhez a zeskot din-me!
Va gwalc'h a joaloù dirak ho fas!
Dudioc'h en tu dehoù deoc'h da viken!

ALLELUIA: (Paj. 95-96).

AVIEL

Pedenn Jezuz evit e ziskibion da zont.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ DANT YANN (17. 20-26).

- En amser-se e savas Jezuz e zaoulagad etrezek an Neñv hag e lavaras:
- 20 " (Tad Santel) n'eo ket evit va diskibion hepken eo e pedan, met ivez evit ar re a gredo ennon diwar o lavar,
- 21 evit ma vezint holl unan, evel m'emaout-Te, va Zad, ennon, ha me enmout-Te; evit ma vezint int ivez unan ennonp, ha ma kredo ar bed ez eo Te ac'h eus va degaset.
- 22 Ha me, ar c'hloar ac'h eus roet din, am eus roet dezho, evit ma vezint unan evel ma'z omp-ni unan,
- 23 Me enno ha Te ennon, evit ma teuint da vezañ peurunan, ha ma'z anavezot ar bed ez eo Te ac'h eus va degaset.
- 24 Tad! Ar re ac'h eus roet din, e fell din ma vezint ganin int ivez, ol lec'h ma vezin-me, evit ma welint va c'hloed (GLOAR), an hini ac'h eus roet din; rak va c'haret ac'h eus a-ziarok krouidigezh ar bed.
- 25 Tad reizh! Ar bed n'en deus ket da anavezot; me avat, am eus da anavezot hag ar re-mañ o deus anavezot ez eo Te ac'h eus va degaset.
- 26 Ha graet em eus dezho anavezot da anv hag e rin c'hoazh; ma vo enno ar garantez ac'h eus bet evidon ha ma vin-me enno."

WAR AR PROFOU:

En ho madelezh, Aotrou Doue, santelait ar profoù-mañ, hag o tegemer donezon hor c'halonoc'h hag hon eneoù, grit ganimp evidoc'h ur brofadenn beurbadus.

PREFAS YAOU-BASK: Gwel. paj. 93.

ANTIFONENN AR KOMUNION:

Me a lavar deoc'h ar wirionez: talvoudus eo deoc'h ez afen kuit, rak mar ne dan ket kuit ne zeuio ket ar Parakled davedoc'h, eme Hor Salver. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAN:

Ar Sakramant hon eus resevet, Aotrou Doue, ha vo kelennadurezh evidomp, ha ra gavimp ennañ un nerzh nevez, evit ma c'hellimp bezañ e stad vat da resev donezonoù ar Spered Santel.

- GWEENNER -
=====

KAN-DIGERIN (Disk. 1. 5-6). : Jezuz-Krist en deus hor c'haret hag hor gwalc'het eus hor pec'hedoù gant e vad, ha graet ganimp ur Rouantelezh ha beleien da Zoue, e Dad. ALLELUIA!

KENPEDENN:

Aotrou Doue, digoret hoc'h eus dimp dor ar beurbadelezh
en ur reiñ gloar d'ho Mab Jezuz-Krist,
hag en ur zegas sklerijenn ar Spered Santel,
ni ho ped, pa'z omp lodek en un donszon ken kaer,
grit ma'z aio hon devosion war wellaat,
ha ma'z aio hor feiz ivez war greskiñ.

LENNADENN 1-añ.

Paol a zo bet kaset da brizoniad eus Jeruzalem da Gaezarsia, eno e komz
ar gouarnour Festus gant ar roue Agrippa hag ar rouanez Bernike diwar e
benn.

LENNADENN TENNET EUS LEVT OBEROU AN EBESTEL (25. 13-21).

- 13 Eñdeizioù-se e teuas ar roue Agrippa ha Bernika da Gaezarsia d'ober
ur welaenn a enor da Festus.
- 14 Tremen a rejont eno meur a zevezh, hag e-pad ar c'heit-se, e roas
Festus da anaout d'ar roue, afer Baol:
" Bez'ez eus un den, emezañ, hag a zo bet lezet er prizon gant Feliz;
pa oan e Jeruzalem e teuas ar veleien-vras hag ar Re Gozh eus ar Yu-
zevion da zougen klemm a-enep dezhañ ha da c'houlenn ma vije kondac-
net.
- 16 Respontet am boa dezho:
" N'emañ ket ar c'hiz gant ar Romaned da reiñ un den tamallet
bennak, a-rack ma vije bet lakaet penn-ouzh-penn gant e
damallerien ha m'en dije bet an aotre d'en em zifenn ouzh an
tamall."
- 17 Evel-se pa voent en em vodet amañ en-dro din, n'am boa kollet tamn
amzer ebet; antronoz ec'h azezis em lezvarn hag e rois urzh da ze-
gas an den.
- 18 Met pa savas e damallerion, ne zeuas ganto hini ebet eus an tamalloù
edon engortoz.
- 19 Netra ken nemet tabutoù o sellout o relijion o devoa a-enep dezhañ,
ha diwar-benn ur Jezuz bennak, un den marv, hag a lavar Paol ez eo
bev.
- 20 Ha me, en entremar gant ur gudenn diwar-benn seurt traoù, a c'hou-
lemas digantañ ha fellout a rae dezhañ mont da Jeruzalem hag eno
bezañ barnet diwar-benn an aferioù-se.
- 21 Met Paol a reas galv evit ma vije miret er prizon da vezañ barnet
gant e Veurdez, an Impalaer, hag em boa gourc'hemennet e virout er
prizon ken na c'hellfen e gas davet Kaesar."

SALM 102 (1-2, 11-12, 19-20ab).

R (19a) : An Aotrou, en Neñvoù, eo stabil e dron.

(pe) : ALLELUIA!

- 1 Bennisig, va ene, an Aotrou
Ha kement a zo ennon, e anv santel.
- 2 Bennisig, va ene, an Aotrou
N'ankoumac'ha ket hini ebet eus e vadoberoù.

- 11 Rak evel m'emañ barr an Neñvoù a-us d'an douar,
Eo kreñv e garantez evit ar re o deus doujañs outañ.
- 12 Keit ha m'emañ Sav-Heol diouzh Kuzh-Heol,
E pella diouzhip hor fazioù.
- 19 An Aotrou, en Neñvoù, eo stabil e dron
Hag e rouantelezh en em led war bep tra.
- 20ab Bennisig an Aotrou, c'hwi, e Aeled,
C'hwi, kalonek ha galloudus, a sent ouzh e urzhioù.

ALLELUIA: (Paj. 95-96).

AVIEL

Jezus o reiñ al lec'h kentañ da Bêr.

+ PENNIAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SAINT YANN (21. 15-19).

- En amzer-se en em ziskouezas Jezus d'e ziskibien ha goude bezañ
debret ganto e lavaras da Simon-Pêr:
15 " Pêr, mab Yann, ha va c'harout a rez muioc'h eget ar re-mañ?"
Respont a reas: " Ya, Aotrou, te 'oar e karan ac'hanout."
Ha Jezus a lavaras dezhañ:
" Boueta va oanet."
- 16 Lavarout a reas dezhañ evit an eil gwech:
" Simon, mab Yann, ha va c'harout a rez?"
- Ya, Aotrou, emezañ, te a oar e karan ac'hanout."
Hag e lavaras dezhañ:
" Mesa va deñved."
- 17 Evit an deirvet gwech e lavaras dezhañ:
" Simon, mab Yann, ha va c'harout a rez?"
Glac'haret e voe Pêr o vezañ m'en devoa lavaret dezhañ evit an
deirvet gwech: " Ha va c'harout a rez?", hag e lavaras dezhañ:
" Aotrou, te a oar pep tra, te a oar e karan ac'hanout."
Jezus a lavaras dezhañ:
" Boueta va deñved!"
- 18 E gwirionez, e gwirionez, me a lavar dit: Pa oas yaouank, e
lakaes da c'houriz da-unan, hag ez aes d'al lec'h a blije dit;
met pa vi aet kozh, ec'h astenni da zaouarn hag un all a lako
dit da c'houriz hag az kaso d'al lec'h n'as po ket c'hoant da
vont."
- 19 Lavarout a reas kement-se da aroueziañ (DA VERKañ) dre be varv
e tlee reiñ gloar da Zoue. Ha goude bezañ lavaret kement-se e
lavaras dezhañ:
" Deus d'an heul!"

WAR AR PROFOU:

Taolit ur sell a drugarez, ni ho ped, Aotrou Doue, war
brofoù ho pobl,
hag evit ma plijint deoc'h,
ra ziskenno ar Spered Santel warnomp da naetaat hor c'halonoù.

PREFAS YAOU-BASK: Gwel. paj. 93.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Yn. 16. 13).

Pa sevic Spered ar Wirionez,
e tesko deoc'h pep gwirionez, eme Hor Salver. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Aotroù Doue, dre ho Sakramant santel e vezomp naetaet ha
maget, plijet ganeoc'h, ni ho ped, p'hoc'h eus permetet dimp e
generout evel bevañs, ober ma roio dimp ar vuhez peurbadus.

- SADORI A-RAOK AR PANTEKOST - (Diouzh ar mintin).

KAN-DIGERIN (Ob. 1. 14) : An diskibien a gendalc'he unanet
er bedenn,
ha ganto e oa ar merc'hed, Mari,
Mamm Jezuz, hag ivez e vreudeur.

KEMPEDENN:

Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotroù Doue,
p'emaomp o klozañ Gouelioù Pask,
da virout en hor buhez hag en hor stumm-bevañ
ar frouezh hon eus kavet enno. Dre Hor Salver Jezuz-Krist, ho
Mab hag hon Aotroù, a vev hag a ren, Doue ganeoc'h ha gant ar
Spered Glan, a-holl-viskoazh da virviken.

LENNADENN 1-añ.

Paol e Roma o prezeg Jezuz-Krist, hag eñ prizoniad.

LENNADENN TERNNET EUS LEVR OBERROU AN EBESTEL (28. 16-20,30-31).

- 16 Pa camp antreet e Roma, e voe aotreet Paol da lojañ en e di e-uman,
gant ur soudard d'e zivall.
- 17 Tri devezh goude-se, e c'halvas d'un emvod pennoù-bras ar Yuzevion.
Pa voent bodet, e lavaras dezho:
" Me, Breudeur, hep n'em bije graet netra a-enep ar bobl pe a-enep
gizioù hon Tadoù, a zo prizoniad; e Jeruzalem ez on bet lakaet etre
daouarn ar Romaned.
- 18 Ar re-mañ o deus va goulennataet, hag a felle dezho va leuskel da
vont dre ma ne gaved ennon torfed ebet o talvezout ar marv.
- 19 Met o vezañ ma'z enebe ar Yuzevion, e voen rediet da ober galv da
Gaezar, met tamm ebet evel p'am bije da zougen klemm a-enep va fobl.
- 20 Setu perak eta em eus goulennet ho kwelout ha komz ganeoc'h; rak
abalamour da esper Israel eo emañ ar chadenn-mañ en-dro din."
- 30 Chom a reas Paol daou vloavezhiañ a-bezh en ul lojeiz feurmet gan-
tañ e-uman. Reiñ a rae degemer da gement hini a zeue d'e gavout,
hag ec'h embanne Rouantelezh Doue hag e teske ar pezh a sell ouzh
31 Jezuz-Krist gant pep frankiz hag hep skoilh ebet.

SALM 10 (5, 6 & 8).

R (8) : An dud reizh a welo ho fas, Aotroù.

(pe) : ALLELUIA!

- 5 An Aotroù en e Dempl Santel,
An Aotroù, en Nañvoù emañ e diron,
E zaoulagad o sellout,
Malvennoù e zaoulagad o furchal e mab-den.
- 6 An Aotroù a furch en hini leal hag en hini fall
Met ouzh an hini a gar ar fallagriez, en deus kasoni,
- 8 Rak leal eo an Aotroù. Al lealded a blij dezhañ
An den reizh (JUST) a welo e fas.

ALLELUIA (Paj. 95-96)

AVIEL

Planedennoù disheñvel Pêr ha Yann.

+ PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT IANN (21. 20-25).

- 20 En amzer-se, Pêr o tistreiñ a welas o tonet war e lerc'h an diskibl
karet gant Jezuz, an hini en devoa e-pad koan, harpet e benn war
vruched Jezuz hag en devoa goulennet:
" Aotroù, piv eo an hini a zo ouzh da werzhañ?"
- 21 Pêr eta ouzh e welout, a lavaras da Jezuz:
" Aotroù, hag hemañ, petra?"
- 22 Ha Jezuz da lavarout dezhañ:
" Ma fell din e chomfe betek ma teuin en-dro, petra a vern dit-te?
Evidout-te, heuilh ac'hanon."
- 23 Diwar-se eta ez eas ar vrud e-touez ar vreudeur ne varvje ket an
diskibl-se. Koulskoude n'en devoa ket lavaret Jezuz da Bêr: " Ne
varvo ket", met "Ma fell din e chomfe betek ma teuin en-dro, petra
a vern dit-te?"
- 24 Henezh eo an diskibl a ro testeni eus an traoù-se hag en deus o
skrivet, ha gouzout a reomp ez eo gwirion e desteni.
- 25 Bez'ez eus c'hoazh kalz a traoù all hag a zo bet graet gant Jezuz,
ha ma vijent danevellet hini hag hini, ne c'hellje ket ar bed, a
gav din, dere'hel al levrioù a vije skrivet.

WAR AR PROFOU:

Ni ho ped, Aotroù Doue,
lakait ho Spered Santel da ziskenn en hor speredoù
evit ma vimp e stad da lidañ ar misterioù santel-mañ,
pa'z eo Eñ E-uman ar Pardon eus ar pec'hedoù.

PREFAS YAOU-BASK: Gwel. paj. 93.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Yn. 16. 14).

Ar Spered Santel, hennezh a roio gloar din-me, rak eus ar
pezh a zo din e resevo hag hen roio deoc'h da anaout, eme Hor
Salver. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Selaouit gant madelezh hor pedennoù, Aotroù Doue:
evel m'hon eus resevet Sakramantoù al Lezenn Nevez e-lec'h
Sakramantoù al Lezenn Gozh,
grit dimp delezel pep tra gozh evit kaout ur vuhez nevez en
hor c'hreiz,
gant eneoù santelaet.

=====

= PANTEKOST: SADORI DA NOZ =

=====

An oferenn-mañ a vez lavaret derc'hent ar Gouel,
a-raok pe goude ar Gousperoù Kentañ.

KAN-DIGERIÑ (Rom. 5. 5, 10. 11): Karantez Doue a zo bet skuilhet
en hor c'halonoù gant ar Spered
a zo o chom enomp. ALLELUIA!

KEMPEDEHN:

1 Doue hollc'halloudek ha peurbadel,
fellet ez eus bet deoc'h, en ho polontez visterius,
e padfe Mister Pask hanter-kant devezh,
grit eta, daoust ma'z eo dispartiet ar pobloù, m'en em unano
ar yezhoù disheñvel, da vout holl war un dro, hoc'h anv santel.

pe

2 Grit ni ho ped, Doue hollc'halloudek, ma lugermo warnomp
aplannder ho kloar,
ha ma teuo ho sklerijenn da gemerzhañ dre sked ar Spered Santel
kalonoù er re a zo bet ganet a-nevez dre ho kras.

LENNADENNOU: gwelout LEKSIONAL.

WAR AR PROFOU:

Ni ho ped, Aotroù Doue, skuilhit bennozh ho Spered-Glan
war ar profoù-mañ,
evit ma teuo drezo d'an Iliz ar garantez-se hag a lako da
skedif dre ar bed a-bezh gwirionez mister ar silvidigezh.

PREFAS AR PANTEKOST

An Aotroù Doue ganeoc'h! V. Ha gant ho spered!
Savomp hor c'halonoù! V. Troet int war-zu Doue!
Lavaromp bennozh d'an Aotroù hon Doue! V. Just ha santel eo!

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, un
dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer.
Rak evit peurechuiñ Mister Santel Pask, e skuilhit ar Spered-
Glan hiziv, gant largentez, war ar re hoc'h eus unanet gant ho Mab
evit ober ganto ho pugale.

Hag ar Spered-Glan eo a roas d'an holl bobloù e penn-kentañ an
Iliz, an anaoudegezh eus ar gwir Doue,
hag a unanas ar yezhoù disheñvel d'o lakaat da anzav an hevelep feiz.

Setu perak e trid ar bed a-bezh en ur mor a levenez,
hag holl Speredoù galloudus an Heñved,
a gan meuleudi d'ho kloar en ur lavarout da viken:

SANTEL!...

PA LAVARER AR BEDEHN-VEUR 1, EZ EUS UR C'H-COMMUNICANTES A-RATOZH.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Yn. 7. 37).

D'an deiz diwezhañ eus ar Gouel en em zalc'he Jezus en e sav,
hag e youc'he en ur lavarout: " Piv bennak en deus sec'hed, ra zeuio
d'am c'haout ha ra evo. " ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Grit, Aotroù Doue, ma vo talvoudus evidomp ar gomunion-mañ,
dimp da vesañ bepred birvidik gant ar Spered-Glan ho poa skuilhet
en un doare burzhudus war hoc'h Ebestel.

=====

= SUL AR PANTEKOST : war an deiz. =

=====

KAN-DIGERIÑ (Furn. 1. 7) : Spered an Aotroù en deus karget ar
bed-holl,
Eñ hag a zalc'h an holl draoù unanet
asamblez,
a oar kement a vez lavaret. ALLELUIA!

KEMPEDEHN:

Aotroù Doue, dre Vister Gouel ar Pantekost a reomp en deiz-
mañ,
e santelait hoc'h Iliz e pep pobl,
skuilhit eta dre ar bed-holl donezonoù ar Spered-Glan,
hag ar pezh ho poa prizet ober er penn-kentañ eus prezegerezh an
Aviel,
grit anezhañ adarre bremañ e kalonoù an dud fidel.

LENNADENNOU: gwelout LEKSIONAL 2.

Lavarout a reer ar GREDO.

WAR AR PROFOU:

Grit, ni ho ped, Aotrou Doue, ma teuo ar Spered Santel, hervez promesa ho Mab Jezuz, d'hor sklerijennañ mui-ouzh-mui war vister ar sakrifis-mañ eus an oferenn, ha da zigeriñ, gant madelezh, hor c'halonoù da bep gwirionez.

PREFAS: Cwelout pajennoù 112-113.

PA LAVARER AR BEDEMN-VEUR 1, EZ EUS UR C'H-COMMUNICANTES A-RATOZH.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Ob. 2. 4, 11).

Karget e voent holl gant ar Spered-Glan, hag en em lakjont da embann oberoù meur Doue. ALLELUIA!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Aotrou Doue, c'hwi hag a ro d'hoc'h Iliz madoù an Neñv gant largentez, diwallit ar c'hras hoc'h eus roet, evit ma labouro nerzhus ennomp donezon ar Spered Santel hoc'h eus skuilhet en hor c'halonoù, hag evit ma talvezo mui-ouzh-mui d'hor silvidigezh ar bevañs speredel hon eus kemeret.



§ STAGA DEHNIG §

= GOUEL AN DREINDED SANTEL =
=====

KAN-DIGERIÑ

Ra vo benniget Doue an Tad, ha Mab Unganet da Zoue, hag ivez ar Spered-Glan, dre m'en deus diskouezet e drugarez en hor c'heñver.

KEMPEDENI:

Aotrou Doue, Tad hollc'halloudek, c'hwi hoc'h eus degaset er bed, ho Mab, Verb ar Wirionez, hag ar Spered a Santelezh, evit sklerijennañ an dud war vister burzhudus ho puhez, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, pa ziskleriom ar gwir feiz, da rentañ gloar d'an Dreinded Santel, ha da azeuliñ (ADORIN) un Doue hepken leun a c'hloar hag a c'halloud.

WAR AR PROFOU:

Ho pet ar vadelezh, Aotrou Doue, pa bedomp hoc'h anv santel, da santelaat ar profoù a ginnigomp deoc'h evel ho servijerien, ha grit ma teump da vezañ ni ivez, drezo, ur brofadenn beurbadus evidoc'h.

PREFAS AN DREINDED SANTEL.

ANTIFONENN AR GOMUNION (Gal. 4. 6).

O vezañ ma'z oc'h e vugale, Doue en deus degaset Spered e Vab en ho kalonoù hag a youc'h: Abba! Tad!

GOUDE KOMUNIAÑ:

Aotrou Doue, c'hwi hor Mestr hag hon Doue, grit ma talvezo dimp evit hor c'horf hag hon ens ar Gomunion hon eus resevet, hag an akt a feiz a reomp war vister an Dreinded Santel, un Doue hepken e tri Person.

=====

- GOUEL AR SAKRAMANT -
=====

KAN-DIGERIÑ (Salm. 80. 17) : Doue en deus maget e bobl gant flour-gwinizh ha roet o gwalc'h dezho eus mel ar garreg.

KEMPEDENN:

Salver Jezuz, e Sakramant burzhudus an Aoter, hoc'h eus lezet ganimp ar soñj eus ho Pasion, grit dimp eta, ni ho ped, kaout evit mister santel ho Korf hag ho Kwad an doujañs hag ar garantez a zo dleet evit ma c'hallimp kaout perzh bepred er frouezh eus ho silvidigezh. C'hwi a vev hag a ren, Doue gant an Tad hag ar Spered-Glan, a-holl-viskoazh da virviken.

WAR AR PROFOU:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, reiñ d'hoc'h Iliz, donezonoù an unaniezh hag ar peoc'h, a welomp ar sin anezho er profoù kin-niget e sakrifis an oferenñ. Dre H.S.J.K. ho Mab hag hon Aotrou.

PREFAS AR SAKRAMANT:

ANTIFONENN AR GOMUNION (Yn. 6, 57).

An hini a zebr va C'horf hag a ev va Gwad, a chom ennon ha me ennañ, eme Hor Salver.

GOUDE KOMUNIAÑ:

Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Salver Jezuz, da vezañ leu-niet da viken gant ho kloar a Zoue, en eñrusted ar Baradoz, hon eus an tañva anezhi er bed-mañ pa resevomp ho Korf hag ho Kwad prizius. C'hwi a vev hag a ren a-holl-viskoazh da virviken.

- GOUEL KALON JEZUZ -

KAN-DIGERIN: (Salm 32. 11, 12). : Soñjoù e Galon a bad a rumm da rumm evit tennañ eneoù e dud fidel eus ar marv hag o magañ en amzer ar gernez.

KEMPEDENN:

1 Aotrou Doue hollec'halloudek, gant levezeg emaomp oc'h enoriñ Kalon ho Mab karek, en ur soñjal e madelezhoù dispar e garantez en hor c'heñver, grit eta, ni ho ped, ma veritimp resev eus ar vammenn sakr-se a zonezonoù gresoù dreist-muzul.

pe

2 Aotrou Doue, c'hwi a deurvez, en ho trugarez, lakaat gant largentez e Galon ho Mab gloazet gant hor pec'hedoù, teñzorioù dreist-muzul ho karan-
tez: plijet ganeoc'h, ni ho ped, tra ma tiskouezomp en e geñver testeni doujus hon devoñsion dener, ober ma c'hellimp ivez reiñ dezhañ an digoll hag an dic'haou dleet.

WAR AR PROFOU:

Taolit, ni ho ped, Aotrou Doue, ho selloù war garantez dreist-muzul ho Mab karek, evit ma c'hellomp plijout deoc'h ar sakrifis a ginnigomp war an aoter, ha ma serviñjo da baeañ evit hor pec'hedoù.

PREFAS

E gwirionez, Tad Santel, Doue hollec'halloudek ha peurbadel, un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep an-zer, dre Jezuz-Krist Hor Salver.

Douget gant e garantez vuzhodus ez eo en em ginniget war lein ar Groaz e sakrifis euidomp, hag eus e gostez toulet en deus lezet da redek gwad ha dour evit reiñ buhez da Sakramantoù an Iliz, hag evit ma vefe sachet an holl dud davet e Galon-Sakr digor ha ma teufent gant levezeg da derriñ o sec'hed da vammennoù ar silvidigezh.
Rak-se gant an holl helez hag ar Sent e kanomp gloar deoc'h ha meuleudi en ur lavarout da viken:

SANTEL!

ANTIFONENN AR GOMUNION (Yn. 7. 37-38).

1 Heb en eus sec'hed, eme Hor Salver, ra zeulo d'am c'haout ha ra evo.
An hini a gred ennon, stèriadoù dour bev a strinko eus e greiz.

pe

2 Unan eus ar soudarded gant un taol-gaaf a zigoras dezhañ e gostez, ha kerkent e teuas er-maez gwad ha dour.

GOUDE KOMUNIAÑ:

Aotrou Doue, lakit ar Sakramant-mañ hag a zo Sakramant ar Garantez da donnañ hor c'halonoù gant ho garantez santel, ma vimp sachet bepred etrezek Kalon ho Mab ha ma teskimp hen gwelout en hor braudeur.
Dre H.S.J.K. ho Mab hag hon Aotrou.

+ +
+ + +
+ + +

EMBANNADURIOU BARR-HEOL EVIT AL LIDEREZH

1	Sulioù ar C'horaz (Bloavezh B) ha Sul Fask(.....)	5 Lur
2	Sulioù ha Gouelioù ar Bloavezh B(Dre Offset).....	8 Lur
3	Leksional ar Bloavezh A (dre Offset).....	15 Lur
4	Levr-Oferenn evit ar Pemdeiz(Azvent-Nedelez Epifaniezh(21x27)	9 Lur
5	Levr-Oferenn -id - (Koraz ha Sizhunvezh Santel) (21x27).....	9 Lur 5
6	Levr-Oferenn -id - (Amzer-Bask) (117 paj. 21 x27).....	10 Lur
8	Lennadennoù Pemdeziek (10 Sizhunvezh kentañ ar Bloavezh 2, . ment 10x12, 110 pajenn, roneoskrivet	6 Lur 5
9	Lennadennoù Pemdeziek (11-18vet Sizhunvezh Bloavezh 2).....	6 Lur 5
10	Ritual ar Briedelezh (klok, 50 paj. 21 x 27).....	6 Lur
11	Ritual ar Vadeziant (roneoskrivet 10 x 12).....	2 Lur

An holl embannadurioù-se a zo e gwerzh. Levr-Oferenn Amzer Bask a vo e gwerzh a-benn Sul ar BASION, gallout a reer e rakprenañ diouzhtu.

Goulenn an holl levrioù-se dre chekenn evel-hen:

Revue BARR-HEOL, 22 LANNION C.C.P. 245 453

K.R.P. 245 453 Roazhon (Rennes)

Merkit war gein ho chekenn ar pezh a fell deoc'h hag e viot servijet kerkent, hag erbediñ a reot amzer ar re a ra war-dro ar gelaouenn.

K O U M A N A N T I T D A V A R R - H E O L

ur gelaouenn bev-buhezek moulet dre OFFSET !

K O U M A N A N T - B L O A Z : 2 0 L U R

da gas war-eeun da REVUE BARR-HEOL, evit 4 Niverenn.

=====
moulet eo bet ar stagdenn-mañ da VARR-HEOL, e presbital Bulien, Bro-Drager
22. LANNION

=====
Rener ar Gelaouenn: M. LE CLERC; person Bulien 22 LANNION
Direct. Abbé LE CLERC, recteur de Buhulien 22 LANNION

Périodig enscrit à la Commission P.PP. sous le N° 29.746

+++++++
Evit an dig... et. PEP GWIR MIRET-STRIZH

Imprimatur : 29 a viz DU 1971 ,
H.Gloegen, vikel-Vras, St Brieg
an droidigezh-mañ a zo graet da c'hortoz an droidigezh
ofisiel.

